

**Trede lodenn : Skrivagnerien aet da anaon etre 1992 ha 2000**

**- A -**

**ARDEVEN, Louis Maurice**

*Loeiz Maoris Ardeven*

(An Oriant 13-09-1950/Lannarstêr 29-11-1998)

Kenlabourat a rae gant *Skrid*. Mab e oa da Vaoris Pêr Ardeven ha da Vari Radegonda Primas. Studier e oa e Skol-veur Roazhon, e 1974, pa zarempredas skipailh *Skrid*. Sevel a reas neuze un droidigezh eus Howard P. Lovecraft evit ar gelaouenn-se, adkemeret gant *Al Liamm* goude e varv.

O chom edo en Oriant, dizimez ha dilabour, pa varvas trumm da heul ur gwallzarvoud war an hent-foran e Lannarstêr. 48 vloaz e oa hepken.

**Kenlab.:**

SKRD *An tonkad a gouezhas war Sarnath* (troid.) 5/1974.

LLMM *An tonkad a gouezhas war Sarnath* (troid.) 312/1999/33.

**Dave.:**

LLMM 312/1999/101 ; Ti-kêr an Oriant.

**AUFFRET, Joseph Yves Marie**

*Jozeb Erwan Vari Aofred*

*Erwan ar Menga, Tad kozh Erwan, Yves du Menga*

(Sant Kouloum 12-04-1909/Kankaven 12-11-1998)

Beleg ha skrivagner ganet e Breizh-Uhel, e dud a oa eus Bro-Dreger avat. Mont a reas war e studi e kloerdi bihan Sant-Priest (69800) hag e kloerdi bras Roazhon. Bet beleget e 1937 hag anvet da gure, e Bazeleg-an-Dezerzh (35420), eus 1937 da 1946, hag e Komborn (1946-1951). Bet person Sant-Suleg-ar-C'hoad (35250), eus 1951 da 1953, hag e Kerlean (35430), eus 1953 da 1959, a-raok mont da veleg en eskopti Kemper e-pad daou vloaz. Kuitaat a

reas ar vro neuze evit mont er Broioù-Krec'h e Joué-en-Charnie (72540), e-kichen Le Mans, e-lec'h ma chomas 17 vloaz, eus 1961 da 1978. Eno eo, evelkent, pell diouzh ar vro, tapet gantañ e 60 vloaz, ma krogas da skrivañ *Emziskouezioù ar Werc'hez e Breizh* en ur yezh desket gantañ. Aet e yec'hed war zisteraat e kemeras e retred e 1978 hag ez eas d'un ti-yec'hed e Kankaven. Chom a reas ugent vloaz en ti-se o sevel meur a levr, ken e galleg, ken e brezhoneg, ar re-mañ a voe embannet da gentañ war ar gelaouenn *Imbourc'h*. Dek vloaz ha pevar-ugent e oa an tad Aofred pa varvas e Kankaven. Aet gwan e zaoulagad ne oa ket evit lenn ken en e vloavezhioù diwezhañ. Douaret eo bet e Sant-Kouloum, e barrez c'henidik.

**Levr.:**

*Emziskouezioù ar Werc'hez e Breizh*, Kastellaodren, 1969, in-8, 232p.

*Breuriezh Vreizh 1791*, emb. Nature & Bretagne, 1976, 164p.

*Deskomp esperanteg*, Hor Yezh, 1978; tri levr: *Yezhadur esperantek*, *Geriadur esperantek-brezhonek*, *Geriadur brezhonek-esperantek*.

*Kanevedenn war ar vugale*, IMBO/122-123, 1980, 109p.

*Kevrin ar vuhez diskleriet d'ar re vihan*, IMBO/131, 1980, 52p.

*Yann Fañch kereour Gwidel*, IMBO/138-139, Roazhon, 1981, 64p.; eil moull. Emb Sant Erwan, Rostrenenn, 1990, 81p.

*Priz an daspren*, IMBO/151-153, 1982, 120 p.

*Karantez eo Doue*, Imbourc'h, 1984.

*Kadoudal*, Emb. Barr-Heol, Bulien, 1984.

**Kenlab.:**

BLBR *Ar Werc'hez steredennet* 185/1971/26.

BAHE *Kadoudal e ti an tener-dent* 99-100/1978/45.

IMBO 1980-1984.

**Dave.:**

LLMM 311/1998/595; lizher an ao. Jozef Duré, diellour eskopti Roazhon. (22-06-99).

## - B -

### **BERNIER, Gildas**

*Gweltaz Bernier*

*Gweltaz, Gweltaz ar C'hounaer, Gweltaz Kounaer, Mab Tudy, Izan Vraz (?)*

(Kiberen 30-07-1919/Roazhon 30-11-2000)

Kelenner. Mab ur c'habiten a bellvor. Goude e aotreegezh war al Lizhiri e voe kelenner war an Istor e Lise Dupuy-de-Lôme en Oriant (1947-67) ha, goude-se, e Lise Roazhon.

Kenlabourat a reas gant *Galv* hag *Arvor* e-pad ar brezel dindan an anv Gweltaz ar C'hounaer. Ne skrivas ket kalz e brezhoneg goude-se, met kenderc'hel a reas da studiañ danvez Breizh betek e varv, al lec'hanvadurezh hag ar buhezioù-sent dreist-holl. Pevar bloaz warn-ugent e oa hepken pa c'hounezas an Trec'h Meur e Roazhon e 1943. Abalamour d'e ampartiz war brezhoneg Bro-Wened e voe karget, gant Servijoù Dourlec'hiadurezh ar Verdeadurezh, da gas enklaskoù war lec'hanvadurezh aodoù ar Mor-Bihan.

#### **Levr.:**

(E galleg)

*Toponymie nautique de la Presqu'île de Quiberon*, Annales hydrographiques, 1956.

*Toponymie nautique des îles de Houat et Hoëdic*, Annales hydrographiques, 1958.

*Toponymie nautique du Golfe du Morbihan et de ses abords*, Annales hydrographiques, 1965.

*Toponymie nautique de Belle-Île*, Annales hydrographiques, 1967.

#### **Kenlab.:**

GWAL *Listri diweza ar C'hab Horn* 133/1941/226.

GALV *Yez ha broadelez e Bro-Vreiz* 10-11/1942/167.

ARVO *Porzh-pesketa an Oriant* 128/1943/01 ☒ *Talvoudegezh porzhioù bihan* 167/1944/4 ha 168/1944/4.

LLMM *Diwar-benn kendalc'h Dulenn 1947* 6/1948/35 ☒ *Diwar-benn ar ger « gored »* 12-13/1949/97.

NHAD *Hunvre en dousig* 5/1952/17 ☒ *D'en danue-pried* 5/1952/17.

BRUD *Mammen brehoneg Gwéné* 1/1957/118.

BRUN *Maro Sten Kidna : Brer en dud uvel ha peur* 55/1982/22 ☒ *Penaoz e veze graet servij relijiel an inizi* 176/1994/67.

#### **Dave.:**

FALZ 2/2/1957/17.

### **BIHANNIC, Louis**

*Loeiz Bihanig*

*Yannig Kerleon*

(Landeda 19-07-1924/Sant-Servan 15-08-1998)

Emsaver ganet e bro an aberioù en un tiegezh labourerien-douar. Brezhoneger a-vihanik e oa Loeiz ha ne zekas ar galleg nemet d'e seizh vloaz e skol Landeda. E 1937 ez eas war e studi da Skolaj Sant-Charlez Kemper hag eno eo e tommas ouzh an Emsav. Emezelañ a reas ouzh S.B.B. e 1942 hag e stourmas evit ar strollad-se oc'h enkefiañ gwerzh ar gelaouenn *L'Heure Bretonne* ha skodennoù izili e rannvro betek dibenn ar brezel. Anavezet evit e vennozhioù e oa evel-just hag harzet e voe d'an 21 a viz Du 1944 ha toullbac'het e S.Charlez, e skol gozh. Ne voe dieubet nemet c'hwec'h miz diwezhatoc'h, d'ar c'hentañ a viz Mae 1945.

Ober a reas neuze e goñje er verdeadurezh a-raok mont da Skol ar Mor e Pempoull. Echu e studi e verdeas, evel eilgabiten da gentañ ha, goude-se, evel kabiten er verdeadurezh-kenwerzh, war holl vorioù ar bed. E 1951 e timezas gant Marsella ar Rouz eus Lanniliz. Homañ, avat, a varvas a-daol-trumm e 1960 pa oa-eñv war vor. E dibenn 1962 e reas e soñj adkemer gwreg hag e timezas gant Paola Gruieg eus Gwitalmeze, d'ar 27-09-1962. Divizout a reas neuze klask labour war an douar. E 1965 ez eas da ofiser-porz e Dieppe da gentañ hag e Sant-Maloù e 1972. Adkemer a reas neuze e labour evit an Emsav hag e 1972 ez eas da gelenner gant Skol Ober o reizhañ labourioù ar skolidi e-pad 25 bloaz,

betek fin e vuhez. War-dro 1976 e c'houlennas Ronan Huon, rener *Al Liamm*, digantañ kemer perzh e sekretouriezh ar gelc'hgelaouenn ma oa koumanantet dezhi abaoe 1950. Ober a reas al labour-se c'hoazh e-pad ur pemzek vloaz bennak. Echuiñ a reas skrivañ e eñvorennoù ur miz hanter hepken a-raok e varv.

**Levr.:**

*Eñvorennoù ur c'hi*, An Here, 1989, 76 p.  
*Gant avel ar vuhez*, Embannadurioù al Liamm-an Here, 2000, 159p.

**Kenlab.:**

LLMM *An troc'hañ-tali war aodoù Bro-Leon*, 126/1968/38 ☒ Skouer pobloù 225/1984/210 hag ivez *Helena proferez an dour benniget* 310/1998/423 (dalif).

HYZH *Gerioù dastumet e Landeda* 105/1975/55-63.

**Dave.:**

BREM 204/1998/2 ; LLMM 310/1998/417, 420 ha 481.

**BOUESSEL DU BOURG, Jean Marie****André Pierre*****Yann Vari Andreu Pêr Bouessel du Bourg***

*Herve Landiern, Kervourc'h, Vollandry,*

*Yann Felger, H. Lanngrist.*

(Pariz (75009) 04-12-1924/Nant-Izeg 24-05-1996)

Stourmer breton bet ganet e Pariz en un tiegezh kozh bourc'hizien eus harzoù Breizh gwriziennet, abaoe pevar c'hantved da nebeutañ, etre Gwitreg ha Felger. E dad a voe Kadoriad kentañ al Lez-Engalv ha, goude-se, Kuzulier e Lez-terriñ Nancy. Desavet e voe ar paotr yaouank e lies korn eus Bro-C'hall, en norzh dreist-holl, a-raok anvidigezh e dad e Roazhon er bloavezh 1940. Goude bezañ darempredet meur a skol amañ hag ahont e c'hellas, a-benn an diwezh, ober studioù sirius e Skolaj S. Visant Roazhon. Evel kalz tud o vevañ war harzoù ar vro en em gave Breton penn-kil-ha-troad hag en em dommañ a reas ouzh an Emsav, hep koll amzer, o vont er C'helc'h keltiek e-lec'h ma krogas da zeskiñ

brezhoneg hag, un nebeud amzer goude se, e S.B.B. Pemzek vloaz e oa.

Daremprediñ a reas neuze tud pennañ an Emsav. Gant ur stourmer kozh e oa, o pegañ skritelloù e straedoù Roazhon, e miz Gwengolo 1941, pa voe paket gant un isofiser alaman ha kaset d'ur c'hamp gant ar polis gall. Chom a reas bac'het teir sizhunvezh ennañ evit mantr brasañ e dad. Kejañ a reas neuze gant Célestin Lainé\* ha Yann-Vari Chanteau\* a oa o klask emouestlidi evit al lu brezhon a oa o paouez bezañ stummet ganto. Bras e oa e c'hoant da zont da vezañ ur soudard breton met c'hwitañ a reas an afer a-benn ar fin ha gwell a se evitañ moarvat.

Echu ar brezel ez eas d'ar skol-veur da studiañ ar yezhoniezh ha, peurgetket, ar yezhoù keltiek. Mont a reas kuit goude-se, da labourat er C'hanada hag eno e reas micherioù niverus evel darbarer en ur saverezh-tiez pe goadour. Distro da Vro-C'hall e chomas da gentañ e Pariz hag eno, war-dro 1958, ez eas e darempred gant renerien skouted Bleimor evel Pierre Géraud\* pe an tad Chardronnet. Kenlabourat a reas neuze gant kelaouenn ar skouted, *Sturier Bleimor*. Feal d'an uhelvennad "Feiz ha Breizh" e chomas Bouessel du Bourg e vuhez-pad ha komiser Skouted Europa evit Breizh e vo diwezhatoc'h.

C'hoant a oa gantañ koulskoude da labourat e Breizh ha laouen-tre e voe pa voe anvet da gelenner e S. Frañsez Zavier Gwened da gentañ ha, goude-se e Skolaj an "Asompion" e Roazhon e-lec'h ma kelennas saozneg ha brezhoneg. War un dro e kendalc'has da studiañ er skol-veur o c'hounit ur vestroniezh war ar brezhoneg hag ar yezhoù keltiek all. Diwezhatoc'h e voe degemeret da zoktor er Skol-veur gant un dezenn diwar-benn ar gelaouenn *Arvor* (1985).

D'an 12 a viz eost 1948 e timezas gant Ivona de Raguene de Montmorel. C'hwec'h bugel o devoe, brezhonegerien anezho holl. Klav e oa dija e 1992 pa grouas, gant kalz a galon, ur gevredigezh evit brudañ 200vet deiz-ha-bloaz marv Armañs ar Rouari.

Berzh mat a reas an ober-se ha “Son of the American Revolution” a voe graet anezhañ goude-se.

E-pad bloavezhioù hir e kenlabouras gant ur bern a gelaouennoù evel *L'Avenir*, *Ar Vro-Gwirionez*, *Hor Yezh*, *Imbourc'h*, *Gwenn-ha-Du*, *Carn*, h.a., o skrivañ, e galleg dreist-holl, pennadoù a bep seurt evito. Gant un nerzh kalon dreistordinal e kendalc'has da labourat pa voe gwasket gant ar c'hleñved e-doug mizioù diwezhañ e vuhez.

Marc'heg Urzh S. Yann Jeruzalem e oa-eñ.

**Levr.:**

*Ar gelaouenn Arvor* (tezenn) 1985.

*Geriadur yezh E. ar Barzhig*, levr. 1

HYZH. 92- 93, levr. 2 HYZH. 118/1977,

levr. 3 HYZH.145-146/1982/7-82.

*Dreist d'ar gorventenn*. IMBO.98/1,

Roazhon, 1978, 116 p. liest.

*An Hengoun arzhuriek*. IMBO, Roazhon, 1987.

*Ernest ar Barzhig : E vuhez hag e oberenn*. 1982.

**Kenlab.:**

DALS : (galleg)

LLMM: *Implij ar brezhoneg eeun* 40/1953/58 ☒ *Per, Jakez Yann hag ar re all*, 253/1989/143 (ar skrid embannet war an niv.283, *Alan al Louarn*, a zo bet lakaet e brezhoneg gant E.Tranvouez).

BAHE : *Bed gwirion ar yezhoù* 81/1974/37

☒ *Ernest ar Barzhig* 96/1978/2.

IMBO : *E ser an embannerezh brezhon* 20/1971/202 ☒ *Peseurt heuliadoù a zo bet evit Breizh diwar dispac'h gall 1789?* 229/1989/33

HYZH : *E. ar Barzhig: Notenn diwar-benn e vuhez* 92-93/1974 ☒ *Geriadur yezh ar Barzhig* 145-146/1982/5.

PRED : *Kreizenn imbours'h*

*sturyezhouriezh S.A.D.E.D.: Tonkad* 63 53-54/1963.

STMR : *Marc'h Troia* 4-5/1962/48.

BREZ : *An died Brug* 71/1963/7.

EABG : pennadoù.

BREM *Glaoda Barbotin* 61/1986/5

STRR : *Talvoudegezh bro an Naoned evit Breizh* 8/1958/165 ☒ *Mar fell dit kerzhout betek ennon* 26/1963/47.

AVBR : galleg hepken.

CARN :

**Dave.:**

AVBR 407/1996/3 ; *Dreist d'ar Gorventenn*, 1978; *Testeni, Mémoires d'un militant breton* 1976, 60p.; BPAR2: 1642/9-06-1978; LLMM: 296-97/1996/ 264 ha 275.

**BRETON, Germain**

*Jermen Breton*

*J. ar C'hoadou*

(Sant-Tegoneg 30-07-1907/Sant-Nazer 29-01-2000)

Emsaver. Dont a reas er bed e Sant-Tegoneg e-lec'h ma teskas brezhoneg yac'h. Pa oa o chom e Pariz, ezel eus S.B.B. ha 25 bloaz e reas tro Breizh war-droad, e sac'h war e gein. Eñ an hini e oa an den barrek da grouiñ, e 1936, ar gevredigezh “Herberc’hti Yaouankiz Vreizh”. E mereuri Kernevez Vihan, e Plougoustant, pe e milin Benfoull, e Loperc’hed, perc’hennet gantañ, e veze degemeret an holl gamperien yaouank, paotred ha merc’hed, a rede bro e-pad an hañv. Ne oa ket an dra-se evit plijout d’an holl rak, e miz Meurzh 1940, e voe kavet ar vilin drastet gant tud na blijent ket dezho spered breizhek ar perc’henn. Wardro 1938 e tistroas da Vreizh da chom hag e reas e annez e Naoned. Er gêr-se eo ec’h euredas gant un dimezell Dano da vare Nedeleg, e 1938.

Pa voe kemeret renerezh S.B.B. gant Remont Delaporte\*, d’ar 14-12-1940, e voe anvet J. Breton da verour ar gelaouenn *L'Heure Bretonne* ha mirout a reas ar garg-se betek an niverenn diwezhañ. Tost goude, e 1941, e voe lakaet gant Delaporte e penn departamant al Liger-Izelañ war-lerc’h Erwan Favreul-Ronarc’h lakaet er-maez eus ar strollad. Krouiñ a reas neuze e Naoned, e 1942, gant skoazell e vignon Fred Moyse, ur *C’hevredad Micherourien Vrezhon* a dizhas buan-tre daou c’hant ezel, komunourien gozh en o zouez.

E dibenn ar brezel e klaskas repu, eñ ivez, e Bro-Iwerzhon, en un atant eus kontelezh Cill Mhantáin (Wicklow). D’ur mare zo e

kuitaas ar vro-se evit mont da dTanger gant e bried a oa deuet davetañ. Buan-tre, hep e wreg, e tistroas da Iwerzhon da labourat evel liorzher en un domani e Dún Droma, nepell diouzh Dulenn.

Pa voe sioulet an traoù e Bro-C'hall e yeas da vevañ e Pariz ha, war-dro 1970, e labouras, gant Loeiz Andouard\*, e *Kêr Vreizh*, ti ar Vretoned divroet, war dachenn ar c'hoari-pezh brezhonek. Adsevel a rejont o-daou pezhioù-c'hoari evel *Un den a netra* (1969) gant Roparz Hemon\*, *Ar c'houmoul a dec'h* (1970) bet savet gant A. O. Roberts, pe c'hoazh *Gwreg an toer* (1972) gant Tangi Malmanche\* displeget e Pariz hag e *Ti ar Yaouankiz*, e Sceaux. Pa voe war e leve e tistroas d'ar vro, da Sant-Nazer, e-lec'h ma vevas sioul betek e varv. Douaret eo bet J. Breton e bered ar Feunteun Thuaud e Sant-Nazer.

**Kenlab.:**

SAV *Eun hent d'ar yaouankiz vrezon* 1/1936/14 ☒ *Kemenn* 15/1939/3

BRAT *Aliou ha keleier* 252/1936/2 ☒ *Deut da vrezonega e skol-hanv* 1939, 333/1939/2

IMBO *Emziviz gant Bouessel du Bourg* 217/1988.

**Dave.:**

Deniel *Le mouvement breton*, Pariz, 1976, pp. 267, 286 ; Mordrel *Breiz Atao*, A. Moreau, 1973, pp. 244, 316, 324 ; Fouéré *La maison du Connemara*, Banaleg, 1995, pp. 116, 127 ; BRAT 184/1933/1 ; IMBO 217/1988 ; BRUN 165/2000/8.

- C -

**CAULET, Toussaint René**

*Hollsent Reun Kaoulet*

*Pêr gKernaod...Kartnaod...gKarnaot*

(Landau (Alamagn) 14-12-1925/Pempoull 04-11-2000)

Kelenner war ar vezegiezh. Ganet e oa bet en Alamagn ma oa bet anvet e dad, archer isofiser. Ober a reas e studi e Skolaj Sant-Jozef Lannuon hag eno e teskas brezhoneg

e-unan gant levrioù F. Vallée\* ha R. Hemon\*. Mont a reas goude-se da studiañ ar vezegiezh e Skol-Veur Bariz betek bezañ skolveuriet war-lerc'h studioù hir. Anvet e voe en Ospital Skol-Veur Reims ma kelennas ar vezegiezh a-hed e vuhez. Aet war e leve, e tistroas da Vreizh, da Blaeraneg. Eno e roe kentelioù brezhoneg e Kelc'h Añjela Duval hag en tu-hont da zek vloaz ha tri-ugent e oa pa grogas da sevel pennadoù brezhonek, dindan an anv Pêr gKernaod. Kenlabourat a reas gant kelaouennoù evel *Al Liamm*, *Al Lanv* pe *Imbourc'h*. 75 vloaz e oa pa varvas en ospital Pempoull. Douaret eo bet e Plaeraneg.

**Kenlab.:**

LLMM *Ar goulenn-dimeziñ* 311/1998/564.

LANV *Al louarn glas* 91/2000/38 ☒ *Garrelied ar pleg-mor* 93/2000/34.

IMBO Pennadoù.

**Dave.:**

LLMM 323/2000/84 ha 90.

**CHANTEAU, Jean-Marie Jacques Raphaël**

*Yann-Vari Jakez Rafael Chanteau*

*Mabinog, Lugan*

(Pariz (75017) 23-11-1920/Sant-Maloù 15-11-1995)

Stourmer. Mab e oa da Alfoñs Marie Chanteau ha da Jenovefa Leontina Renaud. Dont a reas da Vorgad da chom, gant e dud, war-dro 1934 ha mont a reas war e studi e Lise Brest. Eno e oa dija ur bodad mat a vroadelourien hag, en o zouez, Roparz Hemon\* a oa kelenner. Yaouank-tre e oa pa lakaas e anv e S.B.B. Ne oa ket taer awalc'h ar strollad-se evitañ moarvat, rak heuliañ a reas Célestin Lainé\* a heulias, e-kerzh an hañvezh 1937, pa voe krouet gant hemañ ar “gadervenn”, ur strollad-stourm kuzh gourdonet start gant e ziazezer. E miz Du 1943, pa voe savet “Bezen Perrot”, e labouras strizh gant ar breudeur Lainé, daoust dezhañ bezañ germangasaour war a hañval. Eiler Lainé e voe ha karget gantañ da duta evit al “lu brezon”. Pa droas an avel

e tec'has war-zu Bro-Alamagn rak donedigezh ar Re Gevredet met, war hon eus klevet, en dije kuitaet ar steudad-kirri e Nancy.

Kondaonet e voe d'ar marv dre zesfailh d'ar 4 a viz Gwengolo 1945, gant lez-varn Roazhon. Edo repuget e Neuilly e ti ur breutaer eus e vignoned, an Ao. Paol Arnal. Anavezet e voe d'ar 25-09-1951 ha harzet gant ar polis. War-lerc'h un enklask start e voe barnet adarre ha kondaonet, ar wech-se, da ugent vloaz galeoù. Ouzhpenn-se e voe difennet outañ bevañ e Breizh e-pad ugent vloaz, hag e holl vadoù a voe skrapet gant ar Stad-C'hall.

Ne chomas en toull nemet un nebeud bloavezhioù ha, goude-se, ez eas da Bariz da chom e-lec'h ma savas un embregerezh da aozañ rikou danterien. Pa gemeras Fant Rozeg (Meavenn) renerez ar gelaouenn *Ar Vro*, e 1966, war-lerc'h Per Denez, e skrivas Chanteau un nebeud pennadoù e galleg warni dindan anv-pluenn Lugan. Distreiñ a reas da Vreizh war-dro 1980, da Galanel da gentañ ha, tost goude, da Sant-Maloù e-lec'h ma chomas betek e varv.

**Kenlab.:**

GWAL: *Lu ar Gelted a-hed ar c'hantvedoù* 156-57/1943/85.

**CHAPEL, Jean**

*Yann Chapel*

(Plougastell-Daoulaz 04-12-1912/ Naoned 23-03-1997)

Tad jezuist ha misioner. Ober a reas e studi e Skolaj Itron-Varia ar Sikour Vat, e Brest, eus 1923 betek 1930 ha gounit a reas eno div vachelouriezh, an hini gentañ war ar brederouriezh hag an eil war ar jedoniezh-diazez.

Er bloavezh 1930 ez eas da Laval en un ti-nevezidi renet gant ar jezuisted e-lec'h ma reas ar studioù boas en ur vezañ e-pad ur mare evezhier e Skolaj Sant-Frañsez-Zavier e Gwened. Chom a reas er skolaj-se betek 1943 nemet pa voe engalvet en eil R.I.C. (Rejimant Troadeien Drevadennel) e 1939-40. War an talbenn e oa pa gasas *Hunvre ar*

*gedour breizat* d'ar gelaouenn *Feiz ha Breiz*.

Bet beleget e Lyon, d'ar 24-08-1943 ha, goude un "trede bloavezh" e Paray-Le-Monial, e voe kaset da visioniñ e Breizh e 1946. Ur brezhoneger a zoare e oa an tad Chapel ha tremen a reas, koulz lavaret, e holl vloavezhioù belegiezh e Breizh, evel misioner o prezeg retredoù evit an dud evel evit ar veleien, o chom e Kemper ha goude-se e Brest pa voe serret Ti Roz Avel.

E 1981, en e 69 bloaz, en em dennas e Karmel Brest met eno e voe aluzener strollad kristen ar retredidi daoust d'e yec'hed o vont da fallaat diwar goust ar berralan.

Ret e voe dezhañ, e 1991, mont da Naoned da di ar Jezusted, straed Dugommier, hag eno eo e varvas gant ur reuziad kreñvoc'h eget ar re all en nozvezh etre an 22 hag an 23 a viz Meurzh 1997. Mignon feal ha skoazeller ar brezhoneg a chomas an tad Chapel e vuhez-pad.

**Kenlab.:**

FHAB : *Hunvre ar gedour breizat e noz* Pask 5-6/1940/155

BAHE : *Prezegenn en iliz-veur Landreger* 32/1962/9.

**Dave.:**

SREL Kemper Ebrel 1997 ; MILE 44/1997/8 ; LLMM 301/1997/206.

**CHARBONNIER [de Sireuil], Geneviève Marie Louise Sophie**

*Genovefa, Mari, Loeiza Sofia*, pried Jakez Moreau de Bellaing

*Soaz Kervahe ; Herve Huiban ; Yann Tremeur.*

(Karaez 19-09-1909/Pabu /Gwengamp 16-04-1998)

Emsaverez. Merc'h e oa da Ernest Marselin Yann Vari Charbonnier, un hendraour a silas enni karantez ar vro, ha da Varia-Tereza Sofia Moreau de Bellaing. An anv de Sireuil staget a-wechoù ouzh hini Charbonnier a oa anv ur beleg kozh, eus ur skourr all, ha kemeret ent-tidel gant darn

eus an tiegezh Charbonnier. Dilezet e voe an anv-se gant tad Vefa de Bellaing.

Mont a reas war he studi da Skol gristen Gemper ha, goude-se, da Skol-sonerezh Naoned e-lec'h ma tapas kaout ur priz violoñs. En iliz Kerglof, tost da Garaez, e timezas d'ar 15-10-1929 gant he c'henderv Jakez Moreau de Bellaing hag ez eas an daou bried da Wengamp da chom. A-hed he buhez e labouras Vefa de Bellaing evit Breizh. Deskiñ a reas brezhoneg er bloavezhioù tregont ha yaouank-tre e oa pa emezelas ouzh SBB. Hi an hini eo a dreuzas diwallerien niverus an urzh, e 1938, evit sailhañ war gwetur Prezidant ar Republik, Albert Lebrun, a oa o weladenniñ Sant-Brieg, en amboaz reiñ d'an den pennfollet, ur skrid-goulenn a c'houlenne e vije aotreet kelenn ar brezhoneg. Er bloaz-se e rae ivez war-dro Kelc'h Keltiek Gwengamp ha daou vloaz diwezhatoc'h, e-kerzh ar brezel, e sikouras ar baotred Kaousin, Ronan\* hag Herri, evit ober war-dro *O lo lê!* ur gelaouenn skeudennaouet brav, savet evit ar vugale.

Echu ar brezel, a-benn 1948, e krouas, gant Ronan Huon ha Langleiz\*, *Kamp Etrekeltiek ar Vrezhonegerien* hag, e-pad un tregont bloavezh bennak, pep hañv, e renas ar c'hamp-se a strolle evel-se un niver bras a dud o tont eus an holl vroioù keltiek. D'ar mare-se eo ivez e teuas da da Sant-Brieg da vevañ e-lec'h ma labouras war-dro Ul levraoueg evit an holl. E 1962 e krouas e Sant-Brieg, gant mignoned all, ur greizenn sevenadurel vreizhek, *Oaled AbHerve*, hag e-pad ouzhpenn tregont vloaz e kemeras perzh e buhez ar gevredigezh-se.

Bet eo bet c'hoazh Vefa de Bellaing prezidantez *Kuzul ar Brezhoneg*, e 1968, war-lerc'h Klerg\*, hag e 1971, pa voe re uhel evit Marc'harid Gourlaouen\* niver skolidi *Skol Ober* ez asantas diouzhtu sikour anezhi en ur zifaziañ diehan labourioù dre lizher ar skolidi.

Ur vaouez ouziet-tre e oa Vefa de Bellaing. Kenlabourat a reas gant meur a gelaouenn evel *Al Liamm*, *Ar Bed Keltiek*, *Armor Magazine* hag all, o sevel evito barzhonegoù, kontadennoù hag ivez kalz a

bennadoù e-keñver al lennegezh ken brezhonek ken estren pe diwar-benn sonaozourien evel Paol Ladmirault, Gi Roparz, Paol ar Flemm, Sibelius, hag all.

Evit an holl labour-se e voe roet dezhi Kolier an Erminig d'an 18-03-1988 e Roazhon. Ne oa ket echu ganti labourat koulskoude rak, e 1991, e voe embannet, e galleg siwazh, ur *Geriadur ar sonaozourien e Breizh*, ul levr dibar a c'houlennas dezhi meur a vloavezhriad enklask.

Mont a reas, war-dro 1995, da Wengamp da chom gant he mab hag en ospital ar gêr-se e varvas d'he 89 bloaz. Douaret eo e bered Kerglof.

#### **Kenlab :**

ABKE : *Sonerezh Paol ar Flem 5/1959/53*  
 ☒ *20vet kamp etrekeltiek ar vrezhonegerien " 105/1967/255.*

HYZH : *Stad ar yezh e Kanton Gwengamp hag en tro-war-droioù 21/1959/3.*

LLMM: *Lennegezh Bro-Japan 86/1961 /181* ☒ *Yann Langlais 266/1991/ 205.*

AMGZ: pennadoù sinet *Hervé Huiban*.

PRED : *Tonkad 64 58/1964/74p.*

#### **Dave.:**

*Actualités culturelles de Bretagne 1/Genver 1992/1 ha 2/1988/4 ; displegadenn Gw. ar Menn en iliz Kerglof 18-04-1998 ; BREM 200/1998/6 ha 7.*

### **CHEVALIER, René**

#### **Ronan Chevalier**

*Ronan C'houerou ; Ren' Skeren*

(Pariz 25-02-1925/Pleuveur-Bodoù 21-06-1996)

Emsaver ha skrivagner. Dont a reas er bed e Pariz ma oa e dad o labourat, ur martolod kozh eus Pleuveur-Bodoù, gant *Gaz de France*. E vamm a oa eus Priel.

D'e bevarzek vloaz e krogas da zeskiñ micher junter-houarn, gant bravigourien eus karter ar Marais e Pariz, betek dont da vezañ ur mailh war ar vicher-se. Un emzeskad gwirion eo bet ivez. Klask a reas atav astenn e anaoudegezh eus ar sevenadur ar vro, en ur studiañ don ar yezh lennegel da skouer, tra ma franke war un dro e selloù

war ar bed. E-pad ar brezel e teskas saozneg hag alamaneg hag e tarempredas kalz al lenndioù, ar mirdioù hag ar salioù-sinema. Tommañ a reas ivez ouzh paotred an Emsav ha dedennet e voe ur pennadig gant c'hoant engouestlañ gant al lu brezhon. Ne chomas ket pell gant ar mennozh-se pa ouezas e vefe ret dezhañ gwiskañ al lifre alaman. Diouzhtu e nac'has groñs mont pelloc'h rak un den "a-gleiz", sokialour hag enepfaskour e chomas e vuhez-pad. Kuzhat a reas a-benn chom hep mont d'an STO. Er bloavezh 1945<sup>e</sup> yeas da labourat war e vicher wirion. Eno e kejas ivez Bretoned yaouank o klask adsevel an Emsav dibennet hag, hep termal, e skrivas ur pennad diwar-benn Bro-Iwerzhon evit niverenn gentañ *Al Liamm* bet krouet gant Andreu Latimier e Pariz.

D'an daou a viz Mezheven 1951 e timezas e Saint-Martin-du-Tertre (95270) gant Mona (Simone) Kiger eus Skrigneg. Er bloavezh 1962 e fellas dezhañ, evel kalz a Vretoned eus Pariz eus ar mare-se, distreiñ da Vreizh e-lec'h ma oa ur vro da adsevel. Ober a reas e annez er C'hleger e Pleuveur-Bodoù hag en em ziazezas eno o labourat bepred evit labouradegoù bravigerezh eus rannvro Bariz.

War un dro e stourmas evit ar vro. Dilennet da guzulier-kêr e voe e 1963 hag addilennet e 1976. Lakaat a reas e anv en UDB e 1966 ha karget e voe d' ober war-dro *Pobl Vreizh* e deroù ar gelaouenn. Ne chomas ket pell gant al labour-se koulskoude rak ne blije ket dezhañ bezañ rediet da dreiñ ger-ha-ger *Le Peuple Breton* kelaouenn "ofisiel" ar strollad moulllet e galleg.

E 1973 e rankas dilezel e vicher a-gent ha kavout a reas ul labour gwall denn en ul labouradeg pellgomz e Lannuon.

E-kerz e vloavezhioù diwezhañ dreist-holl e kenlabouras gant kelaouennoù brezhonek evel *Al Liamm* pe *Al Lanv* o kas dezho troidigezhioù Prévert, Miller pe O'Flaherty. Unnek vloaz ha tri-ugent e oa pa varvas.

#### **Kenlab.:**

LLMM *An Arz iwerzonek* 1/1946/19 ☒  
*Diaes Irae* 258/1990/29.

PVZH *Pennad-kaoz gant Michel Kravtsov pesketaer e Landrelleg* 42/1973/4 ☒ *Pa nij ar gaouenn* 58/1974/7.

GEVNIDENN *Troid. J.Prévert*, 1973.

DHUN *An amzer gollet* 68/1977/18 ☒  
*Bezit dichal* ha *Fiesta* 70/1977/18.

TREG *barzhonegoù* 1983 ☒ 1985.

LANV *Ar mousc'hoarzh e traoñ ar skeul* 49-50/1989/80. ☒ *Ar c'hozh den drouk* 74/1995/39.

Evit ar skinwel *Diaes Irae* (1985) ☒

*Niniaw* (1988)

#### **Dave.:**

AVBR 116/1965/1; LLMM 296-97/1996/276; LANV 78/1996/21; TREG 29-06-1996.

### **COULOUARN, André**

#### **Andreu Koulouarn**

*Abchouchenn - D(reo) Mablern - Ab Issiklet - Ab O'Minapl*

(Kallag 30-12-1912/Porzh-Lae 14-04-1992)

Kelenner hag emsaver. Mab da Yann-Vari Koulouarn, eus Pluskelleg ha da Vari ar C'hamm, eus Kallag. Tapet e vachelour gantañ ez eas war ar studi saozneg ha tapout a reas e aotreegezh hag e desteni da gelenn ar studioù uhel (CAPES). Mont a reas neuze da Bariz ha skoazell a roas da Strollad ar Vrezhonegerien (1936) ha d'e gelaouenn SAV, betek an niverenn ziwezhañ (1944), o skrivañ eviti pennadoù farsus alies. War un dro e kelennas ar brezhoneg e Ker Vreizh, ti ar Vretoned lec'hiet straed St-Placide.

D'an 08-02-1937, e Brest S.Mark, e timezas gant Anna-Vari Rozeg, c'hoar ar skrivagnerez Frañseza Rozeg (MEAVENN). E-pad ar brezel e lakaas e anv e S.B.B. hag ez eilas e vignon Alberzh Gwilhoù\* d' ober war-dro Kevrenn ar Vretoned divroet.

Echu ar brezel ez eas da gelenner war ar saozneg e Lise Coutances (50200) ha kentelioù brezhoneg a roas c'hoazh d'ar Vretoned o chom er gêr-se. Sevel a reas ivez barzhonegoù ha traoù all embannet gant Emgleo Breiz.



Kemer a reas e retred e Roazhon, straed ar Moneiz, hag e varvas en e genkiz e Porzh-Lae (er Gerveur). Douaret eo e Roazhon.

**Levr :**

*Rimou ha soniou*, emb. Brud Nevez, Brest, 1989, 142p.

**Kenlab.:**

SAV : *Yaouankiz* 2/1936/17 ☒ *Kezeg Elberfeld* 31/1944/69.

ARVO: *Ar Vretoned e Lotegaron* 11/1941/4 ☒ *Gouel Sant Erwan* 73/1942/3

BLBR : *Kosvoulterien* 91/1956/18

BRUD: *Mintin Hañv* 7/1959/33 ☒ *Davedout* 43-44/1973/47.

BRUN: *Keuz* 80/1984/3 ☒ *Ghetto Milizac* 108/1987/31.

**Dave.:**

Abeozen, p.141; Mordrel, *Breiz Atao*, p.222; Frelaut, *Les Nationalistes Bretons*, p.176; LLMM 272/1992/247

## - F -

### **FALC'HUN, Jean-François,Marie Yann Frañsez Mari Falc'hun**

*Falc'h ar Prad*

(Ar Vourc'h-Wenn 17-11-1913/Brest 26-02-1999)

Beleg ha rener kelaouenn. Mab da Yann Falc'hun ha da Vari-Janed Anna Kalvez. Mont a reas da Gloerdi bras Kemper ha beleget e voe d'an 2 a viz Ebrel 1938. Da zistro-skol 1938 e voe anvet da gelenner e Skolaj Sant-Frañsez Lesneven ha, bloaz goude, e Kloerdi bras Kemper. War-lerc'h drouklazh Yann-Vari Perrot, e 1943, e krogas da genlabourat gant *Feiz ha Breiz* hag *Ar Vuhez Kristen*. Goude ar brezel, e miz Mae 1948, e voe fiziet ennañ renerezh *Kroaz Breiz*, ur gelaouenn relijiel nevez, met sammet e oa gant re a labour hag, e miz Here 1950 e lezas e garg gant Laorañs Bleuñvenn. En hevelep miz e voe anvet da noter an eskopti ha, tri bloaz diwezhatoc'h, chaloni a enor (miz Du 1953).

Goude-se e voe anvet da berson, lerc'h-ouzh-lerc'h, e Gwitevede (1955), e Lesneven (1958) hag, evit echuiñ, e Kastell-

Paol (1967). Dont a reas da vevañ da Zaoulaz e miz Mezheven 1970, da Zirinonn e 1982 hag, a-benn ar fin, da di Keraodren, da Vrest, ma varvas en e 86 vloaz.

**Kenlab.:**

FHAB *An enklask araok ar briedelez* 3-4/1944/42.

VUHZ *Nebeutoc'h a gaoz, muioc'h a labour* 4/1942/77 ☒ *Jakez morzolic, e zaoud hag e amezeien* 4/1944/117

KROB *Da voulc'ha an ero nevez* 1/1948/2 ☒ *Bleun-Brug Sent Breiz* 28-29/1950/4.

**Dave.:**

S.R. Kemper, miz Meurzh 1999.

### **FAVÉ, Louis**

*Loeiz Fave*

*Loeiz ar Pagan*

(Ploueskad 19-04-1922/ Gwikar 11-04-1996)

Kenlabourer *Brud Nevez*. Da drizek vloaz e voe kaset da skol gristen Koad an Doc'h a oa o paouez digeriñ e Lanrodeg. Gant daou baotr all eus luskad kentañ ar skol-se ez eas da Gloerdi bras Kemper. Goude bezañ bet beleget, d'an 29-06-1948, e voe lakaet da gure, lerc'h-ouzh-lerc'h e Lanniliz (1948), e Landivizio (1959), e S. Jozeb ar Piler ruz, e Brest (1963). E pep lec'h e reas war-dro bugale ar patronajoù. Bet anvet da aluzener Skol labour-douar an Nivod, e Lopereg, a-raok bezañ lakaet, a-benn ar fin, e penn ur barrez, hini Enez-Eusa (1973) gant hini Molenez ouzhpenn-se, adalek 1983. Chom a reas daouzek vloaz en inizi. Bet anvet da berson Gwikar, e 1985, hag e varvas a-daol-trumm eno.

Kenlabourat a reas Loeiz Fave gant lies kelaouenn o kas dezho, bep bloaz ur varzhoneg savet da geñver gouelioù Nedeleg pe ar bloaz nevez.

**Levr :**

*Bloavez mad 1968-1989* (divyezhek) e ti Cloitre, S. Tonan, 1989, 56p., 210x129.

**Kenlab :**

KROB : *Gwerz Nedeleg* 9/1948/5.

BLBR : *Nedeleg laouen ha Bloavez Mad* 220/1979/15.

BRUN *Bloavez mad* 90/1985/11 ☒  
*Bloavez mad* 191/1996/3

**Dave.:**

SREL Kemper ebrel 1996/248 ha mezheven  
 1996/283-84 ; BRUN 195/1996

**FAVÉ, Vincent**

*Visant FAVE*

*Ykam*

(Kleder 20-02-1902/Kastell-Paol 18-04-1997)

Den a iliz. Daouzek bugel a oa er familh. Ober a reas e studi e Skolaj ar C'hreiz-kêr, e Kastell-Paol hag, e 1920, ez eas da Gloerdi bras Kemper betek e velegiezh (22-07-1925).

Anvet e voe diouzhtu da gure e Skaer e-lec'h ma'z eas davet ar yaouankiz o krouiñ "Gourennerien Skaer". Bet ivez e-touez ar regentañ o sevel ur gevrenn eus an YKAM (Yaouankizoù Kristen ar Maeziou) da lavarout eo JAC e galleg.

Er bloaz 1935 e voe lakaet da skoazellañ ar chaloni **Gwazgwenn** e penn oberoù kristen an eskopti. Sevel a reas neuze an YKAM evit mat ha, war un dro, ur c'halz a levrioùigoù a bep seurt evit tud yaouank diwar ar maez. Bez' e oa chaloni a enor abaoe 1936 pa voe galvet da soudard e 1939. Ar brezel a reas evel aluzener 248<sup>vet</sup> hag 337<sup>vet</sup> rejimant troadegiezh hag ar groaz a vrezel e voe roet dezhañ evit e galonegezh.

Kuitaat a reas YKAM e 1946 evit bezañ person kanton Lesneven ha, tri bloaz diwezhatoc'h, person Kastell-Paol. Eñ an hini eo a voe anvet da aluzener ar Bleuñ-Brug gant an Ao. Fauvel, eskob Kemper, war-lerc'h drouklazh Y-V. Perrot\* e 1943. Pa voe adsavet ar gevredigezh-se gant an doktor Liberal, e Kastell-Paol er bloaz 1948, e reas Visant Fave\* ur brezegenn a reas berzh da enoriñ koun e ziaraoger.

Reiñ a reas d'ar Bleuñ-Brug un diazez start en ur skoazellañ labour sekretour ar gevredigezh evit diazezas lec'h ar brezhoneg er skolioù kristen.

E 1956 e voe anvet da vikel vras a-raok bezañ sakret eskob Kemper karget da skorañ an Ao. Fauvel en e holl labourioù (24-02-1958).

Karget e voe an eskob nevez, e-touez traoù all, eus misionoù an eskopti ha, war un dro, eus embann *Liziri Breuriez ar Feiz*, e 1965, war-lerc'h ar chaloni Bleuñvenn\*. Darempredoù a skoulmas atav gant an holl visionerien genidik eus Penn-ar-Bed strewet dre ar bed ha, pa'z ae da weladenniñ anezho e skrive bep gwech ur rentañ-kont eus e veajoù, e brezhoneg bepred, war e gelc'hgelaouenn. 75 vloaz e oa pa gemeras e retred e Kastell-Paol er bloavezh 1977.

Skrivañ a reas kalz neuze e brezhoneg o kenlabourat dreist-holl gant ar gelc'hgelaouenn *Brud Nevez* betek e zeizioù diwezhañ. 98 vloaz e oa pa varvas.

**Levr :**

*War roudou an hader*, 1937

*Eun eurig dirag ar Zakramant*, 1937

*E skol ar Werc'hez Vari*, Emb. YKAM, Moul. str. ar C'hastell, Brest, 1938, in°, 20p.

*An hed e bleun*, 1939

*D'an daoulin evit ar Vro!* 1940, in-8°, 8 p.

*Pedenn an dud diwar ar mêz*, 1940

*Pedomp - Teir oferenn - Hent ar groaz*, Moul. Bro-Gerne, Kemper, 1942, 104 p.

*E servij ar vro*, 1942

*C'hoariomp. Distro ar prizonnier. En em garit...* Moul. Bro-Gerne, Kemper, 1942, 30 p.

*Kanomp*, Moul. Bro-Gerne, Kemper, 1942

*Pedomp*, Moul. Bro-Gerne, Kemper, 1942

*Rozera al labour*, Moul. Bro-Gerne, Kemper, 1942, 16 p.

*Gwazed a zoare*, 1943

*Eur gwaz e rankez dont da veza*, Moul. Bro-Gerne, Kemper, 1943

*Kanomp c'hoaz*, Emb. Y.K.A.M., Moul. Bro-Gerne, Kemper, 1944, 12x15, 1944

*Gloar da Vari*, Emb. Y.K.A.M., Moul. Bro-Gerne, Kemper, 1943, in-8°, 8 p.

*War an daoulin evid ar vro*, 1943

*Gouel ar mammou*, 1943

*War araok*, 1944

*War roudou ar Werc'hez Vari*, Emb. Y.K.A.M., Moul. Bro-Gerne, Kemper, 1944, 20 p.

*An darempredou. Danvez labour evit an haderien, 1944-45*, Moul. Bro-Gerne, Kemper, h.b., (1944), 7 p.

*Daou ha daou. Danvez labour evit ar bloavez 1945-46*, Moul. Bro-Gerne, Kemper, 1945, 48p.

*Karomp hon nesa - Abadenn bedennou war ziviz*, Moul. Bro-Gerne, Kemper, h.b.(1945) in-8°, 16 p.

*Pedenn Yaouankizou Maeziou Breiz da itron Varia ar garantez kaer*, Emb. Y.K.A.M., Moul. Bro-Gerne, Kemper, h.b., (1946), 12 p.

*Hol labour hag hon amzer da zont. Dirak al labour (YKAM Breiz. Danvez labour evit ar bloavez 1946-47)*, Moul. Bro-Gerne, Kemper, 1946, 35 p.

*Hor pardonou*, 1946

*Dre an Aotrou Krist, 1947*

*Kroaz ha levenez*, 1948

*Beilhadeg evit bloaz ar Werc'hez Vari. Itron Varia an holl c'hrasou*, Moul. Bro-Gerne, Kemper, 1949, in-8, 15 p.

*War roudou ar visionerien*, Emb. Skol dre lizer, moul. Mesidou, Brest, 1989, 312 p.

*Santig Du* (galleg gant Fr. Kaer) dourlivadurioù gant YB. Girieg), Presbital Sant-Nouga, 1991, 66 p.

dalif : *Notennou yezadur*, Emb. Brud Nevez, moul. Mesidou, Brest, 1998, 114 p.

#### **Kenlab.:**

FHAB: *Pardon ar gwiniz-hada* 9-10/1941/81 ☒ *Pennad yezadurez* 11-12/1943/371.

VUHZ: *Prezegenn er Folgoad* 1-2/1943/222 ☒ *Distro meur ar bec'herien ouz Doue ha troveni vras ar Werc'hez* 5/1944/140.

KROB *Petra eo ar Bleun-Brug ?* 6/1948/8 ☒ *Beo ha yaouank eo ar Bleun-Brug* 33/1951/3 ha, moarvat, *Gwazed, mouga ha gloaza a rit* 2/1948/6 (sinet Ykam).

BLBR : *Broada ha divroada* 36/1951/4 ☒ *Prezegenn* 179/1969/19.

LZBF : *Eun droiad en Afrik war roudou ar Visionerien* 596/1965/12 ☒ *Ar wagenn froudennuz* 703/1992/9

MILE *An aotrou Yann-Stevan Riou, person Laban* 13/1992/6.

KEBR : *An iliz hag ar yezou bihan* 37/1976.

BRUN *Ar stummou dibersonel e brezoneg* 93/1986/69 ☒ *Lavariou* 201/1997/18

#### **Dave.:**

TBDB 212/1957/1; BLBR 87/1956/golo, 107/1958/4; CLAN 91/1997/99.

### **FLATRÈS, Pierre**

#### **Pêr Flatrez**

(Sant-Yann-Drolimon 13-03-1921/Pariz 18-11-1998)

Kelenour gouiziek bet ganet e Sant-Yann-Drolimon e-lec'h ma oa skolaerien eus e dud. Ober a reas e studi e Lise La Tour d'Auvergne e Kemper hag e Lise Herri IV e Pariz. Goude-se e teuas en-dro d'ar vro da genderc'hel gant studioù uhel e Kevrenn al Lizhiri, e Roazhon. Eno e teuas da vezañ skolveurieg war an douaroniezh. Chom a reas tri bloaz e Kembre hag Iwerzhon, kaset e kefridi gant ar CNRS en amboaz prientiñ e dezenn diwar-benn *Douaroniezh ar peder bro: Iwerzhon, Kembre, Kernev-veur hag enez Vanav*. Degemeret e voe da zoktor war al Lizhiri e 1955 ha moullet e dezenn e galleg, daou vloaz diwezhatoc'h (618 pajenn enni).

Kelenn a reas Pêr Flatres e Skol-Veur Lille e-lec'h ma voe, war un dro, rener an ensavadur douaroniezh, eus 1957 da 1972.

A-geñver e vicher a gelennour e voe c'hoazh prezidant Kuzul-enklask an douaroniezh-war-ar-maez (1965-1975) hag ezel eus meur a gevredigezh skolveuriek all a bep seurt.

Un den oberiant-tre e voe Pêr Flatres a yeas da gelenn pe brezegenniñ en Aod an Olifant, Kameroun, Kanada, Breizh-Veur, Polonia, Danmark, Alamagn hag all. Kemer a reas perzh ivez e kendalc'hioù an Unvaniezh Douaroniel Etrevroadel e Pariz, Londrez, Montréal, Budapest, ha betek Tokyo pe New-Delhi.

Koulskoude ne voe ket ankounac'haet Breizh gantañ. Eilprezidant Kevredigezh

Hendraouriezh Il-ha-Gwilen e voe ur pennadig hag eñ an hini eo a renas, eus Roazhon da Gemper, an emziviz etrevroadel diwar-benn studi ar gweledva war ar maez. Ur brezhoneger mat e oa ivez met diwezhat-tre, pa voe o vevañ war e leve, eo e krogas da skrivañ en e yezh. Sevel a reas neuze ur studiadenn diwar-benn an douar hag an dud e Breizh moulet e 1985 gant ar gelc'hgelaouenn *Studi* hag adembannet dek vloaz diwezhatoc'h gant Emgleo Breiz.

Marc'heg eus ar Strollad a Enor e oa Pêr Flatrez.

**Levr.:**

*Breiz, an douar hag an dud – Eur pezig studi diwar douaroniezh pe jeografiezh Breiz: Leor kenta: Herez Breiz, an Douar hag an dud*, STUD.29, Roazhon, CRDP, 1985,107 p.; eil emb. *Douaroniezh Breiz*, Emgleo Breiz, 1995, 21x15, 160 p.

**Dave.:**

LLMM 234/1986/76 ha 312/1999/101; OUFR 21-11-1998

**FOIX, Gilbert André**

*Jilberzh Andrev Foix*

*Gilles Eskob ; Gour kozh (?)*

(An Alre 04-01-1925/Versailles (78000) 24-07-1999)

Stourmer brezhon. Ober a reas e studi e Lise Gwened. Levezonet e voe gant e vignon bras Kristian ar Part, ur stourmer all eus Roc'h-an-Argoed drouklazhet e miz Mae 1944, hag a-boan e oa en e c'hwezek vloaz p'emezelas ouzh S.B.B (1941). Bloaz goude e teuas da vezañ ezel eus bagadoù-stourm ar strollad renet gant Yann Goulet ha kemer a reas perzh en embregadegoù Gouezeg ha Roc'h-an-Argoed a voe kalet-tre evit ar wazed (1942). Ne gavas ket kalet a-walc'h koulskoude strollad Remon ar Porzh (Delaporte\*) hag e tilezas anezhañ evit heuliañ Neven Henaff (Lainé\*) ha mont d'al Lu Brezhon deuet da vezañ ar Bezen Perrot e miz Kerzu 1943.

Pa welas an Amerikaned o tont e kuitas Roazhon, gant soudarded all eus ar Bezen, d'an 31-07-1944, evit klask repu e Bro-Alamagn, e Tübnigen. Danevellet en deus e vuhez, e-pad ar giladeg-se ha goude dibenn ar brezel, pa veze o klask diflipat diouzh skrapadegoù ar soudarded-polis en eil lodenn eus levr Caerleon *Le rêve fou des soldats de Breiz Atao* dindan an titl "Le soldat maudit". Chom a reas e Bro-Alamagn e-pad bloavezhioù, oc'h ober a bep seurt labourioù bihan, ha kuzhet gant tud ar vro. E-pad an amzer-se, e Bro-C'hall, e voe kondaonet d'ar marv dre zesfailh. Paket e voe a-benn ar fin e Karlsruhe (01-04-1952) ha bac'het e kazarn Reuilly e Pariz. Barnet e voe, kondaonet d'ar galeoù hed e vuhez, ha toullbac'het en Eysse.

Klañv e oa pa voe dieubet ha ranket en doa mont da Nice (06000) da glask ar pare. Ne voe ket oberiant en emsav goude-se warbouez ur pennad bennak savet evit *Al Liamm*. Mervel a reas e Versailles, pell diouzh ar vro, met douaret e voe e Roc'h-an-Argoed.

**Kenlab.:**

LLMM *Ur c'hamalad em boa* 129/1968/264 ☒ *An hent gwenn* 217/1983/141.

**Dave.:**

Caerleon *Le rêve fou des soldats de Breiz Atao*; Le Boterf *La Bretagne dans la guerre* (3<sup>vet</sup> levr p.683); LLMM/316/99/95; ti-kêr Roc'h-an-Argoed.

- G -

**GÉRAUD, Pierre Jean Jules Georges**

*Pêr gKeraod*

*Perig ; Gaeso-Vlatos ; Gurvan Sournoc*

(Montauban (82000) 01-07-1917/Saozon-Sevigneg 21-10-1997)

Saver ar skaouted "Bleimor". Diskenn a rae, a-berzh e vamm, Mari Julia Anger, eus ul lignez moullerien vrezhon. E dad-kozh, Jul Ansker, a grouas *Journal de Pontivy* e 1873

hag e dad, Paol Leon Keraod, a oa mouller en Oriant. Rannet e voe e galon pa voe dav dezhañ heuliañ e dud en harlu. An dra-se a voe, moarvat, abeg e garantez evit Breizh. Daouzek vloaz e oa pa'z eas da skaout katolik ha skaout e chomas e vuhez-pad. Kregiñ a reas da studiañ brezhoneg, e-unan, da 18 vloaz, pell diouzh ar vro, betek bezañ barrek da c'hounit an Trec'h Kentañ d'an 20-06-1943. Daoust da-se e skrivas dreist-holl e galleg. War-lerc'h studioù mat war ar Gwir e krogas da labourat e hentoù-houarn rannvro Bariz. Goude-se e voe den a garg en a bep seurt ministrerezhioù e Pariz atav. Gant e wreg Lizig (Lusiana Sournag) hag un nebeud mignoned all evel Herri Kaouisin pe an tad Jozeb Chardronnet, e reas e soñj, e 1946, sevel ur strollad skaouted evit ar Vretoned yaouank, paotred ha merc'hed, harluet e Pariz. Kamp kentañ ar skaouted *Bleimor*, anv roet dezho en enor da Yann-Bêr Kalloc'h (\*Calloc'h), a voe graet war ribl ar stêr Oded, nepell diouzh Kemper, e-kerzh an hañvezh 1946. Kantadoù a Vretoned yaouank a dapas evel-se un deskadurezh vreizhek war an holl dachennoù : studi ar yezh, koroll, sonerezh, c'hoariva, istor, arz, barzhoniezh, hag all. A-hed ar bloavezhioù e vrasa hag e liesa ar strollad dre grouiñ, e-kichen ar skaouted, lazoù Janediged, Bleizi bihan ha, diwezhatoc'h evit ar re vrasañ, telennourien hag ur bagad brudet a sonerien. Krouiñ a reas ivez div gelaouenn skeudennaouet evit e skaouted, *Sked* (1947-1954) da gentañ ha, goude-se, *Sturier Bleimor* (1957-1968) deuet da vezañ e 1967 *Sturier-Scout d'Europe*. An holl draoù-se a voe, evit un niver bras a Vretoned yaouank, ur skol-vuhez wirion. Ne voe ket komprenet atav labour Pêrig Keraod gant skaouted Bro-C'hall, chigardet ar re-mañ gant spered breizhek o c'henvreudeur vreton. Disrann a voe e 1962 gant emzeladur Bleimor ouzh Skaoutelezh Europa. Unan eus pennoù an emsav skaoutse e teuas Pêr Keraod da vezañ e-pad pell amzer c'hoazh. Ne voe ken, koulskoude, eus spered dibar e skaouted adal neuze.

Ur Breizhad eus ar gwellañ a voe Pêr gKeraod. Daoust d'un diouer a boell aozañ e voe, e-pad bloavezhioù hir, ur rener-tud dispar.

**Kenlab.:**

SKED *Sevel Keltia evit Doue* 9/1947/3 ☒

*Burthud Kergoad* 10/1954/338.

STRR *Geriaoueg ar c'hoari* 9/1959/186 ☒

*Yeun ar Gow* 38/1966/32.

BAHE *Lizher* 33/1962/50.

**Dave.:**

*Gazette des Amis de l'orme* 54/1997/8-9;

BREM 195/1997/21; LLMM

305/1997/577.

**GROS, Jules Marcel**

*Jul Marsel ar Groz*

*Ab Alan, Popolskou, J.M.G.*

(Pariz (75005) 02-02-1890/Lannuon 28-12-1992)

Yezhoniour brudet. Ganet e voe en un tiegezh breizhat aet da Bariz da labourat met desavet e voe ar paotrig e Lokmikael-an-Traezh (Bro-Dreger). Dek vloaz ne oa ken p'en em dommas ouzh an emsav o klevout paotred *Ti Kaniri Breiz*, Jaffrennoù\*, Even\*, Bertou\*, Lajat\*, ar Moal\*... o kanañ sonioù brezhonek war leurgêr Lokmikael. Eizh vloaz goude-se, hepken, e oa degemeret gant ar C'hoursez hag Ab Alan e voe graet anezhañ. Drouiz e tlee dont da vezañ diwezhatoc'h.

Ober a reas e studi e Lise Turgot, e Pariz, araok mont da Skol-veur Roazhon da studiañ ar yezhoù estren ha, peurgetket, ar yezhoù keltiek. Eno en doe Anatol ar Braz\* da gelenner ha F. Gourvil\* da gendiskibl. Donezonet-kenañ e oa J. Groz evit deskiñ ar yezhoù ha kalz anezho — 12 pe 13 a-hervez e vez lavaret — a veze komzet akuit gantañ. Kuitaat a reas Roazhon e 1912 evit beajiñ dre Vro-Saoz, Alamagn..., ha pa darzhas ar brezel, e oa-eñ kelenner e Skol vBerlitz, e Poznan (Polonia), e-lec'h ma kelenne an holl yezhoù a veze goulennet digantañ.

Ober a reas ar brezel 1914-18 gant an 41<sup>vet</sup> rejimant troadeien Gwengamp evel kaporal-fourrer ha kemer a reas perzh en emgann

gwadek Neuville-Vitasse (62000). Pa voe krouet *Grenadia*, kannadig ar rejimant, gant ar c'helaouenner Ujen Delahaye, e 1915, e roas pennadoù brezhonek dezhañ na oant ket degemeret mat atav gant pennadurezhioù an Arme.

Dimeziñ a reas e Tredraezh, pa voe disoudardet, gant Ujenia Bazil, merc'h renerez Skol publik Lokemo (25-09-1920). Er mare-se eo e kenlabouras ar muiañ gant ar c'helaouennoù brezhonek o skrivañ war *Feiz ha Breiz, Buhez Breiz...* pe o treiñ sonioù iwerzhonat evit *Breiz Atao*. Un nebeud goude ez eas da Versailles da c'hounit e vara, evel rener kenwerzhel ul livadennerzh.

Da Lokemo e teuas da vevañ war e leve el lec'h ma ouestlas e holl amzer d'ul labour eus ar re bouezusañ war ar brezhoneg komzet, ul labour boulc'het gantañ a-raok 1914 ha ne vo embannet nemet un hanter fantved diwezhatoc'h.

Kozh-Noe e oa Jul ar Groz pa varvas, d'e 102 vloaz, goude bezañ bevet e vuhez-pad evel un ekologour gwirion, o tebriñ boued yac'h hag o pleustriñ war ar yoga betek ar fin.

#### Levr.:

*Le trésor du breton parlé*, (levr kentañ), 327p., liesskrivet; eil embann, *Éléments de stylistique trégorroise, le langage figuré*, Ti-moul. Prudhomme, S.Brieg, 1970, in-16, 254p.

*Le trésor du breton parlé, Dictionnaire breton-français des expressions figurées*, Ti-moul. Prudhomme, S.Brieg, 1970, in-16, 560p.; eil embann, 1977, 3e emb. 1989.

*Le trésor du breton parlé, Le style populaire*, emb. Barr-Heol, stal-levrioù Giraudon, Lannuon, 1974, in-16, 400p.; eil emb., Emgleo-Breiz, Brest, ti-moul. Delroisse, Olonne/Mer (85340), 1984, 661p.

*Le trésor du breton parlé* (4e levr), Emb. Skol Vreizh, Impram, Lannuon, 1989, 151p.

*Dictionnaire français-breton des expressions figurées*, Emgleo Breiz-Brud Nevez, Brest, 2 levr, 1993, 647 ha 658 p.

#### Kenlab. :

BOBL *An Allmanted hag ar C'hallaoued* 340/1911/1

KZV *Eur plac'h zizorc'hennet* 347/1912/1  
 ☒ *Ar wirione diwar-benn an dispac'h en Iwerzon*. 368/1920/1

GRENADIA pennadoù, 191☒ 1918

BUBR *Dek devez e Verdun* 1/1919/18 ☒ 9/1919/242.

AVRG *Hon beleien er brezel* 4/1919/1

MVRO *War sao Bretoned !* 4/1919/1 ☒  
*Evit an Arvor* 54/1920/1

FHAB *Chapeled ar plac'h varo, kontaden evit gouel an Holl-Zent* (troet diwar galleg Duchauchix\*) 11/1921/289-297.

BRAT *The dawning of the day* (gwerz Iwerzhon) 38/1922/16 ☒ *To ladies's eyes* (son Iwerzhon) 38/1922/164

YVVB *Prezegenn displeget dirak bez Lemenik gant Drouiz Ab Alan* 11/1930/3.

BREI *Divinadennou* 233/1931/2

OALD *Testeni eur potrik dek vloaz* 66/1938/295.

EABG *An hini 'n eus youl ebet n'eo ket met un torch listri* 223-224/1985/3.

#### Dave.:

Delahaye *40 ans de journalisme*, Roazhon, 1946, p.59-61; CTMB 5/1927/570; MVRO 56/1920/2; PLNN 15/1983/2; LLMM 219-220/1983/302; D. Giraudon *ArMen*, niv.39.

#### GUILCHER, André Julien

##### *Andrev Juluan Gwilcher*

*Lan Devenneg, Yann, Nouel Guardon, Mab bihan Yann ar fakteur, Paotr an Enez.* (Brest 19-05-1913/Brest 04-12-1993)

Kelenour gouiziek, mab da Juluan Pêr Gwilcher ha da Vatilda Vari Thoreux. E familh a oa genidik eus Enez-Sun. Ober a reas e studi e Lise Brest ha, moarvat, e Pariz. Adkavout a reas Lise Brest e 1936 evel kelenner skolveuriek war an Istor hag an Douaroniezh. Ne guitaas al Lise nemet div wech. Ar wech kentañ evit ober e goñje evel ofiser en 2<sup>vet</sup> RTT (Rejimant Troadegiezh an Trevadennoù) hag an eil, er bloavezh 1939, evit mont d'ar brezel. Ar groaz-vrezel 1939-45 a voe roet dezhañ evit bezañ bet gloazet ent-grevus. Ur

brezhoneger ampart-tre e oa ha pennadoù skiantel a roas d'ar c'helaouennoù brezhonek adalek 1941 betek e vloavezhioù diwezhañ.

Er bloavezh 1942 ez eas da Naoned da gelenn hag, e 1947, da Skol-veur Nancy. Degemeret da zoktor war al Lizhiri (douaroniezh) e voe gant un dezenn e galleg diwar-benn Torosennadur Breizh ar c'hreisteiz eus pleg-mor Douarnenez betek ar Gwilenn. Adalek 1957 betek 1970 e voe kelenner war an douriaouriezh-mor e Skol ar Sorbonne e Pariz. Ur mailh war ar skiantoù a voe Andrev Gwilcher bet klasker er CNRS, ezel estren an Akademiezh Bro-Velgia, ezel eus Poellgor broadel an Douaroniezh hag eus hini ar Gartouriezh, kevarouezour e Poellgor-uhel an Endro, h.a. Medalenet e oa bet ivez gant Kevredigezh Douaroniezh Pariz...

Er bloavezh 1970, tra dibaot, e voe anvet, war e c'houlenn, da gelenner « emeritus » e Skol-veur Brest, kêr ma reas e studi gentañ. Eno e varvas oadet a bevar-ugent vloaz.

#### Levr.:

*Traoniennoù ha kaniennoù-mor*, Sterenn, Skridoù Breizh, 1943, in-8, 92p.

*Douaroniezh* (brezhoneg gant F.Kervella) SKOL.3, 1955, p.1-23.

#### Kenlab.:

ARVO *Enez Sun* 40/1941/4 ☒ *Stêriadoù-fank ha lampradoù- douar* 122/1943/1

GWAL *Studiadennoù douaroniezh diwar-benn ar parrezioù hag ar c'hêrioù* 152-53/1942/525☒ *An henzanevelloù iwerzhonek* 165/1944/287

SAV *Gerioù ha troioù-lavar implijet e Plouvian* 31/1944/54

TNOG *Talvoudegezh ar brezhoneg krenn* 1/1946/5

LLMM *An anv-lec'h aber e Breizh* 6/1948/62 ☒ *Poloniz ha Rusianed* 216/1983/30.

BLBR *Va beaj e Madagaskar* 74/1954/10

Er bloavezhioù 1951-54 e reas enklaskoù war anvioù-lec'h aodoù Penn-ar-Bed embannet e galleg gant Servijoù Dour-lec'hiadurel ar Verdeadurezh: *Toponymie de la côte bretonne entre Audierne et Camaret*,

Moul. broadel, Pariz, 1950, 88p.; *Toponymie de la côte bretonne entre le Four et l'île Vierge*, Moul. broadel, Pariz, 1952, 62p.; *Toponymie de la rade de Brest et de ses abords*, Moul. broadel, Pariz, 1954, 84p.

#### Dave.:

BRUN 170/1993/56; CIRO 161/1993/63; LLMM 282/1994/70 ha 80; *Annuaire des 10 000 Bretons*; *Gohier Dict. des écrivains*.

### GUILLOU, Albert

#### *Alberzh Gwilhoù*

*Laoudreger*

(Plegad-Gwerann 28-10-1900/Montroulez 23-06-1992)

Emsaver. Mab e oa da Erwan-Vari Gwilhoù, eus Plegad-Gwerann, ha da Vari-Ael-Frañseza Merer, eus Plouezoc'h. Ur wech deuet da vachelour e Skol ar C'hreiz-kêr, e Kastell-Paol, ez eas da Skol al Labour-Stad e Pariz evit dont da vezañ ijinour tredaner. Edo ijinour e Nord Lumière e Pariz, pa grouas ar gelaouenn SAV (Strollad ar Vrezhonegerien) gant Andrev Deniel\* ha Herve Mazhe\*, e miz Mae 1936. Kenlabourat a reas ganti betek ar fin (nevezamzer 1944) ha kentelioù brezhoneg a roas e Kêr-Vreizh, kreizenn ar Vretoned e Pariz.

D'an 31 a viz Here 1940 e voe galvet e Kuzul politikel SBB. gant Raymond Delaporte\* ha lakaet gantañ e penn ar Vretoned divroet. Ne chomas ket a-du, koulskoude, gant politikerezh ar Strollad, re evezhiek ha re fur diouzh e vennozh ha, d'ar 5 a viz Kerzu 1943, e roas e zilez, war un dro gant Marsel Guieysse, penn departamant ar Mor-Bihan, evit heuliañ al linenn galet gant Neven Henaff da rener.

Harzet e voe e deroù ar bloavezh 1944 ha kaset dirak kengor-glanaat Pariz, barnet prestik goude ha didamallet e miz Gouere 1944 a-drugarez d'ul lizher skrivet gant... ar c'homunour Marsel Cachin war c'houlenn R. Kreston\* (hervez O.Mordrel).

Ne voe ket digalonekaet gant ar gwalldroioù-se hag en e ranndi eo, e Pariz,

a voe krouet ar gelaouenn *Al Liamm* gant Andrev Latimier hag e vignoned, e 1946. Dimeziñ a reas d'ar 06-07-1948 gant Loeiza Felisia Valois e Pariz hag ez eas da c'hounit e vara pell diouzh Breizh, e Nancy (54000), evel ijinaour EDF. War-dro 1963 e tistroas da Vreizh, e Plouezoc'h, evit bevañ war e leve. Daoust d'e 70 vloaz e lakaas e anv e Strollad Ar Vro (S.A.V.), e 1972, hag e varvas ugent vloaz diwezhatoc'h, en ospital Montroulez.

**Levr.:**

*Ar Sorser, eun taol farserez* (gant Jozeb Gwenegant\*), emb. SAV, ti-moul. kenwerzh, Brest, 1939, 24p.

**Kenlab.:**

SAV : *Setu perak* 1/1936/6 ☒ *Boudadeo* 30/1944/74.

LLMM *E koun Herve Maze* 96/1963/33.

**Dave.:**

Abeozen p.141; LLMM 273/1992/322; O. Mordrel *Breizh Atao* p.296, 350, 369, 416; B. Frélaut *Les nationalistes bretons* p. 33, 54, 115, 176; A. Déniel *Le mouvement breton* p.235, 299.

## - H -

**HAMON, Marcel*****Marsel Hamon***

*Courtois*

(Plufur 14-04-1908/Créteil (94000) 26-02-1994)

Politikour. N'eo ket anavezet e dad; e vamm, eus Plufur, a veze graet Liza ar Pont anezhi.

Ur skoliad donezonet e voe Marsel Hamon hag, a-drugarez d'ur yalc'had-studi e c'hellas mont da Lise Sant-Brieg ha, goude-se, da Skol-Veur Roazhon betek dont da vezañ kelenner war ar brederouriezh.

Dindan dalc'hidigezh Bro-C'hall gant an Alamaned e kemeras perzh en eneberezh, gant e wreg Madalen, gant an anv koronal Courtois, hag e voe kondaonet d'ar marv gant an enebourien e miz Meurzh 1943.

Dilennet e voe da gannad komunour e miz Here 1945 hag e sezas d'ar vodadenn-lezenniñ eus 1945 da 1951 hag eus 1956 da 1958. Difenn a reas eno an danvez lezennoù diwar-benn kelennadurezh ar brezhoneg (Lezenn Deixonne) hag ivez ar re a glaske gwellaat stad ar vartoloded hag ar gelennerien.

War-lerc'h e dro-wenn, e 1958, ez eas da gelenn ar brederouriezh da Bariz betek e retred. D'e zistro d'ar vro e voe dilennet diouzhtu da vaer gant ar Blistiniz.

Marsel Hamon a oa marc'heg eus Strollad a Enor hag ezel eus burev broadel stourmerien gozh an Eneberezh.

**Kan.:**

*L'Internationale en breton*. s.o. HYZH 99/1974/49.

**Dave.:**

BRUN 174/1994/64; Pascal *Les Députés Bretons de 1789 à 1983*, p.532.

**HÉLIAS, Pierre Jakez*****Pêr Jakez Eliaz***

*Jakez Kroc'hen*

(Pouldreuzig 17-02-1914/Kemper 13-08-1995)

Mab da Lan Eliaz ha da Varijan ar Gov, labourerien-douar e Pouldreuzig. Brezhoneg hepken a oa gant ar paotr bihan pa'z eas da skol e gumun da zeskiñ galleg. Ober a reas e studi e Lise Kemper, e-lec'h ma voe ur skoliad donezonet, hag e Skol-veur Roazhon. Bet kelenner war al lizhiri e Sant-Brieg, Roazhon hag e Skol-vistri Gemper ma voe rener anezhi diwezhatoc'h. Bet ivez kelenner war ar yezhoù keltiek e skol-veur Brest.

Diouzhtu war-lerc'h ar brezel, er bloavezhioù 1946-47, e voe pennskrivagner *Vent d'Ouest* ur gelaouenn renet gant Jozeb Martray. Bet karget, goude-se, eus an abadennoù brezhonek war skinoù Radio-Kimerc'h gant e vignon Pêr Drepoz\*. War-dro 600 diviz fentus a zo bet skrivet gantañ evit ar skingomz ha soñj o deus c'hoazh an dud eus skingasadennoù Jakez Kroc'hen ha Gwilhoù Vihan embannet meur a wech gant



*Emgleo Breiz* gant an talbenn *Biskoaz kement all!*. Diwezhatoc'h, er bloavezhioù 1968-78, bet kendispleger an abadenn "Breizh o vevañ", gant Charlez ar Gall, met er skinwel ar wech-mañ.

P-J. Eliaz a voe, war un dro, un dramaour a zoare (*Mevel ar Gosker, Katrina Lenn-zu*), ur barzh awenet brav (*Maner Kuz, Priz "Bretagne 1955", An Tremenn buhez*), ur c'honter eus an dibab a ouie chalmañ ar selaouerien a bep oad (*Bugale Berlobi*)... met brudet eo bet dreist-holl gant e eñvorennoù bigouter, *Marh al lorch*, moulet da gentañ e galleg (1975) ha, daouzek vloaz diwezhatoc'h, e brezhoneg (1987). Berzh bras a reas al levr-se e galleg, gwerzhet ouzhpenn daou vilion a skouerenn anezhañ, hep kontañ an troidigezhioù niverus.

Loreet e voe e oberenn gant prizioù lennegel a bep seurt evel "Prix Aujourd'hui" (Priz hiziv), Priz ispisial Akademiezh Vreizh, Priz "RTL" hag all... Marc'heg eus ar Strollad a enor e voe graet anezhañ e 1883 hag e barr e vrud e oa pa voe roet dezhañ kolier an Erminig e Kemper, d'an 28-09-1991.

Kar-e-yezh e voe Pêr Jakez Eliaz a dra sur hag, a-drugarez dezhañ, ez eus bet adkavet lorc'h komz brezhoneg gant meur a Vreizhad. Studiet eo bet, hag ez eo c'hoazh, e oberoù dre ar bed, eus Tel Aviv da vMadrid. Gallet en dije, eta, lakaat da dalvezout ar vrud-se evit kemer penn ur stourm sevenadurel kaset en-dro evit hor yezh. Met biskoazh ne voe Eliaz ur stourmer breton. Troet e oa muioc'h war-du an amzer dremenet eget war-du an dazont. Chom a reas atav er-maez eus an Emsav hag an dra-se a voe tamallet dezhañ gant meur a hini.

## Ober.:

### 1. Pezhioù-c'hoari :

*Un den divemor*, 1948, 4p.

*Marc'heger an nevez-amzer*, (3 zaolenn) 1949.

*Eun ano bras, darvoud en eun arvest*, Ar Falz, 1953, in 8°, 16p.

*War eun dachenn fobal* (eun arvest), Ar Falz, 1955, 16p.

*Tan ha ludu, pevar arvest war liou ar pevar amzer-vloaz*, RUD.1, 1957, 83p.; emb. all: Emgleo Breiz, 1979, 83p.

*Piou e-neus lahet an hini koz?* Emb. Ar Falz, 1958, 15p.; eil emb. Brud Nevez, 1983, 32p.

*Eun den maro ha ne goll ket e benn; c'hoariadenn farsuz e tri diviz*, Ar Falz, 1958, 14p.; eil emb. Emgleo Breiz, 1981, 15p.; emb. all: 1983, 32p.

*Tan ha ludu, Pevar arvest war liou ar pevar amzer-vloaz*, Emgleo Breiz, 1997, 21x15, 144 p. (dalif).

*Mevel ar Gosker*, Emb. Ar Falz, Brest, 1959, in-8°, 72 p.; eil emb. Ar Falz, Timoul.Le Télég., Brest, 95 p.; Emb. Brud Nevez, 1979, 88 p.; Emgleo Breiz, Brest, 1985, 83p.; Emgleo Breiz, Brest, 1993, 104 f.

*Pevar fezig-c'hoari*, BRUD.17, 1964, 43p.

*An Izild a-heul* (reuzc'hoari), divyezhek, Emg. Breiz, 1969, 278 p.; Brud Nevez, 1983, 141p. *Torret e skabell gant Kariou koz*.

*Ur chupenn marhad-mad; Bouzar pe vud?; Ar boued touseg*. stagadenn da Vrud Nevez, 1977, 43p.

*Tan ha ludu; Marheg an nevez-amzer; An douger tan; Maro bihan Tin ar Halvez; Egile*. Emgleo Breiz, 1979, 86 p.

*Marhekadenn Roue Ker-Is* (radiodrame), dornskrid liesskrivet, 6p.

*Eun ti divestr; Paotr ar henteliou; Kov Gwilhou a ra trouz; Piou a beo?* Emgleo Breiz, 1980, (5 pezh-c'hoari) 62p.

*War an dachenn fobal; Eun den divemot*, Emgleo Breiz, 1980, 27p.

*The other 'un* (divyezhek, brezhoneg-saozneg) adapted from *Egile* by Helias ha Janed Ormrod, emb. Brud Nevez, 1981, 55p.

*Eun ano braz; Torret e skabell gant Kariou koz*, Emg. Breiz, 1989, 84p.

*Katrina Lenn-zu*, Emg. Breiz, 1994, 172p.

### 2. Kontadennoù

*Biskoaz kemend-all! farsadennoù Jakez Kroc'hen ha Gwilhou Vihan*, Ar Falz, Timoul. ICA, Brest, 1947, in-8°, 59P.; Emg. Breiz, levr kentañ, 1987, 198p.; eil levr, 1988, 216p.; trede levr, 1989, 216p.

*Mojennou Breiz 1: Ar Mor*, Emg. Breiz, 1957, 36p., skeud. Jos an Doare.

*Mojennou Breiz 2: War drêz ha war veg*, Emg. Breiz, 1959, 36p., skeud. Jos an Doare.

*Marvaillou ar votez-tan*, Emg. Breiz, 1962, 24p.; Brud Nevez 1983, 24f.

*Bugale Berlobi 1: Brud an Dreued*, Emg. Breiz, 1987, 190p.

*Bugale Berlobi 2: Marvaillou da veva en ho sav*, Emg. Breiz, 1988, 236p.

*Ruz-kov ar foeterez-vro*, (dalif), Emg. Breiz, 1997, 48p. Skeudennaouet gant Dodik.

### 3. Barzhonegoù

*Kanadenn Penn-ar-Bed* (sonerezh gant Jef ar Penven), Brud, 1959, 8p.

*Maner Kuz*, Moul. Silvaire, Pariz, 1964, 148p.

*Ar Mên Du*, Emg. Breiz, 1974, 168p. (BRUD.47-48); Emg. Breiz, 1984, 84p.

*An tremen buhez*, Emg. Breiz, moul. ar Signor, 1979, 196p.

*A-berz eur bed all* (oberennoù klok), Ouest-France, Roazhon, 1991, 542p.

### 4. Romantoù

*Marh al lorh: eñvorennoù eur Bigouter*, Plon, Pariz, 1987, 532p.

### 5. Evit ar vugale

*Penaoz e teuas eur Breizad da veza roue Bro-Zôz*, Embannadur Armor, 1977, 28p., skeud. gant Kerfriden.

*Marh al lorh* (arroudadoù evit ar skolioù), Emgleo Breiz, 1994, 184p.

### 6. A bep seurt

*Jakez Riou (1899-1937)* (gant Kreston\*, Mevel\*...), Ar Falz, 1957, 21p.

*Kreisteiz war ma zreujou*, 1964

*Divizou eun amzer gollet*, Emg. Breiz, Brest, 1966, 150p.; 1994, 164p.

*Jakez Riou da vare ar "Gorsedd Digor"*, Emgleo Breiz, 1973.

*Dictionnaire breton-français et français-breton*, a-stroll, Garnier, Pariz, 1987, 816p.

*Amsked, pobl an noz*, Emg. Breiz, 1990, 162p.

### Kenlab.:

FALZ2 *Eun den divemor* 13/1948/(stag) *Ar Roue Kado* 3/1961/14

BRUD *Tan ha ludu* 1/1957/27 ☒ *Ar men du* 47-48/1975/

BREZ *Galv ar Vombard* 45/1961/3.

BLBR *An euzviled santel* 192/1972/18.

BRUN *An den-ze* 6/1977/2 ☒ *O kantreal dre Vro-Skoz* 124/1989/18 hag an niverenn ispisial 172/1994/6

### Dave.:

PRCO 943/1964/4; BRUN 172/1994 niv.ispisial; BREM 168/1995/16; PPLB2 381/1995/2 ha 4; CBEM 118/1995/20; PBRE2 411/1995/1; LLMM 292/1995/363 ha 379; *Dict. de la littérature* (Larousse) p.678; Gohier p.137 ; B. ha J. an Nail *Dict. des romanciers* p. 139.

### HEUSSAFF, Pierre Alain

#### *Pêr Alan Heusaff*

*Mab Ivi, Gwilhou Gloaverzhag, P ; Heusaff* (Sant Ivi 23-07-1921/Gaillimh (Iwerzhon) 03-11-1999)

Ur stourmer a c'hoarias ur roll a-bouez en darempredoù etrekeltiek. Triwec'h vloaz e oa hepken pa gemeras perzh, e 1938, en embregadegoù ar Gadervenn, ur strollad damluel deuet eus SBB ha krouet gant Neven Henaff (C. Lainé\*). Tremen a reas dre skol-vistri Kemper a-raok bezañ skolaer dindan ar Stad er bloavezhioù 1941-42.

Emouestlañ a reas diouzhtu pa voe krouet ar Bezen Perrot, e miz Kerzu 1943, war-lerc'h drouklazh Y-V. Perrot. Ofiser e voe anvet ha karget eus stummadur ar soudarded. Brezeliñ a reas war dalbenn ar reter, betek miz Ebrel 1945, pa voe gloazet grevus en emgann. Degemer a reas neuze medalenn ar re c'hloazet. Goude bezañ bet louzaouet en un ospital, e Bro-Alamagn, e chomas pell er vro-se da labourat evel micherour en ur studiañ, dindan un anv faos, e Skol-Veur Marburg.

Er bloaz 1951 ez eas da Iwerzhon da chom e-lec'h ma kendalc'has gant studioù uhel e Skol-veur Gaillimh (Galway) e-lec'h ma kejas gant Bridie O'Doherty, ur studierez a zeuas da vezañ e bried. Un nebeud goude e voe gopret evel teknikour e servij hinouriezh an nijva en aerborzh Dulenn.

N'eus ket kalz a izili eus ar Bezen Perrot a adstagas gant ar stourm politikel ha sevenadurel evit Breizh goude ar brezel, met Alan Heusaf a voe unan anezho. Adal 1957 e savas ur follenn guzh, *Argoad* hec'h anv, a veze kaset evit netra d'an dud anavezet gantañ betek 1959. Seizh niverenn hepken a zeuas er-maez. Eus 1960 da 1972 e embannas *Breton News*, ur c'hannadig e saozneg a roe da c'houzout da gelaouennoù ar bed penaos e oa an traoù e Breizh. Pa voe diazezet ar Celtic League, ur gevredigezh politikel etrevroadel a vod an holl vroioù keltiek, e-kerzh "Eisteddfod" Rhos, e 1961, gant Gwynfor Evans, rener ar Plaid Cymru, da brezidant ha Yann Fouere da eilprezidant, e voe anvet Heusaff, a gomze hag a skrive dibilh brezhoneg, iwerzhoneg, galleg ha saozneg, da bennsekretour. Derc'hel a reas ar garg-se e-pad ur c'hard kantved, betek 1986 ha lakaat a reas da zont er-maez bep tri miz, *Carn*, ur gelaouenn all skrivet e saozneg dreist-holl, met ivez er yezhoù keltiek, hag a zo bev atav.

Er bloaz 1986 ez eas da vevañ war e leve en An Spideal nepell diouzh Gaillimh hag ac'hano e kendalc'has da labourat, daoust d'e yec'hed a yae war fallaat, en ur skrivañ meur a bennad evit kelaouennoù brezhonek a bep seurt.

E c'heriadur diwar-benn yezh Sant-Ivi, e vro c'henidik, moulet gant *Hor Yezh*, a chom ul labour dispar. 78 vloaz e oa-eñ pa varvas.

**Levr.:**

*Evel-se e komze Zarathoustra* (Troet diwar Nietzsche) PRED.35-36, 84 p.

*Geriaoueg Sant-Ivi*, Hor Yezh, 1996, 334p.

**Kenlab. :**

GALV *An hent da adsevel eur Vroad* 5-7/1941/78 ☒ 8-9/1941/162

ARVO *Sorc'hennoù hor re goz* 11/1941/3 ☒ *Goude galv Kerlann* 96/1942/1

GWAL *Skol sant Iltud* 154/55/1942/639 ☒ *Ar gelennouriezh nevez* 160/1943/280

PRED *Tonkad* 1961 24-25/1961 ☒ *Tonkad* 1964 58/1964

LLMM *Koadour Kerneblec'h* ☒ *Gwallblanedenn an Armada en Iwerzhon* 265/1991/270

HYZH *Gerioù nebeut anavezet dastumet e Sant-Ivi* 8/1955/3 ☒ *Evezhiadennoù diwar-benn.yezh ar vugale* 113-114/1977/93

ARGO *Piv a vero Breizh dieub ?* 1/1957/1 ☒ *Bro-C'hall a sell ouzh ar c'hreisteiz* 7/1959/1

BAHE *Ul lizher (d-b.Y-V; Perrot)* 10/1957/17

LABO *Kuit gant an iwerzhoneg dre redi* 4/1959/37

ABKE *Iwerzhon: An club Leabhar* 1/1959/4 ☒ *Re a breder gant ar blom ?* 150/1971/172

VROG *Dilennadeg evit an Dail* 11/1961/59 ☒ *Ar yezh, ar bobl hag ar bolitikerien* 26/1964/39

STMR *Ragevezhiadennoù* 4-5/1962/39

IMBO *Bodadeg-vloaz ar C'hevre keltiek* 22-23/1971/262 ☒ *Kantvet deiz-ha-bloaz Padraig MacPiarais* 121/1980/39 hag *ul lizher* 204/1986

SAVB *War-du ur stourm kevredadel en Iwerzhon* 3/1971/3 ☒ *Enkadenn ar Republikaned* 11/1972/3

CARN *Gouel hollgeltiek Cill Airne* 2/1973/20 ☒ *Troiadouriezh sevenadurel* 70/1990/5

ANAM *Kembreiz harzet goude tangwalloù e tiez-hañv* 22/1980/1 ☒ *Gwrizioù* 50/1981/1

BREM *Skol iwerzhoneg e Conamara* 11/1982/11 ☒ *Ar Celtic league* 205/1998/7

EMGN *Bodadeg-vloaz ar C'hevre keltiek* 33/1987/12 ☒ *La harpe et l'hermine: darempredoù arvarus* 115/1995/15.

**Dave.:**

*Annuaire des 10000 Bretons*, 1971, p.574; Mordrel *Breiz Atao* p.11 ha 223; Fouéré *La maison du Connemara* p.24, 114, 121-125, 327; Caerleon *Le Rêve fou des soldats de Breiz-Atao* p.142; LABO 6/1959/3; BRIN 151/1999/4; BREM 219/1999/6; AVBR 431/2000/2; AMGZ *Kerzu*/1999/14; STEN 14/2000/17.

## - J -

**JACQ, Goulven****Goulven Jak***Kivijer, Frañsez Pennek, Maout*

(Plougastell-Daoulaz 31-08-1913/Sant-Teve 18-01-1993)

Skrivagner ha stourmer breizhek. Mab e oa da Yann Jak, marichal e Plougastell-Daoulaz, ha da Anna ar Solier. Goude bezañ bet da skol e gêriadenn (ar C'hleger) ez eas da Lise Brest gant ur yalc'had-studi er bloaz 1926. Eno e tarempredas ur c'helenner L.P.Nemo\* hag ur skoliad Frañsez Kervella\* a lakaas ar garantez-vro da ziwanañ ennañ. Kuitaat a reas al Lise e 1932 hag ez eas da labourat evel implijad-burev e ti ur marc'hadour gwin bras. Er bloavezhioù-se, moarvat, e lakaas e anv e SBB. Eurediñ a reas e 1938 gant Rozenn ar C'helleg ha, bloaz goude, e voe galvet da soudard. Ober a reas ar "brezel diot" evel eilkanolier (1939-1940) ha, pa voe disoudardet, e voe skolaer dindan Stad e-pad bloaz (1940-41) met reuz a savas hepdale etrezañ hag e rener pa voe gwelet sklaer e vennozhioù a oa a-du-krenn gant ar brezhoneg. Ne voe ket adnevezet e garg er bloaz war-lerc'h, evel-just. Labourat a reas neuze gant saverien "Moger ar Mor Atlantel".

E dibenn ar bloaz 1943 e voe galvet da vont el Lu Brezon (Bezen Perrot) savet gant Neven Henaff\*. Dindan an anv-brezel "Maout" e kemeras perzh e krogadoù, risklus alies, a-enep harzerien. Heuliañ a reas ar Bezen an arme alaman o kilañ dirak an Amerikaned hag e Tübingen edo Jak pa voe roet dezhañ medalenn ar re c'hloazet. Pa voe diarvar drouziwezh an Alamaned, e miz Mae 1945, e tilezas Jak ar Bezen hag ar stourm. Gant poan ha diaester, a-dreuz ar Goadeg Du, e teuas a-benn da dizhout Bro-C'hall ha Breizh goude-se, e-lec'h ma vevas ur prantad, dre guzh, a-raok mont da glask repu e Bro-Spagn.

D'ar 14 a viz Gouere 1945 edo en Iruñea ha kaset e voe d'ur c'hamp kengreizennañ e Miranda de Ebro. Goude-se e chomas e-pad bloaz hanter en abati Santo Domingo da Silos, gant menec'h Sant Benead, e-lec'h ma labouras evel breur lik oc'h ober war-dro al liorz. Kuitaat a reas an abati-se e miz Mezheven 1948 evit mont da vMadrid da vevañ e-pad pevar bloaz a-raok ober ur goulenn da vont da Vrazil. E 1953 e tilestras e Santos hag eno e reas anaoudegezh gant an hudspredouriezh hag Alan Kardec, beleg bras ar gelennadurezh-se. Diskibl an treuzannezerezh-ene hag an adenkorfadur e teuas da vezañ. Krouiñ a reas ur gelaouenn, *An Trede Diskuliadur*, e São Polo, e 1957. 26 niverenn a oa deuet er-maez pa zistroas Jak da Vreizh er bloaz 1961.

Dont a reas da chom, gant e diegezh bodet en-dro, e Sant-Brieg e-lec'h m'en doe kalz a boan da gavout labour. Eno eo e skrivas e eñvorennoù, *Pinvidigezh ar Paour* (1977), enoret gant Priz Langleiz ha Priz Kuzul Etrevroadel evit Kendalc'h ar Brezhoneg (Brusel), e 1978. Bloaz war-lerc'h e voe roet dezhañ Priz Pêr Drepoz evit e gontadenn *Ar Wastell*. Ober a reas e annez e Kiberen war-lerc'h marv e wreg e 1986 hag eno e chomas betek fin e vuhez.

**Levr.:***Pinvidigezh ar paour*, Al Liamm, 1977, in-12, 164p.*E gwiniég an Tad*, Hor Yezh, liesskrivet, 1981, 106p.*E Bro ar Richer c'hlas*. (troet diwar F.C. Xavier), Hor Yezh, 1984, liesskrivet, 173p.

Ur geriadur brezhoneg-nederlandeg dornskrivet diechu.

**Kenlab.:**GUED *Etre daou geneil* 16/1964/4.TRED An holl bennadoù a zo bet savet gantañ. 1957 ☒ 1960. (adembannet gant *Hor Yezh*, niv.199).LLMM *Tourist dre heg* 159/1973/251 ☒ *Ar Wastell* 204/1981/14DHUN *Ar pladigou-nij* 37/1974/8.SKRD *Eñvorennoù un emsaver* 38/1984/9-36.

HYZH *An trede diskuliadur* 199/1994/3 (dalif)

**Dave.:**

LLMM 159/1973/251, 227/1984/390, 282/1994/71, 283/1994/131; BREM 150/1994/18; Deniel, *Le Mouvement breton*, p.306; Mordrel *Breiz Atao*, p.378, 380;. LANV 69/1994/ 40.

**JEGOU, Jean***Yann Jegou*

(Pont-'n-Abad 23-01-1952/Roazhon 23-01-1997)

Emsaver. Tremenn a reas e yaouankiz e Ploveilh hag e reas e studioù kentañ derez hag eil derez e Bro-Gernev a-raok mont da skol-Veur Roazhon. Gounit a reas e aotreegezh hag ur vestroniezh war an ekonomiezh. Echu e studi gantañ e labouras evit ar CNRS (Kreizenn Vroadel an Imbourc'h Skiantel) hag an DRAC (Renerezh Rannvroel an Aferioù Sevenadurel) e-pad meur a vloaz. Ur stourmer efedus eo bet Yann Jegou. Kemer a reas perzh e krouidigezh ar Strollad komunour Breizh e Roazhon a-raok emezelañ diwezhatoc'h en Unvaniezh Demokratel Breizh.

Dimeziñ a reas gant Lena Louarn, merc'h Alan al Louarn\*, e Roazhon, d'ar 4 a viz Gwengolo 1972. Deskiñ a reas mat brezhoneg ha, gant Skol an Emsav, e labouras en Talbenn Sevenadurel Araokour Breizhek. Evel dileuriad SAE c'hoazh e kemeras perzh e diazevadur Karta Sevenadurel Breizh goude disklêriadur ar Prezidant Giscard d'Estaing e Ploermael. Ezel eus Burev Kuzul Sevenadurel Breizh e voe da c'houde o vezañ-eñ e-karg eus daou vodad. Bet e voe ivez Prezidant kentañ Unvaniezh Bro Roazhon ar C'hevredigezhioù Sevenadurel Breizhek ha teñzorer Burev Sokial ha Sevenadurel Roazhon.

Sevel a reas un nebeud pennadoù brezhonek evit ar gazetenn *Bremañ* ha skridoù gallek evit kelaouennoù all liesseurt evel *Autrement* (1979).

Kudennoù yec'hed o deus miret outañ da genderc'hel e stourm e mizioù diwezhañ e vuhez hag e varvas, yaouank c'hoazh, d'e 45 bloaz.

**Kenlab.:**

BREM *Aon rak bugale ?* 1/1980/8 ☒  
*Komz a ra kalz ar C'hallaoued* 17/1983/7.

**Dave.:**

BREM 185/97/5

**- K -****KERAVEL, Armand***Armañs Keravel*

*Tinael, Per Kerdu, Per Derug, Lan Argol, A.K.*

(Brest 18-01-1910/Carpentras (84200) 01-12-1999)

Skolaer ha stourmer evit ar brezhoneg. E dad a oa ur martolod dindan ar Stad genidik eus Argol hag e vamm ur wrierez eus Telgrug, ac'hano e anvioù-pluenn.

Tremenn a reas dre Skol-vistri Kemper a-raok bezañ anvet da skolaer lerc'h-ouzh-lerc'h en Uhelgoad (1934-38), Santoz, Dirinonn (1945), Kerlouan ha Brest (1954). Emezelañ a reas ur pennadig ouzh SEV met, buan-tre, e tilezas ar strollad-se evit kemer perzh, gant Sohier\* ha Delalande\*/Kerlann, e krouidigezh *Ar Falz*, ur gevredigezh hag a vode ar skolaerien ha kelennerien a-du gant kelennadurezh ar brezhoneg er skolioù (1932).

En abeg da se e voe anavezet gantañ kamp "Margueritte" Roazhon da vare diwezh ar brezel, evel kalz a reoù all, daoust dezhañ bezañ ehanet gant e oberidigezh vreton ha bezañ darempredet rouedad rezistañs Tanguy-Prigent e-pad ar brezel. Ne chomas ket bac'het pell koulskoude hag a-benn pemzektez e voe dieubet a-drugarez da rezistanted en anaveze. Un nebeud amzer goude-se e kemeras e gartenn er Strollad komunour.

Hepdale, e 1945, ec'h adroas buhez d'ar *Falz*, hag e voe anvet da brezidant anezhi.

Buan-tre ec'h adsavas ivez kannadig ar gevredigezh (1945) hag ar skolioù-hañv (Gwaien, 1946).

Er bloavezh 1953 e voe krouet Emgleo Breiz, ur c'hevredad o vodañ un darn eus an emsav sevenadurel evel Kendalc'h, Bleñ-Brug, ar Falz, Bodadeg ar Sonerion hag ar JEB, ur gevredigezh studierien. E-pad bloavezhioù hir e voe Keravel e sekretour-meur. A-drugarez dezhañ, hag ivez d'e vignoniezh gant Jozeb Martray, e voe kemeret Emgleo Breiz da skourr sevenadurel ar CELIB ha kudenn ar yezh a voe staget ouzh al lezenn-stur goulnnet start gantañ.

Kannad hor bro e voe, e 1960, pa voe savet, gant unvaniezh bodadoù all eus ar C'hwec'hkogn, ur "C'huzul broadel evit difenn yezhoù ha sevenadurioù Bro-C'hall". Gantañ e voe aozet ivez ur c'houlennadeg, e 1968, a zastumas 150 000 sinadur da nebeutañ hag, er bloavezhioù '70, e voe e-touez ar re a gasas en-dro manifestadegoù bras ha niverus evit ar yezh.

E vuhez-pad e voe Keravel un den gant mennozhioù a-raok hag, e 1977, betek 1983, e voe dilennet da guzulier kêr-Vrest ha kuzulier rannvroel war roll ar sokialourien. Gant un dalc'husted hag ur bennegezh dellezus e labouras en o metoù en ur glask levezoniñ politikerezh ar Strollad sokialour. Hep kalz a berzh peurliesañ ha dipitet e voe gant politikerezh ar gouarnamant gall war-lerc'h dilennidigezh Frañsez Mitterand (1981).

Mervel a reas e ti e verc'h, pell diouzh e vro, e Carpentras, goude ur vuhez gouestlet da zifenn ur yezh tomm d'e galon met douaret e voe e bered Kastell-Paol.

#### **Levr.:**

*Ar Bleizi* (tr. Diwar Tchec'hov), Montroulez, 1935, 32 p.

*Ar goulenn-dimezi* (diwar Tchec'hov), emb. Ar Falz, I.C.A. Brest, 1947, 48 p.; BRUN.150, 1987, 42 p.

*Pennadou-lenn evid skolioù Breiz*, SKOV.25-27, 1977, 48 ha 48 p.; HLNR.6, 1977.

*Pennadeu-lenn aveid ar skolieu* HLNR.14, 1980, 48 p.

*Pennadou-studi evid ar Vachelouriez* 48 p.

#### **Kenlab.:**

FALZ1 *Gwalarn hag hol levr-soniou* 2/1937/9.

FALZ2 *D'ar gelennerien-brezonegourien* 1/1945/2 ⊗ *Tanguy Prigent* 1a/1970/7.

BRUD *Osin e douar ar re yaouank* 11-12/1961 ⊗ *Pennadou-kaoz skignet gant ar skingomz* 46/1974.

AMAN EMGLEO BREIZ *E doare kenskriz* 1/1973/6 hag ar re all.

BRUN *Stourm evid ar brezoneg: Eur jestr pe zaou hepken* 1/1977 ⊗ *Evid lezenn ar yezou* 133/1990/58

Brest Espoir *E Kuzul Breiz* 1979 ⊗ *Deg bloaveziad "Breiz o veva"* 1981.

#### **Dave.:**

Gohier p.158; PVZH 117/1979/6; PPLB2 433/2000/28; BREM 220/2000/15; TELE 03-12-1999; STEN 14/2000/17.

### **KERRAIN, Hervé**

#### **Herve Keraen**

(Runan 20-03-1955/Plouneour-Menez 14-09-1998)

#### *Heureuchin Kofek*

Stourmer breton kalonek, pouezus e labour evit ar brezhoneg. Paotr yaouank e oa-eñ c'hoazh pa zeuas d'an Emsav war-lerc'h e vreur Mark. Peurzeskiñ a reas hor yezh e Roazhon gant Skol an Emsav e-pad e studioù er Skol-veur. E 1977 e nac'has mont d'an arme rak ne felle ket dezhañ, evel Breton, servijout al lu gall. Kavout a reas gwelloc'h neuze klask repu e Bro-Gembre hag e Bro-Iwerzhon e-lec'h ma chomas ouzhpenn pevar bloaz. War-lerc'h dilennidigezh François Mitterand, e 1981, e kredas e c'halle distreiñ da Vreizh hep bezañ heskinet. Disouezhet e voe diouzhtu koulskoude. Harzet e voe hepdale, gant ur Breizhad all disenter eveltañ, ha kondaonet da zaou vloaz toull-bac'h gant ul lez-varn, ofiserien enni hepken, evit bezañ nac'het dougen lifre an arme c'hall met dreist-holl evit bezañ nac'het komz e galleg dirazi.

Chom a reas dek miz er c'harc'har. Ur wech deuet er-maez euz an toull-bac'h, e 1983, e krouas al luskad "Nac'h Sentiñ" evit skoazellañ ar re o doa nac'het ober o c'hoñje-soudard hag a oa toullbac'het en abeg da-se.

Bloaz goude, e 1984, e savas Stourm ar Brezhoneg, gant mignoned all, evit ma vefe anavezet ar brezhoneg evel ur yezh ofisiel ha ma vefe savet ur chadenn skinwel brezhonek. E miz Mae 1985 e voe paket pa oa o vastariñ panneloù-hent hag e voe kondaonet ha toullbac'het adarre abalamour da-se gant lez-varn Montroulez.

E-keit-se e voe kavet labour gantañ, e Sant-Brieg, evel skolaer Diwan da gentañ hag evel rener war ar c'helenn diwezhatoc'h. War un dro e voe lakaet e penn Oaled Abherve, ar greizenn sevenadurel vreizhek eus ar gêr-se (1988).

Kuitaat a reas Diwan e deroù ar bloavezhioù '90 evit mont d'ober skol vrezhonek d'an oadourien gant ar gevredigezh Stumdi. Goude-se, en nevezamzer 1995, e kengrouas, ur gevelouri en Uhelgoad, "Roudour" hec'h anv, da stummañ brezhonegerien nevez deuet en o oad-gour, evit reiñ, diouzh e veno, ul lañs nevez d'an Emsav sevenadurel barrek da dreiñ penn d'ar vazh.

Mervel a reas trumm Herve Kerrain, e kreiz e vrud. 43 bloaz hepken e oa-eñ.

**Levr.:**

*Troioù Alis e Bro ar Marzhoù* (Hervez Lewis Carrol), emb. An Here, 1995, 167 p., 17,5 x 11.

**Kenlab.:**

LANV *Disenterion vreizhat a zo en toull-bac'h met skrivañ a reont pennadoù* 13/1982/19 ☒ *keleier digant ar M.I.B.-Nac'h Sentiñ* 19/1983/24

BREM *Barnet gant an arme* 10/1982/5 ☒ *Berzet kelenn ar c'hurdeg* 198/1998/15

EABG *Lakaat ar Vretoned da gompren e chomint Bretoned nemed ma chom bev ar yezh* 227/1985/13.

EMGN *Kembre: Diskrog labour ar vengleuzerien* 6/1984/14 ☒ *Diskleriadur SAB* 68- 69/1991/12

TBAO *Ar paotr a gomze gant al loened* 13/1989/9 ☒ *An torr-penn 13-17/1989-90*

**Dave.:**

LANV 13/1982/19; OUF 17-09-1998; BREM 205/1998/4

**KERRIEN, Jacques-Marie**

*Jakez Mari Kerrien*

*Gwenlean*

(Sant-Tegoneg 23-03-1900/Gwened 30-07-1993)

Den a iliz ha danevellour. Mab e oa da Bêr Vari Kerrien ha da Vari Loeiza Conseil. D'e unnek vloaz, war-lerc'h e studi kentañ derez e Sant-Tegoneg, e voe "dibabet" gant Tadoù kenvreuriezh Kalon Sakr Pikpus, ha kaset da Skolaj Ontarrabia, e Gipuzkoa (Euskadi), a-benn ober studioù beleg. Daou grennard all, a zlee bezañ diwezhatoc'h e-touez ar re wellañ eus hor skrivagnerien, Jakez Riou\* ha Youenn Drezen\*, a oa war un dro gantañ (1911). Er c'hontrol e zaou gendiskibl, a zistroas da Vreizh goude seizh vloaz tremenet pell diouzh ar vro, e kendalc'has Jakez Kerrien betek ar penn. Goude studioù e Miranda de Ebro hag e ouestloù kentañ (1917) e voe lakaet da gelenner e Skolaj Ontarrabia a-raok mont da Skol brederouriezh ha doueoniezh Masnuy Saint-Pierre, e Belgia (1919). Diskregiñ a reas diouzh e studioù, er bloavezh 1920, evit mont da Wened d'ober e goñje soudard, er 35vet rejimant kanolieriezh-war-varc'h. Eno e kejas gant L.P. Nemo\* (Roparz Hemon) a oa soudard en hevelep rejimant. D'ar mare-se eo e krogas da skrivañ pennadoù brezhonek evit a bep seurt kelaouennoù o tiskouez e oa ur brezhoneger eus ar re wellañ. Gounit a reas priz kentañ an helavarded e Bleuñ-Brug Kastell-Paol (1920) hag eil priz ar varzhoniezh er genstrivadeg aozet gant KBB e 1921.

Adkregiñ a reas gant e studi er bloavezh 1922 e Masnuy, Tournai, Roma. Degemeret e voe da zoktor war ar Brederouriezh, e Skol-veur Sant Gregor ha doktor war an Doueoniezh, e 1927, en hevelep Skol-veur. E-keit-se e oa deuet da vezañ manac'h eus

Urzh Kalon Sakr Pikpus ha beleget e Masnuy-Saint-Pierre d'ar 25 a viz Gouere 1926.

E miz Gwengolo 1927 e voe anvet da gelenner war ar Brederouriezh e Skol venec'h Chateaudun (28200) hag, e miz Gwengolo 1930, e Kloerdi bras Poitiers (86000).

Galvet e voe da soudard er bloavezh 1939, paket e voe gant an Alamaned ha kaset da Alamagn e-lec'h ma chomas betek deroù 1943. E miz Gwengolo e voe anvet da superior Chateaudun. Eno e kelennas ar brederouriezh adalek 1949 hag e voe anvet da briol e 1953.

Kuitaat a reas Chateaudun evit mont da aluzener leanezed ar Galon Sakr e Tours, e 1955, hag e Poitiers e 1961. Kemer a reas e retred e miz Here 1983 hag ez eas da Sarzhav da vevañ. Mervel a reas e ti leanezed bihan ar re baour, e Gwened, e-lec'h ma oa o chom goude bezañ bet en ospital ur pennadig.

Ur Breizhad mat eo bet Jakez Kerrien a-dra-sur, ene ur stourmer taer ennañ zoken, evel ma tiskouez e genlabour gant *Breiz Atao*, met kollet e voe evit an Emsav goude e velegiezh. Skrivet eo bet e holl oberennoù, e bennadoù, e romantoù bihan a-raok e velegiezh ha netra ken goude-se.

**Levr.:**

*Ar roc'h toull*, Emb. Gwalarn, Brest, 1926, 90 p.; Emgleo Breiz, Brest, Ti-Moul. Kenwerzhel, 1957 in-8, 100p.

**Kenlab.:**

KZV *An Harluet* 239/1917/1.

UAMQ *Breiz adkavet* 1921/41.

FHAB *Me ouijen-me skriva* 8/1922/236 ☒ *Kenteliou d'ar barz yaouank* 12/1927/47 <> 4/1928/143

CDF *Ar Guziadenn aour* (1922); *Ar Waz dour* (1923); *Dao dezo !*, c'hoari (1925-26); *Ar roc'h toull* 19-12-1925 hag all.

BRAT *Ar chouanted* 50-51/1923/290 ☒ *Dao d'ezo !* 54/1923/332 <> 71/1924/golo.

GWAL *Penn er C'hreisteiz* 4/1925/38 ☒ *Ha reiz eo ar werzaouriez vrezonek* 12/1927/62.

**Dave.:**

FHAB Eost 1922/232; GWAL 5/1926/IV; SKOV 29/1972/5; HORIZONS BLANCS 1992/278; dielloù urzh Kalon Sakr Pikpus; IMBO.61 (stagadenn)/1975/71-77

**- L -**

**LATIMIER, André Louis**

*Andrev Loeiz Latimier*

*Armel Louedec, Alan Lazhbleiz, A-M. Thoz, Milio Kerham.*

(Pariz 16-04-1923/Lannuon 29-07-1998)

Krouer ar gelaouenn *Al Liamm*. Mab e oa da Loeiz Latimier, ur Breizhuhelad eus Loudieg, ha da Vari Toz, ur vrezhonegerez vat eus Plouilio (Bro-Dreger). Eno e tremenas e vugaleaj o teskiñ brezhoneg gant e vamm ha bugale ar vourc'h. Ober a reas e studioù e Plouared da gentañ ha, goude-se, e Pariz, war-dro ar bloavezh 1941. Abred e tommas e galon ouzh an Emsav hag emezelañ a reas ouzh SBB e 1942. Kavet en doa ur plas evel danvez mentoniour e Prefeti departamant ar Seine pa voe galvet da soudard e 1944 hag edo oc'h ober e goñje pa voe divizet krouiñ ar gelaouenn *Al Liamm* daou vloaz diwezhatoc'h. Setu perak ne vez ket kavet e anv e-kichen ar grouerien all Per ar Bihan, Ronan Chevalier\*, Glaoda Millour pe Alberzh Gwilhoù\*. Eñ an hini eo koulskoude a sinas an holl bennadoù-stur adalek an niverenn gentañ betek ma kendeuzas, e 1948, *Al Liamm* gant *Tír na nÓg*, renet gant Ronan Huon hag ar Gourriereg\*. Pa voe disoudardet e labouras un tammig e ti an embanner Floc'h, el *Levraoueg Keltiek*, straed Roazhon e Pariz. Daremprediñ a reas neuze ar C'helc'h sevenadurel *Nevezadur* hag e voe ur pennadig ar prezidant anezhañ. D'ar 14 a viz eost 1948 e timezas e Plouilio gant ur vignonez a-vihan, Suzanna Drilhed, a roas c'hwec'h bugel dezhañ desavet ganto o-daou e brezhoneg. Kuitaat a reas al *Levraoueg*



*Keltiek* evit mont da labourat da Levraoueg ar Mirdi Pedagogel, deuet da vezañ I.P.N. (Ensavadur Broadel an Imbourc'h kelenn), e servij ar C'honter betek 1972. Anvet e voe er bloaz-se e Roazhon e-lec'h ma chomas betek e retred. Echuiñ a reas e amzer-labour evel isrener C.R.D.P. (Kreizenn-rannvro an Danvez Kelenn).

Ur brezhoneger dispar e oa A. Latimier. Ugent vloaz e oa hepken pa c'hounezas an *Trec'h Meur* e Pariz d'an 20-06-1943 gant ar meneg " mat ! " met, daoust da se, ne oa ket troet da skrivañ kalz. Ne vez ket kavet el *Liamm* nemet div studiadenne e deroù ar gelaouenn, danevellskridoù diseurt goude-se ha setu tout. Biskoazh ne zilezas ar gelaouenn koulskoude ha skoazell a roas atav da Ronan Huon ha da Ber ar Bihan d'ober a-wechoù war-dro aozidigezh ar gelaouenn : skrivañ an notennoù, enskrivañ ar goumananterien hag all.

Emezelañ a reas ouzh ar M.O.B. kerkent ha ma voe krouet, e 1958 ha stourm a reas evit ar strollad-se o kemer karg *L'Avenir de la Bretagne* e-pad daou pe dri miz, e 1961, pa oa Yann Poilvet o kuitaat Pariz evit ren *Les Presses Bretonnes* e Sant-Brieg. Pa voe anvet e vignon Lukian Raoul da bennskrivagner ar gelaouenn-se, eus 1963 da 1975, e kenlabouras gantañ e-pad bloavezhioù hir o sevel un nebeud pennadoù politikel ha sevenadurel dindan meur a anv-pluenn evel Armel Louédec, Alan Lazhbleiz, A-M. Thoz ha, dreist-holl ur "Revue des revues" sinet Milio Kerham gantañ.

Er bloavezh 1972 e voe anvet en Akademiezh Roazhon met teñvalaet e voe e levez en abeg da varradoù berralan kriz a redias anezhañ da labourat nebeutoc'h. Dont a reas war e leve e Perroz met, abalamour d'e gleñved, ne veze ket gwelet kalz amañ pe ahont. Kenderc'hel a reas koulskoude da labourat er gêr war-dro *Al Liamm* ha da heuliañ gant evezh an darvoudoù breizhek betek e zeizioù diwezhañ. Mervel a reas Andreu Latimier, ur stourmer eus ar re wellañ, skoet gant ar c'hriñ-bev d'e 75 vloaz.

### **Kenlab. :**

LLMM *Darempredoù* 1/1946/2 ☒ *Al levrioù* 222/1984/43.

AVBR *Tud ha Lezenn* 51/1962/3 ☒ *Breuriezh an Trec'h* 243/1975/2

### **Dave.:**

LLMM 310/1998/399, 404, 481 ; BREM 204/1998/2 ; PPLB2 417/1998/18.

### **LE BRAS, André**

#### ***Andreu ar Braz***

(Meuzel-Bourgiba (Tunizia) 31-01-1937/  
Brelevenez-Lannuon 24-12-1993)

Barzh bet ganet e Bro-Dunizia en un tiegezh tregeriat. E dud a oa brezhonegerien met galleg hepken a gomzent gant o mab. Hemañ a zeuas da gomz brezhoneg, koulskoude, gant e vamm-gozh o chom e Serval.

Dimeziñ a reas gant Anna-Vari Merdrignag, eus Pluduno, d'an 28-03-1967 hag o-daou e tarempredent Kelc'h Sevenadurel Lannuon. Er bloavezh 1981 e voe fiziet ennañ mererezh Kendalc'h Keltiek Lannuon. Desket-tre war ar yezh ha danvez Breizh e oa hag ober a reas war-dro Skol Ober e-pad daouzek vloaz, adalek 1981, o tifaziañ labourioù brezhonek ar skolidi dre lizher.

Kloareg e oa e ti un noter eus Lannuon pa voe skoet gant ar c'hleñved ha ranket dilezel e vicher. Ne oa nemet 56 vloaz pa varvas. E varzhonegoù a zo bet embannet gant *Al Liamm* war-lerc'h e varv dre aked e vignonez Vetig an Dred-Kervella.

### **Kenlab.:**

LLMM *Barzhonegoù* 282/1994/3-10

BREM *Stourm micherourien: Thomson Brest* 117/1991/4

### **Dave.:**

LLMM 282/1994/3 ha 71.

### **LE CANN, Yves**

#### ***Cheun ar C'hann***

(Hañveg -04-1911/Plougastell-Daoulaz 15-04-1998)

Sonour. Mab e oa da Vastian ar C'hann ha da Vari-Anna ar Menn. Mont a reas da Skol

an danvez mistri e Kemper hag, e-pad pell-tre, e voe skolaer e Hañveg, e barrez c'henidik. Stourm a reas gant ar strollad "Ar Falz" evit kelennadurezh ar brezhoneg er skolioù ha, pa voe savet *Kevredigezh ar Viniaouerien*, e 1932, gant e eontr Herve ar Menn\* e voe e-touez an izili gentañ. Sonour ampart, Cheun ar C'ann a savas, e 1950, ul levr tri-ugent pajenn, *Digor an Abadenn*, ma kaver ennañ c'hwec'h kanaouenn warn-ugent gant o sonerezh savet gantañ pe dastumet en e gorn-bro. Deuet kozh ez eas da chom da di-retred Plougastell-Daoulaz e-lec'h ma varvas.

**Levr.:**

*Digor an abadenn ! Kanaouennou dansal gant Cheun ar C'hann - ur ger araok gant Jef ar Penven - Kenskriz gant Per Helias ;* emb. Tud ha Bro (Ar Falz), S. Brieg, 1950, 64 p.; moul. all : Brud Nevez, 1986.

**Kenlab.**

FALZ2 *Bal Perroz* » 21/1950/8 ☒ *An naer e bragou Yann Du-Kerzu/1951/11.*

BRUN *Merc'h ar sakrist*

**Dave.:**

FALZ2/25/1951/27; Malrieu *Histoire de la chanson populaire bretonne*, 1983, p. 86; BRUN 209/1998/3.

**LE GAONAC'H, Charles, Louis, Guillaume, Marie**  
*Charlez, Loeiz, Gwilherm, Mari ar Gaonac'h*

*Ch. Gouriou*

(Plonevez ar Faou 07-11-1909/Karaez-Plougêr 17-01-1999)

Stourmer brezhon. Mab e oa da Yann Loeiz ar Gaonac'h ha da Vari Anna Salaun. Edo studier war ar Gwir e Roazhon pa emezelas ouzh SBB hag e 1933, pa voe e vignon bras Remon ar Porzh (Delaporte\*) oc'h ober war-dro *Breiz Atao*, e voe anvet da sekretour ar gelaouenn betek 1937. Daremprediñ a reas ivez Kelc'h Keltiek Roazhon hag e voe an teñzorer anezhañ e 1935.

E-kerzh an eil brezel-bed e voe galvet da soudard ha, moarvat, kaset da brizoniad da Vro-Alamagn rak e miz Mezheven 1940 e chomas ur pennadig e Berlin evit ober war-dro *Strollad dieubidigezh* ar brizonidi vrezhon gant Delalande\* ha Kervella\*. Adkemeret en doa e labour, hag enseller kretadur ar c'hevredad *L'Union* e oa e dibenn 1940 pa voe anvet da enseller-meur Strollad Broadel Breizh gant R. ar Porzh a oa o paouez kemer penn ar strollad war-lerc'h disparti O. Mordrel\*. Kemer perzh a reas e buhez S.B.B. betek fin ar brezel. E miz Gwengolo 1946 e kavas furoc'h mont da glask repu da gCorgaigh (Bro-Iwerzhon) e-lec'h ma'z adkavas ar Porzh adarre. Mat a reas rak e miz Meurzh 1947 e voe kondaonet da 10 vloaz galeoù dre zesfailh. Ober a reas neuze mil micher evit bevañ : marc'hadour avaloù-douar ha madigoù, liorzhour, kelenner war ar galleg e Saint-Clonleth, hag all. Er bloavezh 1954 e tistroas a youl vat da Vro-C'hall evit bezañ barnet hag e voe didamallet krenn e miz Gwengolo. D'ar mare-se ivez e kejas e Pariz gant e rener kozh en *Union* a ginnigas dezhañ ren burev ar c'hevredad e Nairobi (Kenya). Goude e zimeziñ en Iwerzhon gant Ethel Winifred Gilbride, e miz Genver 1955, e kemeras adarre hent an harlu evit mont da vevañ e Nairobi gant e wreg.

E deroù ar bloavezhioù '70 e tistroas d'ar C'hastell-Nevez evit bevañ war e leve hag e varvas e ospital Karaez en e 90 vloaz.

**Kenlab.:**

BRAT *D'an daou istrogell, Eujen Delahaye ha Stefan Nicol* 217/1935/1

HEUB *Evit ar wech kenta* 62/1941/1 ☒ *Nann, aotrou Maurras !* 113/1942/1

**Dave.:**

LLMM 312/1999/101; Yann Fouéré, *La maison du Connemara*, 1995, p. 50-51, 112, 116-117 ; Olier Mordrel, *Breiz Atao*, 1973, p. 202, 270, 379, 424; Alain Deniel, *Le mouvement breton*, 1976, p.315; Hervé Le Boterff, *La Bretagne dans la guerre*, 1969, levr kentañ p.143, 1971 trede levr p.672, 683.

**LE GOURRIEREC, Pol***Paol ar Gourriereg**Paol ar Floc'h*(Klegereg 15-01-1921/Puylaroque (82)  
19/07/1995)

Kannadour ha saver kelaouenn. Mab e oa da Jozeb ar Gourriereg, archer, ha da Vari-Loeiza ar Floc'h, skolaerez.

Tommañ a reas ouzh an Emsav e-pad ar brezel ha 22 vloaz e oa pa dapas arnodenn an *Trec'h Kentañ*, e Roazhon, e miz Mezheven 1943.

Kelenner e Lise Roazhon, aotreet war al Lizhiri ha testeniet war studioù uhel an Istor e oa pa reas anaoudegezh gant Ronan Huon. Hemañ a oa er mare-se studier er Skol-veur (dibenn 1944). E miz Genver 1945, pa oa gwasket da vat an Emsav gant ar Stad c'hall, e teuas a-benn an daou baotr yaouank da lakaat moullañ dre guzh, e prefeti Roazhon, niverenn gentañ ur gelaouennig skrivet ganto. Ar gelaouenn-se, *Tir Na N-og* hec'h anv, a zlee dont da vezañ diwezhatoc'h ar gelc'hgelaouenn sevenadurel *Al Liamm-Tír na nÓg*.

Kuitaat Breizh a reas e 1946 pa voe degemeret en E.N.A (Skol Vroadel ar Melestradur) a oa o paouez digeriñ. Kaset e voe da gannad, goude-se, e meur a lec'h evel Shanghai, Hong-Kong, Pariz (renerezh Broioù Azia), Roma, Rabat, Sofia hag all. Kaset e kefridi eo bet ivez ken e Baghdad, ken e Praha pe Warszawa (Polonia). Bet ivez anvet da vinistr leunc'halloudek, karget eus traoù Norzhafrika e Maodierniezh ar Broioù estren.

Daoust da se e oa chomet stag kalon P. ar Gourriereg ouzh Breizh. En Arradon e teuas da chom, er bloavezh 1981, evit bevañ war e leve. Edo e Gwienna (Okitania), en abeg da yec'hed e wreg, Mari Baola ar Gwenn, pa varvas trumm. 71 vloaz e oa-eñ.

**Kenlab.:**

ARVO *Bro Wened ha krouidigezh Vreizh* 153/1943/4 ☒ *Astennidigezh Vreizh gant Nevenoe* 161/1944/4 ha 162/1944/4.

TNOG *Douar ar yaouankiz* 1/1945/3 ☒ *Galv* 1/1946/golo.

**Dave.:**

LLMM 292/1995/378

**LE HELLOCO, Hervé Armand Marie**  
*Herve Armañs Mari an Haelogoù**Roperzh Kadig, Kadwallon, Haelog, Bob.*(Pondivi 07-09-1908/Torquay (Devon,  
Breizh-Veur) 23-10-1993)

Stourmer breton, mab da Armañs Fransez an Haelogoù ha da Eliza Vari Fagot. Graet gantañ e studioù uhel e Pariz hag eno e tapas e aotreegezhioù war al Lizhiri hag ar Gwir a-benn dont da vezañ breutaer. Edo war e studi e Pariz, e 1930, pa voe engouestlet gant Neven Henaff\* er strollad kuzh Gwenn ha Du. En abeg da se ne lakaas gwech ebet e anv e SBB pe en ur strollad politikel all. Mont a reas ivez e-barzh ar C'huzul Meur, ur poellgor kuzh ivez, savet war an amboaz kenurzhiañ un tammig oberoù luskadoù a bep seurt an Emsav.

D'ar 7 hag 8 a viz Eost 1939 e kemeras perzh, gant e vag, an "dundee" *Gwalarn*, e dilestradeg an armoù hag an dafaroù bruderezh, o tont eus Bro-Bologn ha karget moarvat war aodoù Bro-Saoz, e Beg-ar-Fri, war aod Lokireg (Bro-Dreger). Paket e voe gant ar polis, pevar ezel all ar c'homando gantañ, ha toullbac'het en Naoned a-raok bezañ didamallet pemp miz diwezhatoc'h dre ziouer a brouennoù.

An Haelogoù, testeniet war ar yezhoù keltiek, a oa barrek-tre war ar brezhoneg hag e krouas, e miz Meurzh 1941, e-pad ar brezel, ur gelc'hgelaouenn, *Galv* hec'h anv, ha ne oa nemet stumm brezhonek ar gelc'hgelaouenn *Stur*, renet gant O. Mordrel. Mont a reas *Galv* da get e diskaramzer 1942, gant hec'h unneket niverenn.

En em guzhat a reas an Haelogoù e Pariz war-lerc'h dilestradeg an Amerikaned hag e teuas a-benn da repuiñ e Bro-Gembre. Barnet d'ar marv dre zesfailh e voe d'ar 25 a viz Mezheven 1946 hag e holl vadoù, a oa bras-meurbet, skrapet gant ar Stad c'hall. Dimeziñ a reas e Londrez gant Jermena Yezekel, d'an 19-09-1955 ha bevañ a reas ganti e Bro-Saoz e-lec'h ma kavas ur garg a

gelenner en ur Skolaj hag e-lec'h ma voe, e-pad bloavezhioù, Sekretour ar C'hendalc'h Keltiek Etrevroadel. Mervel a reas e Torquay (Devon) d'e 85 bloaz.

**Kenlab.:**

Rakskrid brezhonek *Mon combat pour l'Irlande*, ul levr savet gant Dan Breen dindan an anv *My fight for Irish freedom* ha troet e galleg gant an Haelogoù. Ti-moul. Kreiz-Kêr Roazhon, h.b., p.7-9/330.

STUR *Ar c'hoari baz-dotu* 9/1937/47 ☒ *Lug* 11/1937/12.

GALV *Galv* 1/1941/2 ☒ *Al levrioù* 10-11/1942/222.

LLMM *Boc'hig* 263/1990/339 ☒ *Serr-noz* 281/1993/389.

**Dave.:**

PPLB1 6/1948/7, LLMM 281/1993/452, BREM 147/1993/17.

H. Le Boterff, *La Bretagne dans la guerre*, I/74; O.Mordrel, *Breiz Atao*, p.163, 164, 224, 229 hag all.

**LE HIR, René, Arsène, Louis**

***Reun, Arsen, Loëiz an Hir***

*R. an H.; Ar Rodelleg; Y.Kerdranon.*

(Brest 16-07-1920/Brest 5-11-1999)

Ganet e voe Reun an Hir e Brest en un tiegezh kenwerzherien eus Landerne. Yaouank e oa pa grogas da zaremprediñ an Emsav breizhek. Kenlabourat a reas, a-raok hag e-pad ar brezel, gant SAV, kelaouenn vrezhonegerien Bariz, hag ez emezelas ouzh SBB. Eus al luskad taer e voe, hep mar ebet, met ne gemeras ket perzh er stourm dre armoù. An dra-se ne viras ket outañ da vezañ barnet garv e dibenn ar brezel (1944) ha da dremen meur a vloavezh en toull-bac'h.

Pa voe dieubet ez eas da labourat en Afrika evel ijinour war an treuzdougerezh. Kuzulier ar gouarnamantoù afrikan war aozidigezh o rouedadoù hent-douar ha hent-houarn e voe e-pad un ugent vloaz bennak. Distroet da Europa, e 1968, e voe anvet da rener ar morlinennoù etre Calais ha Breizh-Veur evit ar c'hevredad *Sealink*.

Aet war e leve e teuas en-dro da Vreizh da vevañ e Plougastell-Daoulaz. Diouzhtu e stagas en-dro gant al labour evit ar brezhoneg. Labourat a reas sioul ha didrouz met gant an efedusted vrasañ. Difazier e voe evit Skol Ober, skoazeller gant Diwan evit kenaozañ termenadur kentelioù an danvezioù skiantel ha gant An Here evit sevel ar geriadur kentañ hollvrezhonek. Gantañ e voe embannet, e 1990, ur pezh labour enklask diwar-benn ar c'hevherezh e Breizh, abaoe ar prantad galianroman, dindan an titl *Dre hent pe hent* (Priz Roparz Hemon 1990). Kaset da benn e voe gantañ ivez, a-raok e varv, ur geriadur brezhoneg-galleg evit an istor, an douaroniezh, an armez. Al labour-se, savet evit ar skolioù brezhonek, a zo bet embannet gant Hor Yezh.

Reun an Hir a varvas en ospital Brest hag a voe douaret e Plougastell war-lerc'h obidoù hep tamm brezhoneg ebet.

**Levr.:**

*Dre hent pe hent*, Mouladurioù Hor Yezh, 1990, 236 p., 21x14,5, sk.

*Geriadur an Douaroniezh, an Istor hag an Armerzh*, Hor Yezh, 2002

**Kenlab.:**

SAV *Ar Bleun-Brug* » 4/1936/30 ☒ *Ar c'harr-tan a vremañ* 23/1942/83

LLMM *Peseurt diskoulm da gudenn ar Baletiniz* 267-68/1991/305

BREM *An droukkelaouiñ war Groatia* 126/1992/14

**Dave.:**

BREM 219/1999; BRIN 151/1999/2 ha 5; PPLB2 432/1999/28; LLMM 317/1999/84; STEN 14/2000/17.

**LE LOUARN, Alain**

***Alan al Louarn***

(Tregourez 05-05-1918/Roazhon 15-05-1993)

Stourmer breton. Mab da Yann Erwan al Louarn, skolaer dindan ar Stad, ha da Vari Anna Barbeoc'h.

Mont a reas da skol e gomun, e-lec'h ma oa bet anvet e dad da rener ha, goude-se, da

Lise Kemper. Ne oa nemet 16 vloaz pa lakaas e anv e SBB (1934). Diouzhtu e krogas da ober bruderezh evit ar strollad-se e-touez e gendiskibien en desped da c'hourdrouzoù e rener. Daoust da se e teuas kaout e vachelouriezh e 1937. Divizout a reas mont da skolaer evel e dad. Anavezet e oa, avat, e vennozhioù "dispac'hus" gant pennoù an Akademiezh ha kaset e voe ar mestr-skol da gelenn pell diouzh ar vro... e-kichen Nancy.

Tost a-walch ez eas Louarn ouzh paotred ar *Gadervenn*. E deroù miz Eost 1939 e oa e bourzh ar *Gwalarn*, "dundee" Herve an Haelogoù\*, e-touez ar re a zilestras kasedadoù armoù war aod Lokireg. C'hwitañ a reas an abadenn. Tost goude e voe dastumet pevar den ar vagad gant ar polis, Alan al Louarn en o-zouez.

Divac'het e voe goude beza tremenet c'hwec'h miz en toull ha kavet mat da vezañ kaset war an dachenn-vrezel. Ne badas ket pell an emgannoù evitañ. Bet tapet prizoniad hepdale ha kaset da Vro-Alamagn. Un nebeud amzer goude-se, e dibenn ar bloavezh 1940, e voe lezet da vont gant an Alamaned ha degaset da Vreizh gant Bretoned all. Distroet d'ar vro ez adkemerias e labour evit SBB hag eñ an hini eo, da skouer, a renas ur skol-hañv aozet e maner an Higolenneg, e Berrien, er bloavezh 1942.

War-lerc'h donedigezh an Amerikaned, e voe harzet ur wech all, d'ar 16 a viz Here 1944, evel brasniver an emsaverien, kaset da gentañ da gamp Margueritte Roazhon ha, goude-se, bac'het e Maez gloagen e Kemper. E dibenn miz Gouere 1945 e voe lezet da vont goude bezañ bet barnet d'an dizellid broadel ha difennet outañ chom e Breizh.

Mont a reas neuze da bPeirigús (Okitania) e-lec'h ma oa ar chaloni Meveleg aluzener ar Vretoned divroet er vro-se. Un tammig diwezhatoc'h e kavas repu e ti Pêr Galbrun hag e bried Ivona Laorañs\* e Pariz. Goude e zimeziñ gant Noela Olier, c'hoar ar skrivagner Youenn Olier, e 1947, e chomas an daou bried nevez e Pariz o vevañ e-pad un nebeud bloavezhioù, amañ hag ahont, e

ti mignon pe vignon, rak diaes-tre e oa kavout ul lojeiz bennak er gêr-benn c'hall er mare-se ha, dreist-holl, evit tud trabaset diehan gant ar polis. Dont a reas a-benn ar familh Louarn, koulskoude, da gavout un tiig dister-tre e Yerres (91330), er bloavezh 1953, e-lec'h ma vevjont, e-pad nav bloaz, gant o bugale niverus. Ur gudenn all, diaes-tre da ziskoulmañ, a oa kavout al labour ret da vagañ an tiegezh. Ur gudenn seul diaesoc'h a se ma veze mesket alies gant Alan al Louarn al labour ma oa gopret evitañ hag ar bruderezh evit Breizh. Bet skolaer un pennadig amzer hepken e Skol gristen Montfort-l'Amaury (78490) rak, buan, e voe difennet outañ, gant barnerien c'hall, da gelenn. Bet implijet ur prantad e ti Hachette, e ti Massey-Harris... a-raok bezañ sekretour an Ao. Eliaz Gautier, rener parrez Vreizh e Pariz.

Distreiñ a reas da vat d'ar vro, gant e familh, war-dro 1962-63, en un ti kozh prestet dezho e Roazhon gant ar gontez Rohan-Chabot\*. Eno e reas adarre meur a labour bihan evel gward liorzhoù-kêr pe gward Bered an Hanternoz... A-benn ar fin e voe roet dezhañ, gant ti-kêr Roazhon, karg ar c'hCRIB (*Kreizenn Roazhonat Kelaouerezh Breizhat*).

E-pad tregont vloaz, betek e varv, e chomas Louarn e Roazhon o labourat bemdez evit ar vro. Gwelet e oa e pep lec'h, en holl gendalc'hioù, gouelioù, kounlidoù... o skignañ paperoù-bruderezh pe o tougen ar banniel broadel.

War-lerc'h ur c'hleñved hir o faezhañ anezhañ tamm-ha-tamm e varvas Alan al Louarn, skouer ar stourmer breton, o tilezañ aezamant, arc'hant, meur a dra blijus evit gouestlañ e vuhez d'e uhelvennad. Heuliet e voe e arched, e Roazhon, gant un engroez a vignoned ha stourmerien. Douaret eo e Gwaien, bro e bried.

#### **Kenlab.:**

BRET Skrivet en dije bet al Louarn un nebeud pennadoù er gelaouenn-se embannet dindan ar c'hensinadur "Lan hag Herve".

ARVO Ul lizher troet diwar ar galleg 159/1944/1 ha, dreist-holl *Ar vrehonegerien a-vihanik hag ar vrehonegerien nevez*

160/1944/1 ☒ *Distro va eontr Frañsez Kergoz diouzh ar brezel* 170/1944/3.

HOBR Bet e-touez ar re a zornskrivas ar follenn *Hor Bro*, kaset e-kuzh d'ar stourmerien, adalek an niverenn gentañ (05-09-1945) betek an niverenn 17 (miz Mae 1946) da nebeutañ.

LLMM *Daou levr da lenn ha da skignañ* 5/1947/54 ☒ *Diwar fallaenn e sav gwellaenn; penaos e voe krouet ha diazezet Ober* 213/1982/214.

TROB *Daou vloaz* 48/1953/1 ☒ *Studi ha dudiamant* 136/1956/1

YAOU *Ar Rusianed en Hungaria* 4/1959/4

KRZH Embann a reas ar bajenn sizhuniek *Keleier Roazhon hag ar Reter* adalek an niverenn gentañ (Nedeleg 1962) betek an niverenn 52 da nebeutañ.

HOTI *Hon Tiegezh*, kannadig ar gevredigezh *Emglev an Tiegezhioù*, a voe embannet war veur a gelaouenn evel *Wanig ha Wenig, Barr-Heol...* adalek war-dro ar bloavezh 1969 (?) betek miz Meurzh 1975 (niv.16) da nebeutañ.

BAHE *Keleier Emglev an Tiegezhioù* 73/1972/24.

BYZH *Lakomp kement greunenn da dalvezout* (lizher) 147/1982/ 75.

**Dave.:**

AMGZ 290/1994/23; BREM 141/1993/8; AVBR 376/1993/11; GHAD 99/1993/4; CBEM 91/1993/13; LLMM 278-79/1993/281 ha 283/1994/134.

**LE MELINER, Jean Gildas**

*Yann-Weltaz ar Meliner*

*Guennañeg*

(Langidig 03-10-1917/Gwened 16-05-1994)

Mab da Loeiz ar Meliner ha da Vari-Jozeb Nikol; pried Tereza Vari Evanou. D'e 19 vloaz e savas milin Vaodri, a zeuas da vezañ diwezhatoc'h al labouradeg *Magadur* a aoze boued-loened gwerzhet e Breizh ha pelloc'h... Klask a reas evel-se adsevel arboellerezh Breizh evit lakaat hemañ da gevezañ gant ar broioù all evel Danmark pe an Izelvroioù. Reiñ a reas labour ha goudor, er bloavezhioù '60, da emsaverien niverus,

izili ar MOB, evel Yann bPoupinod, o doa kuitaet rannvro Bariz evit dont d'ar vro endro e-sell da stourm eviti.

War-lerc'h diaezamantoù arc'hant, er bloavezh 1965, e voe rediet da zilezel *Magadur* evit sevel, hep digaloniñ, ul labouradeg listri-mor en Drinded ha, war un dro, un dachenn-gampiñ — Er Veiteri Vraz — war vaezioù Karnag.

Krouiñ a reas c'hoazh *Kevredigezh Bro-Ereg*, er bloavezh 1981, gant tud all evel Herri Maho, Job Jaffre\*, Alfoñs Samson hag all, da reiñ lañs da vrezhoneg Bro-Wened.

**Kenlab.:**

DOER *Brehoneg Guened ?...Perak ?* 3/1981/12 ☒ *Piu om ni pe istor er Vretoned* 19/1985/9.

**Dave.:**

DOER 52/1994/3; LLMM 284-85/1994/303.

**LE MOAL, Gabriel**

*Gab ar Moal*

(Plonevez-Porzhe 18-10-1914/Naoned 24-11-1994)

Emsaver. Ober a reas e studioù e Skol-veur gatolik Angers. Goude-se ez eas da Naoned da zerc'hel ul levr di, straed ar Yalc'hti (La Bourse). Dimeziñ a reas e Skaer, d'an 09-09-1942, gant Janedig Kergoad.

Mignon bras e oa da Remon ar Porzh\* hag, eveltañ, e voe lakaet e strollad-ren ar *Bleuñ-Brug* ha, war un dro, da verour kelaouenn ar gevredigezh-se, e-kerzh gouelioù ar Sent, e Kastell-Paol, e miz east 1950. Mirout a reas ar c'hargoù-se betek ar 25 a viz Gwengolo 1966. An deiz-se e voe lakaet da brezidant an amiral Maks Douget gant Gab ar Moal da eilprezidant.

Bet c'hoazh prezidant lezvarn-kenwerzh Naoned hag, e dibenn e vuhez, e reas war-dro strollad skoazell Diwan e Bro-Naoned.

**Kenlab.:**

WDAP *Ar Vrezoned e Pariz* 1/1938/27

BLBR *Emgleo Breiz hag ar reizskrivadur* 90/1956/14 ☒ *Korn ar merour*

100/1957/11.

**Dave.:**

LLMM 287/1994/533 – BRUN  
180/1994/80.

**LE SCAN, Émile**

*Emil (Milig) ar Skañv*

*Glenmor, Masko, Koskerou, Barzh ar Roc'h*  
(Mêl-Karaez 25-06-1931/Kemperle 18-06-1996)

Kaner, barzh, prederour, stourmer... bet eo bet GLENMOR unan eus hor c'hanerien vrudetañ ken e Breizh ken e Bro-C'hall hag ar broioù all. Mab e oa da Jozeb ar Skañv ha da Jermen Koutelleg, labourerien-douar. Ganet e voe er Vouilhenn e Mêl-Karaez met tremen a reas e vugaleaj e kêriadenn Sant-Tieneg e-lec'h m'o doa prenet e dud un atant. De bemp bloaz ez eas da skol e gumun e-lec'h ma oa implijet stank ar *simbol* e-keñver ar vugale a rae gant ar brezhoneg. An dra-se a lezas don e roud e spered ar paotr bihan, brezhoneg hepken gantañ betek neuze. E miz Here 1941 e voe kaset d'ar C'hloerdi bihan e Kintin. Eno e studias al latin, ar gresianeg hag, evel-just, an doueoniezh. Eno e voe kelennet ar brezhoneg dezhañ ivez a-drugarez d'ur beleg, Yann Varzhin hag e krogas da sevel gwerzioù evel *Kan ar bugel* skrivet d'e drizek vloaz. Kuitaat a reas ar c'hloerdi e 1948, goude bezañ tapet e vachelouriezh, evit mont da Bariz bloaz goude d'ober e amzer-soudard evel danvez ofisour er Mont-Valérien. Echu e goñje ez eas da di an Tadoù Gwenn en Henbont. Ar re-se a gasas anezhañ da Roazhon da genderc'hel gant e studi hag aozañ un aotreegezh war ar brederouriezh a voegounezet gantañ e Pariz (1952).

Goude-se e prederias kalz diwar-benn e amzer da zont, "mont da veleg pe get?" hag, evit gwelout sklaeroc'h en e soñjoù, e kemeras e sac'h hag e kuitaas trumm Breizh hag e diegezh da foetañ bro (1953). Beajiñ a reas en Italia, e Sikilia, Gres, Turkia, Yougoslavia, Rusia hag all... o lojañ e kambr ar stered alies hag oc'h ober mil micher da c'hounit e damm boued ha paeañ

e frejoù-beaj. Distro da Vreizh, er bloavezh 1955, e chome kristen bepred met, war un dro e oa deuet da vezañ un enepkloer touet. Mont a reas neuze da Bariz da labourat ha da ganañ. Kavout a reas labour e ti un embregour breton, Yann Jakez ar Gwarnig, hag e krogas da ganañ amañ hag ahont en holl ostalerioù Montparnasse. Met skuizh-tre e oa dre forzh bale hep debriñ hag, a-benn ar fin, e voe taget gant an droug-skevent (1957). Tremen a reas neuze a ospital da ospital a-raok mont da di-yac'haat Saint-Hilaire-du-Touvet (1958). Ur wech pare, bloaz goude, e roas e abadenn gentañ, straed Roazhon e Pariz, ar banniel gwenn-ha-du a-dreñv dezhañ, eilet gant an delennourez Denise Mégevand. Ne oa ket c'hoazh, en amzer-se, ar c'hanaouennoù broadel kanet gant ar barzh evit plijout da holl Vretoned Pariz. Ne oa ket gwall bell ar brezel c'hoazh ha kalz e-touez hor c'henvroiz a oa feuket gant lod kanaouennoù evel *Les Nations* da skouer.

Ne oa ket an dra-se evit lakaat GLENMOR da gemmañ un dra bennak ha kenderc'hel a reas, disaouzan, war e roudenn. E brezhoneg hag e galleg ez eas da ganañ a davarn da davarn evel an *Échelle de Jacob*, ar *Moineau*, ar *C'heltik club*, ar *Grisy*...E 1961 ez eas da Velgia da vevañ, e Brussel, hag eno eo e reas anaoudegezh gant e wreg da zont Katell Duveillez. Eurediñ a reas e Bro-Gernev en hevelep bloavezh. Kanañ a reas neuze e Breizh, war an aod evel *La Taverne* e Ploumanac'h pe er *Grignol* e Lokireg. Er bloavezh 1965 e roas un abadenn vras e sal ar Mutualité e Pariz dirak 500 den. Erru e oa ar berzh ha, war un dro, e bladenn gentañ 33 zro.

Ne oa ket a-walc'h an holl-se evit GLENMOR. E miz Genver 1970 e teuas er-maez niverenn gentañ ur gazetenn nevez, *La Nation Bretonne* hec'h anv. Skoazellet e oa ar rener, Milig ar Skañv, gant kelaouennerien a vicher evel Zavier Grall, Alan Guel (Yves Jouanard) hag ar skeudennaouer Coupé. Ne voe ket hir buhez ar gelaouenn-se; ar bemzekvet niverenn hag an hini ziwezhañ a zeuas er-maez e miz

Meurzh 1971. Re ziaes e oa ober div vicher war un dro.

E miz Mezheven 1990, e-kerzh Gouel broadel ar brezhoneg, e Karaez, e lavaras kenavo d'ar c'han dirak miliadoù a dud entanet gant *Kan bale an A.R.B.* Tri miz diwezhatoc'h, d'an 29 a viz Gwengolo, en Alre, e voe roet dezhañ "Kolier an Erminig" dre anaoudegezh ha grad-vat evit ur vuhez-pad gouestlet d'ar stourm evit Breizh. Mervel a reas Glenmor c'hwec'h vloaz war-lerc'h. Douaret e voe e bered Mël-Karaez dirak un engroez a 4000 den.

Un ugent pladenn bennak a voe savet gantañ hag ivez un dek levr bennak, levrioù barzhonegoù evit ar muiañ. Chom a ra ar barzh brudet arouez pobl Vreizh na fell ket dezhi plegañ dirak ar Galloud estren.

**Kan. :**

*O Keltia, Koumoulenn an Hañv, Viviana, War hent Kêr Dundee, Klemm Breizh-Izel, Kan-bale Nevenoe, Kan-bale lu poblek Breizh, O Langoned, Pa vin marv* (ar sonerezh hepken), *An tousegi, Hiraezh, Groñvel, Gouel Sant Yann, E dibenn miz Gwengolo, Serr-noz*

**Kenlab.:**

LLMM *Piv 51/1955/7* ☒ *Pedenn ar serr-noz 117/1966/249* ha *Kan-bale an ARB 298/1996/315* (dalif)

BLBR *Truez ouz ar paour ! 68/1954/17*

NATB2 *Jakezig ar Breizad 1/1970/1* ☒ *Beajou meur 12/1970/2*

LANV *Kan-bale lu poblek Breizh 63/1992/23* ☒ *Kanaouennoù brezhonek Glenmor 80/1996/15* (dalif) ha *Truez ouz ar paour 81/1997/34* (dalif)

TRZH *Kan-bale Nevenoe 5/1963/16.*

SKRD Pennadoù

**Dave.:**

Grall *Glenmor* Seguers, Pariz, 1972, 186p.; A.G. Hamon *La Voix du clan: Glenmor*, 1990; EMGN 118/1995/16, 127/1996/20 ha 128-29/1996/8; PPLB2 391-92/1996/16; OUF 24-06-1996; AVBR 407/1996/5; EABG 75/1977/1 ha 77/1977/3; LANV 78/1996/2 ha 79/1996/2; LABO 4/1959/27

**- M -**

**MARQUER, François, Yves, Joseph, Marie**

*Frañsez, Even, Jozeb, Mari Marker*

(*Even*) *Erlannig*

(Kistreberzh 15-11-1913/Kistreberzh 31-03-1997)

Istorour bet ganet e Kerbrad e parrez Kistreberzh. Mab e oa da Edmont Visant Marker ha da Filomena ar Brun. Ober a reas e studi e Skolaj sant Salver Redon e-lec'h ma voe kelenner war an Istor adalek 1942 betek e retred. Mont a reas da zrouiz ar C'hoursez e 1951 hag ERLANNIG e voe graet anezhañ. Dindan al lesanv-se eo e savas lies levr ha skrid. Degemeret e voe da zoktor war al Lizhiri hag an Istor ha Priz Akademiezh Vreizh 1966 a yeas gantañ evit e dezenn e galleg, savet diwar-benn ar jeneral chouant *Sol de Grisolles*, moulet e 1966 ha 1968. Studiañ a reas ar yezh met ne skrivas ket kalz en hor yezh hag e galleg e teuas er-maez e dezenn lennegezh keltiek diwar-benn *Un artiste et un écrivain de la langue bretonne, Pierre Noury recteur de Bignan* (Sant-Brieg, 1978, 312 p.). Studiadennoù all e galleg a voe moulet ivez war ar gelc'hgelaouenn *Imbourc'h* dre aked e geneil eus Kistreberzh, ar skrivagner Youenn Olier. Da skouer, *Cantiques bretons* (277/1993/137 p.) pe *Les insurrections de 1791 à 1793 dans le Morbihan*, savet gantañ ha gant skoazell Bleiguen (e dad Edmont) hag ar Falc'her (294/1994/VIII-198 p.)

**Kenlab.:**

TBDB : *Un nozvez Nedeleg e Kistreberz 23-24-25/1952/1*

IMBO : *Koun Verkingetoriks e Roma 120/1979/563* ☒ *Diwar-benn anvioù-lec'h etre Liger ha Gwinum 229/1989/47*

**Dave.:**

*Annuaire des 10000 Bretons*, p.656; Gohier, *Dictionnaire des écrivains d'aujourd'hui en Bretagne*, p.216. ; LLMM 302-03/1997/327.



**MÉVELLEC, François Pierre Marie*****Frañsez Pêr Mari Meveleg****Fañch Kerne, Alain de Cornouaille, E oan eno*

(Kore 22-02-1901/20-01-1995)

Beleg ha skrivagner ganet en un tiegezh labourerien-douar. Ne oa nemet nav bloaz pa voe kaset da Gloerdi bihan Pontekroaz. Mont a reas goude-se da Gloerdi bras Kemper hag un tammig ouzhpenn 22 vloaz e oa hepken pa voe beleget, ar pezh a zo yaouank-tre.

Kaset e voe da Volenez da gure-skolaer hag eno e chomas daou vloaz oc'h ober anaoudegezh gant buhez an dud a vor. Goude bezañ tremenet dre Sant-Pabu ez eas da gure e Penharz-Kemper (1926). Eno e reas war-dro ar re yaouank dre grouiñ kelc'hioù studi evito, rakskeudenn ar pezh a vezo diwezhatoc'h YKAM (*Yaouankiz Kristen ar Maezioù*). Er bloavezh 1930 e kemeras perzh e Kendalc'h bras ar Sakramant e Kartago e-touez miliadoù a dud yaouank all eus ar bed holl. War-lerc'h-se e savas e levr gentañ e galleg *Éternelle Carthage* (Kartago divarvel). E 1932 ez eas, da gure atav, da Blonevez-ar-Faou e-lec'h ma prenas ur marc'h evit mont da welout e barrezianiz.

Abaoe 1921 e rae Ofis Landerne war-dro ar gouerien vretan a guitae Breizh evit mont da glask fred e Bro-Okitania, tro-dro da Limòtges, Tula pe Peirigús. Kaset e voe Fañch Meveleg du-hont da aluzener ar Vretoned harluet e 1934; ur garg a zeree peurvrat outañ. Degemeret mat e voe gant e genvroiz rak mont a rae d'o gwelout a di da di, da reiñ kalon dezho o komz brezhoneg ganto. O skoazellañ a reas da sevel frammoù war an tachennoù kevredadel ha micherel evit gwerzhañ mat o c'henderc'hadoù dre hanterouriezh ar sindikadoù labourerien-douar. Evito c'hoazh e savas pardonioù breizhek ha kelaouennoù evel *Breiz Nevez* ha, goude ar brezel, *Ar Vretoned dre ar bed*, deut da vezañ *La Plus grande Bretagne*, a zeuas er-

maez etre 1946 ha 1954 (45 niverenn). E testeni eus al labour vat graet gantañ e voe anvet da chaloni a enor eskopti Peirigús e 1953.

Kuitaat a reas bro bPeirigòrd e 1959 goude bezañ tremenet 25 bloaz eno. E-pad ar mare-se e tastumas F.Meveleg danvez a-walc'h da sevel un dezenn doktorelezh war al Lizhiri difennet gantañ er bloavezh 1966 er Sorbonne, he zitl *Étude de psychologie sociale sur le complexe d'émigration chez les Bretons d'Aquitaine*.

War-lerc'h e zistro da Vreizh e voe anvet diouzhtu da chaloni adarre, met evit eskopti Kemper ha Leon en dro-mañ. War un dro e voe kaset da aluzener e Retred Kemperle e-lec'h ma chomas c'hwec'h vloaz, betek 1965. Mont a reas goude-se da aluzener chapel ar Salette, e Montroulez. Eno e chomas betek ma'z eas da vevañ da Blougonvelen er bloavezh 1976war e leve.

Er bloavezh 1960 e voe anvet ar chaloni Meveleg da aluzener-meur ar *Bleuñ-Brug* gant pemp eskob Breizh ha lakaet ganto e penn kelaouenn ar gevredigezh, *Bleuñ-Brug* hec'h anv ivez. Met horjellet e oa ar vreuriezh gant un tabut rummadoù a zegase kudennoù a bep seurt. Ouzhpenn-se ne oa ket an doare-skrivañ implijet gant ar *Bleuñ-Brug* — hini ar chaloni Falc'hun — evit plijout d'an holl. Daoust da se e talc'has penn ar chaloni Meveleg ouzh an holl ziaesterioù en ur vezañ war un dro rener, merour o klask koumananterien ha skrivagner ar gelaouenn. Ober a reas al labour-se betek 1984 pa gouezhas ar bluenn diouzh e zorn. 83 bloaz e oa. Mervel a reas unnek vloaz diwezhatoc'h en ospital Lokournan-Leon ha douaret e voe e bered Kore, e barrez c'henidik.

Skrivañ a reas F. Meveleg un nebeud levrioù gallek dindan anvioù-pluenn hag en o zouez romantoù evel *Penhoad, De la ferme au manoir...* E oberenn dalvoudusañ a chom koulskoude an hini o tennañ d'al labour-douar, *Le Combat du paysan breton à travers les siècles* ha *Le Combat du paysan breton à son apogée* moulllet e 1974.

**Kenlab.:**

FHAB *Dindan banniel ar vro, martolod 'vin warc'hoaz* 8/1925/315 ☒ *Sant Fransez Asiz* 12/1926/447

TBDB *Kontadenn eus al Limouzin* 130/1956/1

BLBR Renner ar gelaouenn adalek 1960 betek dibenn 1984. *Bleuñ-Brug* 1956 91/1956/5 ☒ *Kantig Anna, mam Samuel ar profed* 238/1984/18

BRUN *Eun depign resiz euz buhez eun atant* 109/1987/56

**Kantik.:**

*Kantik da Zantez Anna* (1948)

Kantikoù all evel *Kan ar hanennou* pe barzhonegoù evel *Skoed Sant Padrig* a zo bet embannet war *Bleuñ-Brug* pe manet diembann.

**Dave.:**

BRUN 182/1995/3 ha 183/1995/3; TBDB 24-01-52; BREZ 110/1966/7; PRCO 28-01-1995; LLMM 288/1995/67

- P -

**PERSON, Urbain Marie**

*Urban Vari Person*

(Lannarvili 02-02-1906 /Angers (49000) 10-02-1994)

Tad misioner. Ober a reas e studioù kentañ e Skolaj Lesneven a-raok mont da Gloerdi bras Kemper. Ne chomas ket pell eno hag ez eas buan da Skol-Nevezidi an Tadoù Kabusin e Naoned. Goude-se e studias ar yezhoù estren e Bro-Saoz (Oxford) hag e Bro-Holland (Breust) kent bezañ beleget d'an 28-03-1932.

Kaset e voe da visioniñ da Vro-Indez da gentañ e-lec'h ma chomas pemzek vloaz (1933-1948) ha, goude-se, da Vro-Etiopia (1951). D'an 28 a viz Eost 1955 e voe anvet da vikel abostolek Harar (Etiopia) hag un tammig diwezhatoc'h e voe fiziet ennañ eskopti kozh Cyme (Eolia, Azia Vihanañ). Misioniñ a reas tost da dregont vloaz er broioù pell-se poblet gant kristenien disrannet abaoe pell diouzh Roma. Ur mailh

e oa deut da vezañ an tad Person, evel-just, war yezhoù Indez hag an etiopeg.

Erru kozh ha skuizh anezhañ e roas e zilez e 1982 met fellout a reas dezhañ chom c'hoazh un nebeud bloavezhioù e Nazareth (Etiopia) — betek 1992 — a-raok distreiñ da di-retred ar Gabusined e Angers, e-lec'h ma varvas d'e 88 vloaz.

**Kenlab. :**

VUHZ *Eun deiz pardon e bro an Indianed* 5/1935/1107 ☒ *E lochennig eur misioner koz* 21/1941/350.

BZIG *Skol katekiz* 46/1938/1.

**Dave.:**

VUHZ 70/1932/454; BEAV 1955, fol 21; dielloù Landevenneg.

**PINAULT, Georges François Charles**

*Jord Frañsez Charlez Pennaod*

*Goulven pe Goulc'hen Pennaod, Bivomagos, drouiz Kadvan, Teudar Buan, Barth Teudar Dawas, Henri Josse, Katumanos, Armel Kernuz, M. Le Cointre, Setrepos, Subretos, Snoc Xua Trom, Sucellos, Fañch Trimer* ha, marteze, *G. Tourneur, Kerrien* hag all.

(Sant-Maloù 05-03-1928/Paris (75005) 29-11-2000)

Yezhoniour anavezet gant an anv GOULVEN PENNAOD. Mab e oa da Jord Pinault eus Sant-Jakez-al-Lann ha da Garlota Josse, eus Roazhon, o-daou kenwerzhourien e Sant-Maloù. Ober a reas e studioù e Skolaj Sant-Maloù hag e Lise Roazhon. Ne oa ket c'hoazh 15 vloaz (1943) pa emzelas ouzh ar JEN (Yaouankizoù Europa Nevez), ur strollad renet gant Jacques Schweitzer hag o kenlabourat gant an Alamaned. Abalamour da se e voe bac'het e Jakez Karter Roazhon ha kondaonet d'an dizellid broadel evit pemp bloaz (1945).

Dieubet buan e voe en abeg d'e oad yaouank ha mont da reas da Bariz da labourat evel komis en un ti-bank. E *Kêr-Vreizh*, ti ar Vretoned e kêr-benn Frañs, e teskas brezhoneg ha kembraeg. Met ne blijje ket kalz e labour dezhañ hag a-benn daou vloaz e treuzas ar mor evit mont da Vro-

Gembre da vevañ hag eno e reas tammoù micherioù a bep seurt: paotr-saout, marc'hadour kelaouennoù, simiad hag all. Eno ivez e kejas, war hon eus klevet, gant paotred an I.R.A. ha kavout a reas gwelloc'h distreiñ da Vro-C'hall d'ober e goñje. E 1951, e dibenn e amzer, e tivizas chom da soudard a vicher. En em gannañ a reas da gentañ en Indez-Sina hag harzlammet e voe harzlammet war e c'houlen e Diên-Biên-Phu (Viêt-nam), d'ar 4 a viz Mae, tri miz war-lerc'h e zimeziñ gant Frañseza Maillard e Sant-Servan (12-02-1954), ha tri deiz hepken a-raok daskoridigezh al lu gall. Prizoniet e voe gant soudarded ar Viêt-minh ha gwallgaset garv ganto e-pad ur bloavezh, ar pezh a startaas e vennozhioù enepkomunour. Pa voe dieubet e vrezekleas c'hoazh e Maroko (1955), Oubangui-Chari (1958), Kongo, Kameroun met nac'hañ a reas mont da vrezeliñ en Aljeria (1960). Donezonet-tre e oa war ar yezhoù ha testeniet war ar saozneg hag ar rusianeg (M.P.C.) e oa pa guitaas an arme e 1962 gant an derez a gabiten.

Mont a reas neuze da chom e Courbevoie, e-kichen Pariz, ha diouzhtu e krouas, gant Mikael Jousseume, div gelaouennig liesskrivet, *Ar Stourmer* hag *Ar Hilhog gall, kelaouenn huehmiz ar strollad « Bro-Hall atao »*, mennozhioù flemmus hag amsentidik enno. War un dro e tarempredas Skol ar Studioù Uhel ha Kevrenn ar Skiantoù o studiañ mesk-ha-mesk ar yezhoù keltiek, europek ha yezhoù kozh a bep seurt, evel an ombrieg pa ar sanskrideg betek dont da vezañ ul lizheregour eus ar re vrudetañ o kenskrivañ gant kelenourien ouziek evel Colbert de Beaulieu pe Léon Fleuriot\*. Barzh e Goursez Kernev-veur (Teudar Dawas) ha drouiz e Goursez Breizh (Kadvan) e oa dija pa grouas, gant Olier Mordrel\*, e deroù ar bloavezhioù 1970, ur strollad o vodañ dalc'hidi un drouiziezh nevez. Morse ne guzhas Pennaod e vennozhioù faskour ha broadelsokialour ha, gant ar blijadur vrasañ, e taremprede e Pariz tud eus an tu dehou pellañ evel Tixier-Vignancourt pe Jean-Marie Le Pen.

Sevel a reas levrioù da studiañ ar yezhoù keltiek hag ivez kalz a bennadoù a lizheregouriezh hag a yezhonouriezh, ken e galleg ken e brezhoneg, evit un niver bras a gelaouennoù skiantel evel *Ogam, Hor Yezh, Preder* h.a. Kenlabourat a reas ivez gant kelaouennoù all a-zehou evel *Tir Nevez* renet gant O. Mordrel\*, *La Bretagne Réelle, Europe-Action, An Nerzh* pe *Etudes Indo-Européennes* (1992-95) hag all. E 1986 e sinas, war un dro gant Paul Marie Duval, ar *Recueil des Inscriptions gauloises* (Teskad an enskrivadurioù galian), ul levr diwar-benn deziadur Coligny. Tri bloaz goude, en e 61 bloaz, e lakaas e anv e Skol-veur Lyon II war an amboaz da vezañ doktor gant un dezenn e galleg, renet gant Jean Haudry, diwar-benn "Labourioù a yezhouriezh ha lizheregouriezh kozh ha predenek".

Marc'heg ar Strollad a enor e oa hag ar groaz a vrezel T.O.E. en doa ivez e oa pa varvas debret gant ur c'hrign-bev en ospital-arme ar Val-de-Grâce e Pariz. Skignet e voe e relegoù e donvor Sant-Malou.

#### Levr.:

*Yezhadur berr ar c'herneveg*, Hor Yezh, 1961;

*Yezhadur nevez ar c'hembraeg*, Hor Yezh, 1964;

*Dornlevr krennvrezhoneg* PRED.59-61/1964/146 p.; eil emb. azveret Preder 1979, 176 p.

*Ar c'hembraeg hep poan* (gant \*P. Loazel) PRED.134-137 /1970/ 128 ha 128 p.

*Splet an henvrezhoneg evit ar yezh arnevez*, Emb. Preder, 1977.

#### Skridoù adembannet ha skoueriekaet

*Levr al Labourer* Joakim Gwilhom, Preder, 151 p.

*Novelou ancien ha devot*, Preder,

#### Kenlab.

LLMM *Kenluskadenn* 12-13/1949/12 ☒ *Pennad d-b. "Etudes syntaxiques bretonnes" gant R. ar Glev.* 316/1999/77

TRIB *Pedenn* 16/1958/9 ☒ *Noz Nedeleg* 58/1969/2

PRED *Ur gudenn a vannouriezh* 5/1959/38 p. ☒ *Lavar 04* 138/1970/62 p.

STMR *Kentel Aljezaïr* 1/1962/9 ☒ *Al liesgerioù* 15-16/1964/129

HILG *Ad maiorem tousegorum gloriam* 2/1962/3

VROG *E koun Abeozen* 20/1963/43

HYZH *Rez, reizh, hag o c'hendam-heñvelson* 30/1963/3 ☒ *Notennoù war an niveriñ* 213/1998/51

TIRN *Diskleriadenn ar pennskrivour* 2/1967

KAKV *Hor c'hannad* 3/1964/1 ☒ *Azgenel a ray an heol* 60-61/1986/2

TEOD *Ar yezh hag ar rannyezhoù trim.* Kentañ/1967/5 ☒ *Breizh war werzh ?* 1/1975/2

OGAM

BPAR

NRZH 3 (Subritos)

CELTIA

Y FANER

KAD

Lizheroù ha notennoù labour e-barzh ar rummad *Lavar* embannet gant Preder.

**Dave.:**

R. Caerleon, *La Révolution bretonne permanente*, Paris, 1969, p 42-48; Méar & Merrien, *Dictionnaire de Bretagne*, 1992; Gohier, *Dictionnaire des écrivains d'aujourd'hui en Bretagne*, 1984; *Annuaire des 10 000 Bretons*, 1971; Saint-Loup, *Les Nostalgiques*; Le Progrès de Lyon, 09-05-1990, pajenn gentañ.

**PRAUD LECLERC de LA MONNERIE, Roger, Francis, Théophile, Eugène Roje Praud**

(Le Mans 04-031915/Le Mans 01-09-1997) *Erwan P.A. ar Pabig, R. Pradig, Kloareg Kerlean, Kloareg Keltia, Roc'h Vras, Gwennaël Kervarc'hallac'h.*

Kenlabourer da gelaouennoù brezhonek. Mab e oa da Frañsez Mari Praud ha da Ujania Viktoria Leclerc. N'ouzomp ket perak e stagas de La Monnerie ouzh anv e vamm.

Ober a reas e studi e Skolaj ar Groaz Santel, e Le Mans (72000) e-lec'h ma voe diwezhatoc'h kelenner war ar germaneg. Mont a reas da veajiñ dre Alamagn hag Italia e-kerzh an hañv 1934, e-pad e

vakañsoù, evit gwelout penaos e veve an dud dindan renadur ar faskourien. Danevellañ a reas an droiad-se, bloaz goude, er gelaouenn sizhuniek *Breiz* rak ur brezhoneger eus ar c'hentañ e oa daoust dezhañ bezañ bet ganet e Bro-C'hall.

Ober a reas e goñje evel martolod e 1936 hag o verdeiñ e oa nepell diouzh aodoù Bro-Spagn pa voe bombezet e lestr gant kirri-nij spagnol pe alaman. E-kerzh e servij e kejas gant Ernest ar Barzhig\* e Cherbourg hag e lakaas anezhañ da anavezout *Gwalarn* hag ivez da skrivañ reizh hor yezh a veze dija komzet mat gant ar Roc'had evel-just.

Tommañ a reas ouzh an Emsav hag ouzh ar mennozhioù broadel e 1937 o kemer perzh e labourioù *Kevredigez Broadel Breiz* hag ar *C'hoursez* ha diskibl barzh e voe graet anezhañ dindan an anv Kloareg Keltia.

Engalvet da vartolod e voe adarre e 1939 met disoudardet bloaz goude abalamour d'an ehan-brezel. Dimeziñ a reas neuze, d'an 12-09-1940, e Le Mans (72000), gant Jenovefa Negret.

N'ouzomp ket re ar pezh a reas e-pad dalc'herezh Breizh gant an Alamaned met, diouzhtu goude dibenn ar brezel, e kenlabouras gant meur a gelaouenn vrezhonek evel *Tir Na n'Og, Al Liamm, Avel an Trec'h* hag all, hag e voe, e 1947, e-touez krouerien *Unvaniezh Difennourien ar Brezhoneg*, gant Sicard hag Olier, ha kentañ kadoriad anezhi.

Ne voe ket klevet ken e anv goude-se. Kemer a reas e retred e 1979 hag e vevas war e leve e Le Mans betek e varv.

**Levr.:**

*Nerto* gant Frédéric Mistral, troet diwar ar provañseg, Hor Yezh, 1987, 146 p.

**Kenlab.**

BREI *A-hed henchou an Europ* 404-418/1935/1 ☒ *Envorioù martolod* 580/1938/2.

SAV *Ar gador tabutal* 23/1942/53 ☒ *id.* 27/1943/51.

FHAB *Strivadennou* 7-8/1943/323 ☒ *Envorennoù eun den a vor* 3-4/1944/37.

TNOG *War ar menez* 1/1946/29 ☒ *Diwar ul lizher eus Bro-Iwerzhon* 2/1946/24.

LLMM *Pasion Bro-Iwerzhon* 3/1946/1 *En eñvor da Ernest ar Barzhig* 191/1978/446.

PLGB *Ar c'hourrac'h bag vroadel Bro - Iwerzhon* 15-04-1946.

ATRE *Yen-Bay* 4/1947/5.

IMBO *Meven Mordiern : kenskriverez gant R. Pradig, 1944-46* 302/1995/XIV-248 p.

**Dave.:**

LLMM 308-09/1998/352. Sellout ivez ouzh e skridoù moulet war BREI.

## - R -

**RIOU, Corentin**

*Kaourantin Riou*

*B.Y.G.; K.R.; Cpye* (fazi evit Cpyr)

(Pornaleg 04-12-1913/Saint-Feliz-de-Villadeix (24510) 09-08-1995)

Skrivagner bet ganet er Rest, e Pornaleg. E dud a oa labourerien-douar.

Yaouank-tre e voe kaset da skol Sant-Gabriel Pont-'n-Abad. Goude e desteni ez eas da skol Saint-Laurent-sur-Sèvres (Vande), renet gant Frered Sant Gabriel, en amboaz da vont da vestr-skol. Echu e studioù gantañ e voe anvet da skolaer e skol sant Alan Skaer er bloavezh 1934. Mont a reas goude-se, lerc'h-ouzh-lerc'h, e Kerien, Ploneour-Lanwern, Plonevez-Porzhe, Ploeneg ha Landudeg. Re a labour vat evit ar brezhoneg a rae e Bro-Gernev moarvat rak, e 1952, e voe kaset da ober skol e Baod, e Bro-Wened. Buan-ha-buan e teskas gwenedeg hag, abred, e voe gouest adarre da gelenn hor yezh. Meur a skrid brav, savet gant e skolidi, a chom c'hoazh war e lerc'h.

Ne c'helle ket padout an traoù evel-se hag er bloavezh 1966 en doa ranket kuitaat Breizh-Izel da vat evit mont da skol labour-douar Briacé e parrez Lannerell (44430), e bro ar muskadig. Eno e kelennas *skiant ar vro*, aleze ar winouriezh, e-lec'h brezhoneg, betek 1980.

War e leve, d'e 67 vloaz, en em gavas en ur skol labour-douar all, hini Bois-Tillac e parrez Pentelloù (44640), war aber al Liger, a-raok kuitaat Breizh, e 1988, da vont da Saint-Félic-de Villadeix (24510) e-lec'h ma varvas pell diouzh ar vro.

Abred-tre e krogas K.Riou da skrivañ barzhonegoù, studiadennoù, kontadennoù e brezhoneg. Moulet int bet war veur a gelaouenn evel *Arvor*, *Al Liamm*, *Bleuñ-Brug* ha, dreist-holl, *Brud Nevez*.

Kenlabourat a reas kalz ivez gant e genvreur Visant Seite\* war dachenn kelennadurezh ar brezhoneg.

**Levr.:**

*Ar Mabinogion displeget e brezhoneg evit ar vugale*. Emb. Al Liamm, Ar Baol, 1954, 15p., skeud.

*Furnez Breiz* (divyezhek); Emb. Jos Le Doare, 1976.

*Reol ar Frered a S.Gabriel*. 1986.

*Mintin ha noz*. (ofisoù), Emb. Emgleo Breiz, 1988, 295p.

*Heñchou ar brezel*, Emb. Emgleo Breiz, Brest, 1994, 144p, skeud. gant L. Gwerin.

*Heñchou du*, Emb. Emgleo Breiz, Brest, 1995, 168 p.

*Distro ar Zent*, p.59-74, in *Danevellou euz an Amzer-Vremañ*, Brud Nevez, 1980, 118p.

*Henchou glaz*, Emb. Emgleo Breiz, Brest, 1997, 224p. (dalif).

**Kenlab.:**

ARVO *Eur banne 50 lur* 29/1941/4 ☒ *Fest ar broc'h* 120/1943/4 hag ivez *Istor berr an avaloù-douar e Breizh* troet diwar galleg \*Goulven Mazeas 78/1942/2 ☒ 110/1943/4.

LLMM *Krenn-lavarioù* 11/1948/39 ☒ *Ar Mabinogion* 39/1953/46.

KROB *Hon oberou mat hag an Itron Varia* 1/1948/9 ☒ *Kornig ar vugale* 33/1951/22.

SBRL *Da Gernev veur* 19/1950/4.

SLBR *Santez Anna hag ar vugale* 33/1951/23 ☒ *Ar muskadig* 190/1972/23.

BRUN *Lagad-Bran* 9/1977/7 ☒ *Iwerzton 1845* 187/1995/12.

Pennadoù all war *Echo de St-Gabriel*.

**Dave.:**

BLBR 207/1976/11 ha 83/1955/7; BRUN 187/1995/3; LLMM 34/1952/56 ha 292/1995/379; *Danevelloù euz an amzer-vremañ* p115.

**ROLLAND, Guy Jean Désiré**

*Gwion Yann Dezire Rolant*

*Jakez Ugen*

(Brest 02-08-1924/Berlin 03-06-1996)

Tad jezuist. Mab e oa da Charlez Amede Rolant, ofiser an droadourien-vor hag a voe lazhet en Afrika dek vloaz goude ganedigezh e baotr bihan, ha da Aogustina Vari Gwalc'h, skolaerez. Breur e oa ivez da Alan\*, an Tad Pol a Leon. Ober a reas lodenn vrasañ e studi e Kelenndi I.-V. Wir-Sikour, e Brest, renet gant ar Jezusted. Edo e Mâcon, e-lec'h ma oa repuget gant e vamm hag e c'hoar e-pad ar brezel, pa zivizas mont da nevezriad e ti ar Jezusted e Laval (53000). Naontek vloaz e oa (1943). Kelenn a reas germaneg e Skolaj ar Groaz Santel er Mañs (72000) a-raok mont da studiañ ar brederouriezh e Vals-près-Le Puy (43000) hag an doueoniezh e Lyon-Fourvière (69000) e-lec'h ma voe beleget e 1954.

Chom a reas ur bloavezh en Alamagn (Münster, Berlin) a-raok bezañ kaset da labourat ur pennad amzer gant ar "Misionoù Breizhek" en abeg d'e anaoudegezh vat eus ar brezhoneg. E-keit-se eo e kenlabouras gant *Al Liamm*. Ne chomas ket pell e Breizh koulskoude ha, prestik, ec'h adkavas Berlin. Ober a reas ur staj en "Offene Tür" (an nor digor) a-raok bezañ avet da aluzener an armeoù. Diwar neuze e voe kaset ha digaset: Baden-Baden, Berlin, Skol-Vor Lañveog-Poulmig... Ober a reas div wech tro ar bed war *La Jeanne* gant ar "midships". Goude-se Berlin, Buhl-Baden ha Berlin adarre evit ar wech diwezhañ. Eno e varvas a-daol-trumm, pell diouzh ar vro, diwar ur waskadenn-galon, d'e 72 vloaz.

**Levr.:**

*An tri borc'hell ruz*, emb. Al Liamm, 1963.

**Kenlab.:**

LLMM *Bagadoù-difenn Israhel* (gant e vreur Pol) 44/1954/59 ☒ *Doñjer* 45/1954/5

**Dave.:**

*Compagnie*, kannadig Kompagnunezh Jezuz, C'hwevrer 1997.

- S -

**SAINT GAL DE PONS, Madeleine**

*Madalen Saint Gal de Pons*

*Benead, Nolwen, Pons Recouvrance*

(Niort (79000) 14-09-1907/Landreger 22-04-1994)

Barzhez. Merc'h e oa da Anton Saint Gal de Pons, ofiser marc'hegour anavezet evit bezañ savet ul levr gallek diwar-benn orin ar marc'h breton, ha da Vari de la Chaslerie. Chom a reas, e-pad he bugaleaj, e Pondivi, Sant-Brieg, Guéret (23000), Gwengamp... hervez kefredioù he zad. Edo e Sant-Brieg, e 1925, pa dapas ar vachelouriezh, ar pezh a oa dibaot-tre c'hoazh evit ar merc'hed.

E-pad meur a vloavezh e voe sekretourez an Ao. de Kerouartz, kannad Gwengamp ha, war un dro, sekretourez ur strollad kannaded eus an hevelep kostezenn bolitikel, gant ur burev e Sant-Brieg. E-kreiz ar brezel eo, er bloavezh 1940, e kejas Madalen Saint Gal de Pons gant ar beleg Loeiz ar Floc'h\* (MAODEZ GLANNDOUR) a oa o paouez bezañ anvet da gure e Gwengamp. Tost goude e kroge gant studi ar brezhoneg hag, e 1942, e voe moulllet he barzhonegoù kentañ war *Gwalarn*. E dibenn ar bloavezh-se e oa savet ganti *Unvaniezh Speredel Breizh* evit bodañ ar gristenien vretan kar-o-yezh ha kar-o-bro. Evito e voe savet ivez, da-heul, ur c'hannadig bihan divyezhek, 12 bajenn ennañ, met ne voe nemet peder niverenn anezhañ (C'hwevrer 1943/Mae 1944).

Pa voe echu ar brezel ec'h eilas MAODEZ GLANNDOUR en e oberoù relijiel ha breizhek gant an efedusted vrasañ. Hi an hini eo a gemeras war he chouk melestradur ha moulladur *Kaieroù Kristen* (1945-49), *Ar*

*Bedenn evit ar Vro*, a zeuas er-maez e-pad ugent vloaz (1952-72) oc'h adkemer lec'h ha labour Unvaniezh Speredel Breizh, hep ankounac'haat ur *Studi hag Ober* nevez (1964-77) ha labourioù troidigezh ar Bibl, adalek 1942. Mont a reas da Louaneg da chom, e ti bras Keresperzh, er bloavezh 1956, pa voe anvet Loeiz ar Floc'h da berson er barrez-se. Eno e vevas e skeud ar beleg o skoazellañ anezhañ eus he gwellañ hag o kenlabourat gant meur a gelaouenn ha, dreist-holl, gant *Barr-Heol*, renet gant Marsel Klerg\*, person Bulien.

N'ankounac'hae ket Madalen Saint Gal de Pons e oa-hi un obladez eus urzh Sant Benead ha treiñ a reas e brezhoneg reolenn menec'h an urzh-se. Un tammig diwezhatoc'h e roas da embann, dindan an talbenn *Gwiadenn ar vuhez*, un teskad eus he barzhonegoù hag a zo ur seurt pedenn etrezi ha Doue.

Mervel a reas en ospital Landreger eizh vloaz goude Loeiz ar Floc'h. 87 vloaz e oa.

**Levr.:**

*Sant Benead, reolenn ar venec'h* (gant Maodez Glanndour) Emb. Studi hag Ober, liesskrivet, 1974, 75p.

*Gwiadenn ar vuhez*. Emb. al Liamm, Brest, 1979, 36p.

**Kenlab.:**

GWAL *Barzhonegoù* 154-55/1942/575 ☒  
*Ur skrivagner iwerzhonat, lord Dunsany* 162/1944/92

ARVO *Chase an aotrou Galeri* 59/1942/4  
☒ *Ur C'helt, Yann Ogilvi* 144/1943/1

Kannadig USB *Katell de Francheville* 2/1943.

STOB *Teir barzhoneg* 21/1944/4.

AVEL *Diwar-benn ur brogarour* 6-7/1946/6

LLMM *Ar merc'hed e lennegezh Vreizh* (diechu) 7/1948/4 ☒ *Nedeleg* 191/1978/403, (dalif) *Frouesha* 284-85/1994/196.

SKED *Fronn an avel – Gwerelaouen* 4/1948/139

KKRS *Ur sant breizhat nevez* 5-6/1948/35  
☒ *Tri c'hant vloaz 'zo* 7-8/1949/56

BLBR *Roit anoiou brezonek d'ho kezeg* 51/1952/15 ☒ *Eur stourmer all* 68/1954/7

BEAV *O furchal en istor relijiel hor bro* 9/1955/25 <> 11/1956/32 ☒ *Jord Kadoudal* 22/1971/93

BAHE *Dalc'h soñj* 24/1960/23 ☒  
*Brec'hiad plouz, bozad greun* 41/1964/6

HYZH *Notennoù da geñver diskouezadeg Robien* 89-90-91/1973

**Dave.:**

LLMM 284-85/1994/202, 207 ha 286/1994/353.

**SEITÉ, Vincent**

*Visant Seite*

*Abvaodez, Filhor Sant-Erwan, Turzunell Breiz, Laouenanig Breiz, Breur Melar, Roh Trevezel, V.S., Breurig, Ar Skolaer, Yvonig, L.B.*, ha, marteze, *Breur Bihan*.

(Kleder 23-01-1908 /Josilin 08-12-1993)

Yezhoniour, skrivagner ha kelenner war ar brezhoneg. Mab e oa da Vaodez Seite ha da Frañseza Stefan, labourerien-douar, ha breur ar beleg Jozeb Seite\*.

Ganet eo bet Visant en Ogelloù, e parrez Kleder, hag eno ez eas d'ar skol gentañ betek e drizek vloaz. Chom a reas en atant goude-se betek e 17 vloaz da reiñ skoazell d'e dad. Adkregiñ a reas neuze gant e studioù, e ti Frered Plouarzhel, e Skolaj I-V. Wir-Sikour hag e Skol-brederouriezh Jerzenez, e 1927. Bloaz goude, e miz Eost, e wiskas gwiskamant Frered an Deskaduresh kristen. Bet skolaer e Skol Sant-Jerman Pleiben (1928), e Skol Sant-Jozeb Landerne (1933) a-raok bezañ lakaet da ren Skol Santez-Barba Rosko er bloavezh 1937. Bet galvet da soudard e miz Eost 1939, paket e voe gant an Alamaned e Naoned, d'an 19 a viz Mae 1940, ha lakaet da ruzañ a gamp da gamp etre Naoned, Sant-Nazer ha Saveneg kent bezañ dieubet e miz Genver 1941.

Adkavout a reas neuze e skol e Rosko betek dibenn ar brezel. Er bloavezh 1947 e voe anvet da rener Skol Dreboull-Douarnenez hag eno e chomas betek 1952. Met gwelet e oa bet gant e superioed e garantez don evit hor bro hag hor yezh hag e c'hoant da ouestlañ e amzer dezho. Ken abred hag ar bloavezh 1941 e oa deuet er-maez an

hentenn *Me a zesk brezoneg*, 22,500 skouerenn anezhi peurwerzhed dindan tri bloaz. Prestik goude, e 1944, e voe savet gantañ *Le breton par l'image* evit ar re vihanañ ha, pemp bloaz diwezhatoc'h *Yez hon tadou*. E 1952 e teuas da vezañ skolaer-baleer karget da gelenn danvez Breizh: yezh, kan, istor, douaroniezh... da vugale skolioù kristen ar peder rannvro vrezhonek. Diouzhtu goude bezañ graet e annez e Kastellin e savas kenstrivadegoù etreskol war al lenn, ar c'han, an dezrevell, an helavarded... e brezhoneg evel-just. Adalek 1948 e voe anvet da Bennsekretour ar "Bleuñ-Brug" ha mirout a raio ar garg-se betek 1965. Prientiñ a reas neuze, bep bloaz, e framm ar gevredigezh-se, kendalc'hioù niverus, unan evit pep rannvro: Leon, Treger, Kernev ha Gwened hag unan all, brasoc'h ha bravoc'h, evit Breizh a-bezh, darempredet gant un engroez stank a dud: 70,000 den e Kastell-Paol e 1950; ouzhpenn 50,000 e Landivizio-Sant-Nouga e 1955 da lidañ hanter-kant vloaz ar *Bleuñ-Brug* savet e kastell Keryann er bloavezh 1905 gant Y-V.Perrot\*. War un dro e kenlabouras Seite gant *Feiz ha Breiz*, kelaouenn ar gevredigezh, adalek 1930 betek 1943 pa gouezhas e rener Y-V.Perrot, drouklazhet en abeg d'e feiz ha d'e garantezvro.

War-lerc'h ar brezel e talc'has da skrivañ, e doare ar chaloni Falc'hun\*, evit meur a gazetenn met, dreist-holl, evit *Kroaz Breiz* ha, goude-se, evit *Bleuñ-Brug*, div gelaouenn o doa kemeret lec'h *Feiz ha Breiz*. Reiñ a reas dezho da embann pennadoù niverus a bep seurt: barzhonegoù, kanaouennoù, danevelloù, kontadennoù hag ivez pennadoù-kañv diwar-benn skrivagnerien ha mignoned aet da anaon evel Batani\*, Geleog\*, Nedeleg\*, an tad Eujen (ar C'hev)\* ha kalz re all.

E bennoberenn a chom koulskoude e *Skol dre Lizer* savet e 1945 e Rosko ha renet gantañ betek e vloavezhioù diwezhañ. Kontañ a reas ar Skol-se betek ouzhpenn mil skoliad skignet dre Vreizh, Bro-C'hall hag ar bed-holl. Hentennoù a bep seurt da zeskiñ brezhoneg a savas Visant Seite gant

skoazell ar skinwel, ar skeudennoù pe ar bannoù treset... Adalek 1967 e reas skol vrezhonek er skingomz; div wech ar sizhun betek 1978 hag ur wech hepken goude-se. Kas a reas al labour ramzel-se e-unan-penn pe gant harp kelennerien all evel F.Ugen\*, Laorañs Stefan, Kaourantin Riou\*, Meriadeg Herrieu pe Soazig Paogamm. Skuizh-divi gant ur vuhez hir a labour ha skoet-garv gant marv e vreur Jozeb e oa Visant Seite, e 1990, pa zeuas da chom da Josilin, e ti-retred Frered Lamennais. Eno e varvas tri bloaz war-lerc'h, d'an oad a 85 bloaz.

#### Levr.:

*Sant Fransez a Asiz, mignon ar vugale*, Emb. Ar Vuhez Kristen, Rosko, moul. Kenwerzhel, Roazhon, 1941, 104p., skeudennaouet.

*Me a zesk brezoneg* (gant F. Ugen), Moul. Oberthür, Roazhon, 1941, in-8, 148p. skedennaouet; mou. all: emb. "O-lo-lê", Landerne, mou. Bro-Leon, 1942.

*Troiou-kaer Matilin an dall* (lakaet e brezoneg gant *Abvaodez*), emb."O-lo-lê", Landerne, mou. Bro-Leon, Landerne, 1942, 20p. skeudennaouet gant R. Thomen. *Kantikou kroaziadur ar Zakramant*. 1942, 8p.

*Va c'hatekiz bihan* (gant F.Gwivarc'h\* hag an tad Eujen\*), Moul. Tolra, Pariz, 1943, 40p., skeud.

*Va c'hatekiz krenn* (gant F. Gwivarc'h\* hag an tad Eujen\*), Moul. Tolra, Pariz, 1943, 112p., skeud.

*Va c'hatekiz braz* (diembann).

*Le breton par l'image*, emb. "O-lo-lê", Landerne, Moul. Bro-Leon, Landerne, 1944, in-8, 77p. skeud. gant Morris; eil mou. Emb. Emgleo Breiz, Presse libérale Penn-ar-Bed, Brest, 1962, 96p., skeud. gant J. Sevelleg; trede mou. Emb. Skol dre lizer-Emgleo Breiz, moullet gant "Brud Nevez", Brest, 1985, 96p., skeud. gant J-J. Sevelleg; mou. all evit ar gwenedeg (gant M. Herrieu), Emb. Emgleo Breiz, mou. Oberthür, Roazhon, 1965, 109p.

*Eñvoriou eur gakouzez*, Emb. Feiz ha Breiz, mou. ar C'hreiz-kêr, Kastell-Paol, h.b., 32p., skeud. gant Langleiz.



*Yez hon tadou* (gant L.Stefan), levr kentañ: Emb. Kelc'h Brekilien, Roazhon, ti-moul. kenwerzhel, Roazhon, 1949, in-16, XI-172p., skeud. gant P. Peron.

*Lexique breton-français et français-breton* (gant L.Stefan), Emb. Presse libérale Penn-ar-Bed, moul. Bro-Gernev, Kemper, 1956, 195p.; meur a voulladur all da c'houde; 20vet moul. adwelet ha kresket *Nouveau lexique breton-français et français-breton*, Moul. rannvroel, Banaleg, 1979, 392p.; 27vet moul., Moul. rannvroel, Banaleg, 1993, 480p.

*Deskom brezoneg* (gant L. Stefan), Emb. Emgleo Breiz, Brest, Presse libérale Penn-ar-Bed, Brest, 1957, 206p., keud. gant P. Peron; eil moul. 1962; trede moul. Moul. Bro-Gernev, Kemper, 1972.

*Koad Keo*, 1964, 16p.

*Alanig hag e droiou-kamm*, Emb. an tad Kastor, Flammarion, Pariz, 1964, 24b. skeud. gant Beuville.

*Le breton du Morbihan vannetais* (gant M.Herrieu), Emb. Herrieu, Presse de la Néogravure, Pariz, 1974, 114p.

*Ar brezoneg dre radio* (levr kentañ), Emb. Emgleo Breiz, Moul. Bro-Gernev, Kemper, 1975, 145p., skeud gant Joel ha Ronan-Jim Sevelleg; eil emb. Moul. rannvroel, Banaleg, 1979, 145p.; moul. all: Emb. Emgleo Breiz, 1995, (dalif).

*Ar brezoneg dre ar radio* (eil levr), Emb. Emgleo Breiz, Brest, Moul. Bro-Gernev, Kemper, 1975, 146p., skeud. gant R. ha J-J. Sevelleg.

*Ar brezoneg dre ar radio; brezoneg betek penn* (trede levr), Emb. Ar Skol dre Lizer, Kastellin, moul. Brud Nevez, Brest, 1984, 100p., skeud. gant J-J. Sevelleg.

*Le breton en bandes dessinées, pour débutants*. Moul. rannvroel, Banaleg, 1980, 71p., skeudennaouet gant J-J. Sevelleg, gant kasedig diviz.

*Va ferhirinaj en Douar-Zantel (30-05-1980/07-06-1980)*, Moul. I.C.A., Brest, h.b. (1981), 22p. (tennet diwar "Bleñ-Brug").

*Ar marh reiz, e Bro-Leon gwechall*, Embann. Emgleo Breiz, Brest, moullet gant "Brud Nevez", Brest, 1985, 344p., skeud. gant J-J. Sevelleg.

*Darvoudou brezel, va Horn-Bro: 1944*, Emb. Emgleo Breiz-Ar Skol-dre-lizer, Moul. Mesidou, Brest, 1987, 200p.

*O pourmen dre Vreiz-Izel* (daou levr), Emb. Emgleo Breiz, moul. Mesidou, Brest, 1998, 322 ha 326 p. (dalif)

*Brezoneg betek penn*, Emb. Emgleo Breiz, moul. Mesidou, Brest, 1999, 101 p. (dalif).

#### **Kenlab.:**

FHAB *Istor Breiz* 1/1933/24 ☒ *Gwerz war maro an ao. Perrot* 1-2/1944/21

FHBV *Ar breur hag ar c'hoar* 35/1936/3 ☒ *Bizig ha Rouzig* 61/1938/4

CDF (gant *Lann Urvan*) *Ar c'holonel Armand* 16-01-1937 ☒ 03-04-1937

VUHZ *Santez Anna ha Nikolazig* 6/1939/115 ☒ *E tal ar poull* 5/1944/135

ARVO *Va lamm kenta er brezel* 39/1941/4 ☒ *Ar barz hag ar c'houer*, hervez E.Souvestr 67/1942/4 <> 72/1942/4.

LOLOL *Kan-Bale O-lo-lê* 102/1943/2 ☒ *Sac'h biniou Cheun hag ar pemoc'h-gouez* 103/1943/2

AVEL *Kelc'h lizer d'ar Vretoned* 3/1945/5

KROB *Kelc'h lizer d'ar Vretoned* 1/1946/32

KSFR *En hor buhez lakaat Doue* 3/1946/32

KKRS *Skol dre lizer Roskov* 4/1947/33

FBRO *Ar brezoneg er skol* 10/1948/8 ☒ *Kanvou* (F.Vallée) 15/1949/11

KROB *A-dreuz Breiz-Izel* 10/1949/13 ☒ *An tan e Kelern* 31-32/1950/10

BLBR *Gwir istor Fañch Ar Su* 33/1951/18 ☒ *Feiz ha Breiz* 239 40/1985/26

TBDB *Labour ar Bleñ-Brug* 96/1955/4 ☒ *Sant Gwenole* 137/1956/6

BRUD *Tristidigez* 2/1957/7 ☒ *Merien* 3/1958

PRCO Er bloavezhioù '60 e vez kavet ur pennad bep an amzer evel *Ar jeneral ar Flo* 789/1961/4 pe *Freuz ha reuz* 1039/1966/8

AVBR *Kenstrivadegou ha skol vrezoneg* 55/1962/6

BREZ *Oh, oh, va Bro !* 97/1965/6 ☒ *Justis* 130/1968/16

BRUN *Istor ar Skol dre lizer* 6/1977/9 ☒ *Va hentig-kleuz ha Me garfe ganez...* 170/1993/3; (dalif) *Erh ha Reo* 173/1994/6

TELE *Deskom brezoneg*. Ur pennad bep sizhun er bloavezhioù 1982-1985

CLAN *Eñvorennou eus va yaouankiz*  
34/1983/76

**Dave.:**

BREZ 16/1958/5; BRUN 171/1994/1-34;  
CLAN 78/1994/65; OUF 09-12-1993;  
DOER 52/1994/4.

**SOUFFEZ-DESPRÈS, Yves Hervé****Raymond**

*Youenn Herve Remont SOUFFEZ-  
DESPRÈS*

*Youenn*

(Roazhon 04-01-1922/Gwipavaz 12-01-  
1998)

Emsaver. Goude bezañ bet war e studi e Skol-Veur Roazhon ez eas da Skol Vrezel Saint-Cyr evit dont da vezañ ofiser, goude bezañ bet er Rezistañs e-pad ar brezel hag eñ yaouankik-flamm c'hoazh. Servijout a reas dreist-holl e Bro-Viêt-nam hag e Bro-Alamagn. Dimeziñ a reas d'ar 14 a viz ebrel 1951 gant Klaodina Quillard a roas seizh bugel dezhañ.

Penn bataillon troadegezh e oa pa guitaas an arme war-dro ar bloavezh 1960. Dont a reas neuze da chom gant e diegezh da Sant-Brieg e-lec'h ma voe kelenner war an Istor hag ar brezhoneg, ur yezh desket gantañ. Anvet e voe goude-se da gelenner e Lise Kerichen Brest. Ur broadelour eus ar gwellañ a voe Youenn Souffez-Després, a-dra-sur, met un den a feiz gredus war un dro. Setu perak e voe, e Roazhon, e-touez krouerien *Emglev an Tiegezhioù*, ur gevredigezh o startaat liammoù etre ar familhoù katolik, hag ivez, e Brest, e-touez saverien *Oaled Sant Erwan*, ur greizenn sevenadurel e-lec'h ma veze graet bodadegoù, prezegennoù ha kentelioù brezhonek.

Skoet e voe, e 1994, gant un hanterseizi ha bevañ a reas e vloavezhioù diwezhañ en ur gador-ruilh. Marc'heg a enor urzh S. Yann Jeruzalem, marc'heg ar Strollad a enor e oa hag ar groaz a vrezel en doa pa varvas d'e 76 vloaz.

**Kenlab.**

BLBR *Ur weladenn da barrez Tay-Hai*  
95/1956/10 ☒ *Maro it. Konan*  
196/1973/34

KRZH Pennadoù 'zo

BAHE *Ar Vretoned e kañv e Kanada hag e Breizh* 76/1973/55

IMBO *Breudeur diheñchet* 81/1976/27 ☒  
*Ur sizhunvezh e Roma* 120/1979/557 hag  
ivez *Lizhiri* en niv. 74.

LLMM *Lizher da rener Al Liamm*  
195/1979/310.

**Dave.:**

*Annuaire des 10 000 Bretons*, p.732;  
LLMM 306/1998/81; IMBO 340/1998;  
KAIM 20/2001/4.

**- T -****TERS, François Mathieu*****Frañsez Mazhev Ters***

*Stivellig an Dour Don, Saik an Teuz, Fañch*  
(Brest 02-02-1909/Saint-Cloud (92310) 28-  
10-1993)

Kelenner ha keltiegour. Ober a reas e studioù e Lise Brest ha, goude-se, e Skol ar Studioù-Uhel e Pariz. Gounit a reas e aotreegezh war al Lizhiri klasel hag ur skrid-testeni war ar Studioù-uhel.

Er bloavezh 1932 e voe anvet da gelenner war al Lizhiri hag ar yezhadur e Lise Flers (61100). Kaset e voe da Lise Saint-Germain-en-Laye (78100) er bloavezhioù 1948-50 ha, war un dro, lakaet gant ar Greizenn Vroadel an Imbourc'hioù Skiantel (CNRS) da ren Ensavadur Imbourc'hioù war ar Gelennouriezh (INRP) e-lec'h ma chomas betek e retred e 1965.

Enklask a reas, e 1953, war aodoù Bro-Oueloù evit dastum an anvioù-lec'h. Disoc'h e imbourc'hioù a voe moulet bloaz war-lerc'h gant Servijoù Dourlec'hiadurel ar Verdeadurezh. Mont a reas gant ar C'hoursez ha drouiz e voe graet anezhañ, e 1950, dindan an anv STIVELLIG AN DOUR DON. Bet ezel eus ar Poellgor hag eiler an drouiz-meur Eostig Sarzhaw (Pêr Loisel\*) eus 1976 betek 1980. Daremprediñ a reas

ivez *Kêr Vreizh* e Pariz, er bloavezhioù 1953-54 dreist-holl, ha meur a gentel hag a brezegenn a reas eno, evel da skouer: *Anvioù-lec'h Bro-Oueloù, Ar Werzaouriezh vrezhonek pe Oberenn Tangi Malmanche* pa voe krouet eno "Skol-Veur ar Bobl". Kelenn a reas ivez brezhoneg ken e Kêr-Vreizh ken e Versailles.

Anvet e voe da Varc'heg an Deskadurezh e 1960 hag ofiser un nebeud bloavezhioù diwezhatoc'h. Mervel a reas Frañsez Ters d'e 85 bloaz, ankounac'haet un tammig gant ar Vretoned.

**Levr.:**

*Toponymie nautique, côtes du Goelo*, Moul. Broadel, Pariz, 1954, 75p.

**Kenlab.:**

SKBB *Anvioù-lec'h Bro-Welo* 1/1954/7

TBDB *En enor d'ar brezhoneg: A-us d'an noz* 233/1958/1

ABKE *Penaos e vez graet keltezh* 26/1961/25.

**Dave.:**

TBDB 28/952/1; AVBR 35/1960/2; LLMM 281/1993/452; Le Monde 01-11-1993; *Annuaire des 10 000 Bretons*.

**TILLY, Jean Michel****Yann Vikael Tilli**

*Ar C'hog*

(Sant-Brieg 20-10-1930/Gwengamp 07-06-1992)

Emsaver. Mab da Loeiz Mari Tili ha da Anna-Vari Virginia ar Beskont. Goude bezañ bet kretaer e-pad un nebeud bloavezhioù ez eas Y-V. Tilli da labourat en embregerezh gounezvouederezh Gwioñvarc'h, e Plagad, ma teuas da vezañ ar rener anezhañ.

Tommañ a reas ouzh an Emsav e deroù ar bloavezhioù 1970. Dilennet e voe da brezidant Kelc'h Sevenadurel Roparz Hemon Gwengamp. Prestik goude e lakaas e anv war roll izili Strollad Ar Vro. Dorn a roas da Glaod Herri (Henry), e dibenn 1973, da sevel gant berzh ur gelaouenn *Evit ar brezhoneg*, graet evit deskiñ d'an dud lenn brezhoneg.

Er bloavezh 1982 e voe lakaet Tilli e penn ar strollad politikel POBL (Strollad evit Adsevel ur Vreizh Dieub) hag e chomas gant ar garg-se betek e varv. Meur a wech ez eas war ar renk er votadegoù met hep berzh. Re skuizhus e oa an holl draoù-se evit e yec'hed o vont war fallaat ha, daou viz hepken war-lerc'h mouezhiadegoù rannvro ha kanton 1992 ma oa war ar renk e varvas en un doare trumm en e di e Gwengamp.

**Kenlab.:**

LLMM *Touellerezh dañjerus* 179/1976/423

AVBR *Atantoù ar vro* 315/1987/5 ☒  
*Kokoriko!* 366/1992/3

BREM *An Emsav goude an dilennadegoù* 128/1992/5.

**Dave.:**

AVBR 367/1992/4; BREM 130-31/1992/22; CBEM 79/1992/18; LLMM 272/1992/247; OUF 09-06-1992; PPLB2 342/1992/11

**TRELLU, Daniel****Deniel Trelu**

*Raymond, Colonel Chevallier*

(Kemeneven 1919/?23/04/1998)

Stourmer komunour. Emezelañ a reas ouzh ar Yaouankizoù komunour e 1936. Edo e Skol an danvez mistri e Kemper, e 1939, pa voe galvet da soudard. E-pad dalc'hidigezh an Alamaned e stourmas gant an eneberezh en ur ingaliñ kelaouennoù kuzh, traktoù, o lakaat an tan e-barzh kirri an enebourien hag all. Eñ an hini eo a savas ar "strouezheg" kentañ e Breizh. Gant an anv Raymond ha, goude-se, ar C'horal Chevallier e voe lakaet e penn FTPF (Frank-emgannerien ha dalc'herien c'hall) evit departamant Penn-ar-Bed. Abalamour da se e voe, e-kerzh an hañv 1943, e-touez ar strollad bihan a aotreas drouklazh Yann-Vari Perrot\*.

Echu ar brezel e labouras da adsevel ar strollad komunour ma chomas feal dezhañ e vuhez-pad. Deniel Trelu a voe skolaer ha

kelenner war ar galleg a-raok mont da vevañ war e leve e Sant- Hern war ribl kanol Naoned-Brest. Eno e savas meur a varzhoneg, ken e galleg ken e brezhoneg, ar re-mañ a voe embannet gant *Brud Nevez*.

**Levr.:**

*Barzonegou*, BRUN 52/ 1976 , 139 p. (divyezhek)

*Geriou ha soniou*, Emb. Brud Nevez, Brest, 1997

**Kenlab.:**

FALZ2

**Dave.:**

BRUN 209/1998/3 ha 6; LLMM 308-09/1998/379; Gohier p.288; Th. Guidet *Qui a tué Yann-Vari Perrot*, 1986, p. 131.

**TRICOIRE, Jean Clément***Yann Klemañs Tricoire*

(Saint-Martin-des-Noyers (85140) 28-01-1921/Kastell-Briant 17-03-1994)

Doktor war ar vezegiezh ha yezhour. Ganet e voe e Bro-Vande, e-kichen La Roche-sur-Yon ha Chantonay, en un tiegezh n'en doa liamm ebet gant Breizh. Paket e vachelouriezh gantañ ez eas da Naoned da studiañ ar vezegiezh. Echu e studi ez eas da Gastell-Briant evel medisin war gleñvedoù ar skevent hag an alergologiezh. Ur mailh war e vicher a voe an Dr Tricoire aet gantañ ur priz digant an akademiezh vezegiezh, evit e labourioù e 1950.

A-holl-viskoazh e voe dedennet gant studi ar yezhoù estren. Setu perak, goude e zimeziñ gant Ivona Allenou, ur Vreizhadez eus Groñvel, e teskas brezhoneg evit bezañ barrek da gomz gant e vamm-gaer na ouie ket galleg (1948). Peurzeskiñ a reas hor yezh goude-se (1952) betek sevel un hentenn da zeskiñ brezhoneg, e stumm kaieroù gant pladennoù, adembannet meur a wech gant Emgleo Breiz adalek 1955. Asantiñ a reas bezañ lakaet e penn ar gevredigezh-se, e miz Du 1961, da heul an Dr. Dujardin\*.

Ar c'hargoù sevenadurel-se a zilezas tamm-ha-tamm adalek 1980, en abeg d'e yec'hed o vont war fallaat hag, e miz Du 1993, eo e verc'h a zeuas en e lec'h da Zinan da zegemer Kolier an Erminig a oa bet roet dezhañ gant Skol Uhel ar Vro. Mervel a reas c'hwec'h miz hepken goude an devezh-se.

**Levr.:**

*Komzom, lennom ha skrivom brezoneg* (lodenn gentañ), Ti-moul. Bodet, Roazhon, 1955, 48p. Skeudennaouet gant an oberour (gant ur bladenn)

*Komzom, lennom ha skrivom brezoneg* (lodenn gentañ), Embann. Emgleo Breiz, Brest, "Presse Liberale Penn-ar-Bed", Brest, 1955, 150p. Skeudennaouet gant J. Trotreau; moull. all: 1970, 1974, 1983, Brest, 151p.; Un eil moulladur gant arroudennoù hepken a zo bet embannet gant Emgleo Breiz, Brest, h.b., 48p.

*Komzom, lennom ha skrivom brezoneg* (eil lodenn), Emgleo Breiz, Brest, Brest, 1963, 230p., skeudennaouet gant J. Trotreau; Moul. all: 1989.

*Komzam, lennam ha skrivam brehoneg* (gant Brazideg ha Merser), Hentenn evit Bro-Wened-Uhel, emb. Skol vrehoneg ar merher, Brest, liesskrivet, h.b. (1979), 24p.

*Me a gomzo brezoneg*, ti-moul S.B.I., Brest, 1990, 152p.

*Brezoneg an tourist* (bruderezh), Emb. Emgleo Breiz, Brest, h.b.

**Kenlab.:**

BRUD *Paotred ha merhed yaouank* 1/1957/123 ☒ *Geriadur ha geriadur a zo* 7/1959/89

BLBR *Korn al liziri* 80/1955/14 ☒ *E Breiz hag e leh all* 143/1963/24

BREZ *Brezonegerien* 80/1964/8.

**Dave.:**

BREM 151/1994/2; LLMM 283/1994/170; BRUN 174/1994/3 ha 175/1994/15; OUF 22-03-1994.